

**Kreizenn Imbourc'h Sturyezhouriezh  
S.A.D.E.D**

**DAFAR 64**  
**evit ar Geriadur Broadel**

**PREDER**

Kaier 64-65

Here — Du 1964

**Kreizenn Imbourc'h Sturyezhouriezh  
S.A.D.E.D**

**DAFAR 64**  
**evit ar Geriadur Broadel**

**PREDER**

Kaier 64-65  
Here — Du 1964

## K E N T N O T E N N O U

Dibab an termenou

An termenou displeget e Dafar 64 zo tennet an darnvuiañ anezho eus ar c'hentelioù embannet gant SADED (1) e 1964, eleze eus an eil rummad dek kentel war ar Fizik, an eil rummad dek kentel war al Lennegezh, ar pemp kentel gentañ eus ar rummad Kimiezh, ar pemp kentel gentañ eus ar rummad Krennvrezhoneg.

Lakaet ez eus bet ouzhpenn termenou boaziet e ser labour ar Strollad hag ar Greizenn Imbourc'h, o tennañ d'ar Bredercuriezh (Anadenmoniezh, Bredoniezh, Poelloniezh), d'ar Sturyezhoariezh, d'ar Reizhennañ, d'an Diellaouñ, h.a.

Ar berradurioù

Nebeut a gemm zo a-fet berradurioù etre Dafar 64 ha Dafar 63. Astennet eo bet ar roll anezho gant anvioù kevrannoù studi nevez. Skoueriekaet eo bet an doare da arouezañ ar yezhoù (sk. Dafar 63 : Erh., Brk., Dafar 64 : hBr., krBr.). Heñvaldra, an arouez : b. (benel) zo bet erlec'hiet ouzh an arouez : gg. (gwregel).

An termenadurioù

Evit displegañ ster ar gerioù eo bet heuliet an hevelep hentenoù ha warlene. Eleze, d'an termenou nebeut arveret c'mazh ez eus bet roet un displegadur amstrizh, arglokaet dre skouerioù tennet eus ar skridoù ma voe graet ganto evit ar gwezhioù kentañ, ha dre notenoù da spisaat o stervaou.

(1) Strollad an Deskadurezh Eil Derezh. Pep diskleriadur digant ar C'hreizennerezh : SADED, St-Didier, 35-CHATEAUBOURG.

Ali d'al lennerion

Un dornadig lennerion, er-maez eus studierion SADED, a ziskouezas bezañ nec'het o vezañ na gavent ket "an droidigezh c'hallek" dirak termenoù Dafar 63. Lec'h a ve kentoc'h da vezañ nec'het o welout ez eus c'hoazh kefredourion vrezhon n'int ket deuet a-benn da zivoaziañ o spered diouzh an hentoù estren, n'int ket dieubet c'hoazh eus al loakrevezh o lak, bewezh ma kefont ouzh un diaester meizañ, da atersañ : "e galleg e vefe lavaret...?" Meur a varrad estrenvan a ziouganomp dezho gant Dafar 64, anez na vent nemet ar wezh-mañ da gavout enno ar pare d'o si.

Ali d'ar skrivagnerion

Un ali a gredomp reiñ d'ar skrivagnerion, d'ar skrivagnerion a lennegezh pergen. N'emañ ket e kefridi KIS-SADED mont en un dael lennegel, - gwell e ve ganti gouizieion o skrivañ brezhoneg eget lennegourion o kemer ar gerioù gouiziel. Hogen yezh ar brederouriezh, ar fizik, ar gimiezh zo graet evit ar brederourion, ar fizikourion, ar gimourion. Mar fell d'al lennegourion ober ganti ivez, ne c'hell den mont a-enep. Ar gwir o deus, gouez dezho, da bennaouiñ e-lec'h ma karont, en teodyezhoù koulz hag er yezhoù estren, ha n'eo ket ar Greizenn Imbourc'h a serro he dor outo. Gwir eo e ve diaes d'un den yaouank war e studi e 1965, hag eñ "lennegour kant dre gant", ober anv hep stonkañ, evel ma rae hor skrivagnerion glasel, eus "ur c'harrtan dek marc'h-nerzh", ha gouzañv pelloc'h kammvesk etre nerzh ( $MLT^{-2}$ ) ha galloudezh ( $ML^2T^{-3}$ ). Hogen end-eeun, neb a venn ober gant gerioù resis a rank dere'hel kont eus o resister ha studiañ pizh o ster. Marellañ ur skrid gant gerioù evel "hanvoud", "stuzegezh", o kammsteriañ div wezh war deir pa soñjer e galleg "nature" ha "culture", zo kouezhañ er fazi tamallet uheloc'h,

treuzdec'heriañ, mont d'ar gerioù brezhonek a-dreuz d'ar gerioù estren. Mar kred enta KIS-SADED reiñ un ali d'ar skrivagnerion a lennegezh nemet da dennañ o mad eus ar gerioù resis, ez eo strivañ d'o dimesaat a-benn kaout kezeg nevez ouzh o arar e-kichen ar re gozh, ha n'eo ket loened gouez na oufent nemet gwastañ o zrevadoù.

Notennoù a sturvezhouriezh

Kondaonif an treuzdec'heriañ n'eo ket kement ha dianavezout ar yezhoù arnevez estren. Ne c'hellomp ket zoken arnevesaat hor yezh hep studiañ penaos eo bet arnevesaat ar yezhoù all. Ar gudenn zo penaos korvoif ar yezhoù estren hep treuzdec'heriañ, hep koll barregezhioù digorvo hon hini.

War dachennoù 'zo e ranker degemerout an termenoù estren hep nemeur a gemm. An anvioù kimiek da skouer a vizer o stumm etrevroadel d'an darnvuiañ anezho. Heñveldra gant ar gorfadurezh, mar dalc'her d'ar gerioù broadel, e lakaer ster pep hini da glotañ strizh gant ster ar ger etrevroadel.

War dachennoù all e kloto ar gerioù brezhonek ouzh ar gerioù estren n'eo ket unan hag unan, hogen stroll ha stroll. Ar galleg da skouer evit termenañ an egor evel m'en meizer bremañ en deus eizh ger, tra m'o deus ar jedoniourion vrezhon en o c'herz an ugent ger a zo ezhomm. An hevelap sterframm zo d'ar stroll eizh ger gallek ha d'ar stroll ugent ger brezhonek; ar galleg avat a ra gant un termen hepken evit meizadoù diforc'het mat bremañ, - o diforc'hañ a ra diwar-bouez anvioù-gwan pe troioù-lavar, - tra ma heuilh ar brezhonek an dasparzh steradurel arnevez.

Un trede doare tachennoù zo. Al lavar gouiziel zo dezhañ an hevelap sterframmoù en holl yezhoù; n'eus kemm eus ur yezh d'un all nemet en doare ma vez gwisket ar sterframmoù-se. E pep yezh avat, e-kichen ar sterframmoù etrevroadel e vez sterframmoù

dibar ha broadel rik. Komz a reer eus "ijin ar yezh" o skoulmañ dre ar milvedoù ar yezh ha buhez ar bobl a ra ganti, pe, resis-oc'h, he yezhañ hag he buhezañ. Sterframmoù dibar pep yezh zo enno en egin kelc'hiadoù mennozioù ha na vefent evit diwanañ diouzh yezh all ebet. Kefridi uhelañ ar sturyezhouriezh, - hag aze e talvez dezhi an anv a sterframmouriezh, - zo diorren diouto o-unan sterframmoù ar yezh. Dre an hent-se e tifluko ur brederouriezh vrezhon gwirion. Re bell o deus Breizhiz kemeret ar sterframmoù gall evit frammoù ar gwirvoud e-unan.

Diorren sterframmoù ar yezh, henn adlavarout a reomp, ne empleg ket e tianavezer sterframmoù ar yezhoù all. Keñveriañ n'eo ket dambrezin. Frouezhus-bras eo d'ar prederour keñveriañ ar verb "bout" hag e zevenadoù er yezhoù keltiek hag en alam-anez; fazi bras e vefe eus e berzh klask plegañ ar sterframm keltiek d'ar sterframm germanek.

D A F A R 1 9 6 4

E V I T

A R G E R I A D U R B R O A D E L

o o o  
o

BERRADURIOU

ag.	anv-gwan	hvj.	hervez
agv.	anv-gwan-verb	Iw.	iwarzhoneg
Al.	alamaneg	Yad	yezhadur
an.	arnevez-	Yon	yezhoniezh
And	anadannoniezh	Jed	jedoniezh
Arm	armerzh	La.	latin
as.	anv-stroll	ls.	liester
b.	beneal (gwregel)	Lzh	lizheragouriezh
bnk.	bennak	Men	mentoniezh
Br.	brezhoneg	n.	nevez-
Brd	bredoniezh	nd.	niver-daou
Kb.	kembraeg	nr.	nepreizh
Kim	kimiezh	Pll	poelloniezh
Kn.	kerneveg	Prd	prederouriezh
ko.	kontrol	prl.	peurliesañ
kr.	kreñn-	Rs.	rusianeg
Krf	korfadurezh	rv.	rekverb
kv.	keñveriañ gant	Rzh	reizhennerezh
db.	diwar-bann	sk.	skouer
dh.	dreist-holl	Syr	sturyezhouriezh
Dil	diellaouerezh	sl.	sellout ouzh
Don	douaroniezh	Sz.	saczneg
Fiz	fizik	Txl	treloc'herezh
g.	gourel	u.	unanderenn
Gl.	gallec	ub.	unan bennak
gl.	ger-liammañ	udb.	un dra bennak
h.	han-	un.	unander
hv.	heñvelster	v.	vezb

Notenn.- Pa vez displeget meur a ster d'ur ger, e vez disrannet an displegadurioù diwar-bouez pikoù-skej (;). Diouzh ezhomm e vez niverennet ar steroù pennañ : 1) 2) h.a.

A

aketilen g., (Kim) hidrokabidenn amvec'h C<sub>2</sub>H<sub>2</sub>, aezhenn diliv, dic'hwez pa vez pur; darbaret dre zourannañ ar gerbidenn galkiom; pa zav e taol ur wrez vras : dre-se en danvezer er flammer (flammer oksiketilen).

adameg b., neuziadenn o reif da veizañ dre arcueziou pe heñvelderioù doareoù un dra dianat, sk.: adameg ar vougev, ma tiskouez Platon drezi diglokted hon anaoudegezh eus ar gwirvoud.

aderverañ v., arverañ en-dro; lakaat e boaz en-dro.

addiviz g., (Rzh) diviz, diferadenn lakaat ouzhpenn war un emglev, ur gevrat.

addivizout v., (Rzh) lakaat un addiviz; lakaat evel addiviz.

addivizus ag., (Rzh) o lakaat, oc'h enderc'hel un addiviz, sk.: mar bez ampellus pe addivizus eilger Gwazva ar Mererezh, h.a.

adframm g., framm oc'h harpañ un all; framm deuet pe lakaat e-lec'h un all, sk.: pobloù 'zo a gemm yezh ha sevenadur, ha dont a reont a-benn da seveniñ un adframm kedvhezel, meizel ha zoken sevenadural.

adrann b., (Rzh) skourr ur rann, sk.: trede urzh skourroù eo an Adrannoù. Pep Adrann a bled gant ur rumm resis a gefridioù.

aerbouezer g., benveg da vuzuliañ an aerwask.

Notenn.- Reishoc'h e vije lavarout "aerwaskventer", nemet e vez henvosizet ar ger "aerbouezer" (K&Bvarker, 1847), evitañ da vezañ amreizh.

aerehan g., lec'h arsev evit kirri-nij ul linenn.

aerghent g., hent daremprediñ dre aer; daremprederezh dre aer, sk.: hent an Alaska, kaset da benn e-pad ar brezel diwezhañ, a lak un aerghent hag un targehent herrek etre Kanada hag ar bonioù brezel strewet betek en Inizi Aleoutian.

aersavoniel ag., db. aersavoniezh.

aersavoniezh b., savoniezh an aezhennoù.

aersavoniour ag.& g., gourdon war an aersavoniezh.

aerwask g., gwask an aer war ar c'horfoù a zo en aergelc'h.

aerwaskventer g., sl.: aerbouezer, Notenn.

aezhel ag., db. ar c'horfoù a gemer stumm al listri o dalc'h, hag a zigresk o ec'honad p'o gwasker.

aezhenn b., danvez er stad aezhel; mnan eus teir stad anadennel an danvez; sk.: doare un aezhenn a vez anavezet dre he gwrezverk, he gwask hag hec'h ec'honad.

aezhenn ruz-kel b.ag.rv., (Kim) peroksidenn nitrogen NO<sub>2</sub>, sk.: diwanañ a ra oksidenn nitrogen NO, homañ dre yenaat, o kediañ adarre ouzh an oksigen, a c'han an aezhenn ruz-kel, pe peroksidenn nitrogen.

a-feur-ment gant gl.; db. un dra mentadus, bezañ a-feur-ment gant un all a dalvez n'emañ ket ar c'heñver etre o mentoù re bell diouzh an unanenn, sk.: un den zo a-feur-ment gant ur marc'h, n'eo ket avat gant an heol; hv.: e feur; sl.: a-unfeur.

a-geñfeur gant gl., o verkañ ur c'heñver etre daou gementad hevellep ma van kendalc'hel rannad an daou niver o merk, sk.: e kresek ar sankadur a-geñfeur gant tolz ar vrikenn; sl.: a-c'hinfeur gant.

a-geñver gant gl. o verkañ ur c'heñver ampis; sk.: un derzhienn a-geñver gant an danijenn.

a-geveskemm rv., oc'h eilpenañ urzh an termenoù, sk.: ul liñvenn a ziorre ouzh nep korf beuzet enni ur bunt a-zero'h B. Diskouezomp, a-geveskemm : e tiorre pep korf beuzet en ul liñvenn ur bunt a-zero'h war-draoñ B; sl.: keveskemmenn.

agor ag., digor, sk.: "Pe evel lestr dre'n mor agor na eorer", ar "mor agor" amañ a dal an dorvor digor.

ahelañ v., db. elfenn un neuziadur, o terc'hel al lec'h-kreiz hag-ha-hed dezhañ, sk.: an anv "rannbarzhioù laorañsel" a lakaer war ur riblennad tiriou ahelet gant stêr Sant-Laorañs.

a-c'hinfeur gant gl., o verkañ ur c'heñver etre daou gementad hevellep ma van kendalc'hel liesad an daou niver o merk, sk.: e kresek ar sankadur a-geñfeur gant tolz ar vrikenn hag a-c'hinfeur gant ar gorread-harp; sl.: a-geñfeur gant.

a-ilgroaz rv., db. daou lun mantoniell, enebet dre ur beg, sk.: ur viz, anezhi ur blakenn garrezek dispartiet a pevar c'harrez ruz ha gwenn a-ilgroaz.

a-izelwask rv., dre zigreskiñ ar gwask, sk.: ar silañ a-izelwask.

a-lamm rv., trumm; db. ur c'henn, hep tremen dre stadoù-etre, dre werzhadoù-etre, sk.: kemmet a-lamm o devo o c'henfeurioù, hep stadoù-tremen.

alkali g., (Kim) evel bazenn; anv roet d'ar bazennoù deveret diouzh ar metaloù alkaliek, evel ar soda, ar c'hali, h.a.

alkaliek ag., (Kim) anv roet d'ur c'herentiad metaloù (litiom, natriom, kaliom, h.a.) dre m'o deus da berzh kimiek boutin genel bazennoù kreff, pe alkaliou.

alkoolventer g., benveg da vuzuliañ feur an alkool en ur meskad dour hag alkool, en un died, sk.: alkoolventer kantvedennel Gay-Lussac a zo war-eeun ec'honad an alkool pur dalc'het e 100 cm<sup>3</sup> eus ar meskad.

alkoolventerezh g., pleusterezh ar muzuliañ feur an alkool en diedoù.

alifatek ag., (Kim) db. ar c'hediadoù karbongimiek a zo o molekul e stumm chadennadoù eeun, hep kilwedenn; hv.: digorvellek.

amaezh g., karg, kefridi en un aozadur pe ur Stad.

amaezhel ag., db. amaezh.

amaezhiad g., neb zo fiziet ennañ un amaezh; den e karg, kargiad.

amaezhour g., den e penn un amaezh; den e karg.

amdro b., (Brd) kelc'hiadur, endro, prl. en ur ster buhezel pe gevredigezhel.

Notenn.- Diouzh an doare da sellout ouzh ar c'helc'hiadur e reer gant metoù evit ar c'helc'hiadur fizikel-kimiek, gant amva evit ar c'helc'hiadur bevedel, amdro evit ar c'helc'hiadur buhezel-kevredigezhel; un arliv ouzhpenn a zeu gant arvod : ar bed eo evel ma'z eo buhez gant an hinienn, ar gumuniezh.

Amerindad g., henvroad Amerika, treuzanvet Indian.

amerindek ag., dezhañ un amerindeg da yezh; db. un amerindeg pe an amerindegoù.

amerindeg g., yezh henvroiz Amerika.

amerindegour g., neb a studi ar yezhoù amerindek.

amalev ag., (Yon) db. ur gensonenn distaget hep ma taskronefe plegoù ar vouezh, sk. /k p t s/; ko.: heglev.

amreiz ag., hep krizder bras, sk.: an norz d'an 40t ledredenn ha betek en Alaska e kaver un hinad meurvored, gant goañvezhioù amgriz, hañvezhioù c'hwek, glavek.

amheren ag., nebeut heren, sk.: bruzunañ a ra ar sulfur pa en tommer un disterañ, pezh a ziskouez ez eo amheren ouzh ar wrez

amvezhel ag., (Lzh) db. un elfenn, dezhi doareoù 'zo hepken eus an elfennoù-yezh boutin, evel ar stummoù geriel hep ster-kent arveret gant ar varzhed, sk.: diwanañ a reont diouzh yezhoù stabilaet, en egor diogel un hengoun lennegel hirbleustret, hag int stummadurioù nevezyezhel, - pe amvezhel, - diwar hontgeroù hengounel.

amoniek g., (Kim) aezhenn c'hwez brout, a zelun NH<sub>3</sub>, danvezet kalz ar gres anterezh, kevanaozet diwar nitrogen an aer, diwanañ e-tarbarer an drenkenn nitrek, temzoù, h.a.

amoniom g., (Kim) stroll NH<sub>4</sub> o vont e dazgwerad evel ur c'horf eun daoust ma ne c'heller ket e zigenvezañ; ion NH<sub>4</sub><sup>+</sup>, o ferzhioù kimiek heñvel ouzh re ar metaloù alkaliek.

amouiziel ag., nann gouiziel, sk.: anv amouiziel ar berokedenn hidrogen tanavet eo dour oksigen.

amouizielded b., ar bezañ amouiziel.

ampellañ v., goursezañ, kas da ziwezhatoc'h.

ampellidigezh b. en ampellañ, sk. sl.: ampellus.

ampellus ag., o lakaat ampellañ, o tivizout ampellañ, sk.: mar bez ampellus disentez Gwarva ar C'helenn, e kas d'ar skoliad meneg an ampellidigezh hag an divizoù lakaet.

amplaet v.& g., erlec'hiañ ouzh un argemmadur un argemmadur all brasoc'h ha kenfeur, aesoc'h da verzhout, sk.: ar penn all, d'ail, a gefloc'h, gant amplaet, un nadoz o redek dirak un dremm dereziet.

amplidigezh b., an amplaet, sk.: hevellep kemma-stumm a vez treuzkaset gant amplidigezh d'un nadoz o redek dirak un dremm dereziet.

ampur ag., (Kim) db. ur c'horf, mesket gantañ ur c'hementad a gorfoù all.

amrav g.-revier, bandenn, o c'hoarvezout eus mellennoù metal, stignet en-dro da ziv pe lies rod evit kraskiñ gorread-harp ur c'harr.

amrav g. (Kim), db. un elfenn, ar galloud-kediañ kementadel anezhi.

amsavus ag., spletus, talvoudus, emsav, sk.: atiloù gell, rotelek ar rann-barzh koadek-mañ a vez amsavus d'ar gonit-douar.

amsellet agv., na deo ket sellet war-eeun, evitañ e-unan, sk.: tra ma vez ar ger lennegel evel skeud amsellet an hontger, ec'h en em zalc'h al lavar gouiziegezhel e lagad an heol.

ampis ag., nebeut spis, sk.: ur c'heñver ampis.

amva g., (Brd) kelc'hiadur bevedel, sk.: an amva zo an endro sellet evel maez stignet en-dro d'al loen gant an dedennidigezhioù hag an argasidigezhioù a ren warnañ; sl.: amdro, Notenn.

amved g., (Brd) kelc'hiadur buhezal ha kedvuhezal; ar bed evel ma'z eo buhez gant un hinienn, ur gumuniezh; sl.: amdro, Notenn.

amvec'h ag., (Kim) db. ur c'horf a c'hell delenañ elfennoù nevez hep dilezel eus e re; ko.: peurvec'h.

amwelad g., tro-studi war ur roll krefen, ur strollad danvezioù, sk.: e sigur pep pennad, un amwelad hanezal war an sozerezh hag ar skridoù-orin, plaenadur testenn ar pennad e-keñver geriadur, yezhadur, sozadur ha mennoziadur.

amzileizh ag., nebeut dilezhdus; ko.: hezileizh.

amzileizhded b., ar bezañ amzileizh.

anad g., 1) perzh aes da verzhout, da anavezout 2) merk, erouez 3) hañvalder, neuz, sk.: padal, mar greomp tro ar c'hoari-lec'h, mar dizoloomp e-touesk e sifelennoù ar margodennet a zo o anad-buhez da Harlikin ha Volantin ?

analadus ag., a c'hell bezañ analet, mat da vezañ analet, sk.: "bevus"-dreist e heñvale seurt "aer" bezañ, setu perak e reas Lavoisier "aer analadus kenañ" anezhañ.

anamzerel ag., (Yad) na vez ket un amzer, sk.: er frazenn "ur metal eo an houarn" ez eus gant ar vezb "eo" ur furm bremanel, hogen un arver anamzerel.

anaoudoniel ag., (Prd) db. an anaoudoniezh.

anaoudoniezh b., (Prd) studi boelladel an anavezout, an anaoudegezh; hv.: gnozeologiezh; sl.: gouziadoniezh.

anaoudoniezhel ag., (Prd) db. anaoudoniezh.

anaoudoniour ag.& g., (Prd) gourdon war an anaoudoniezh.

anavezad g., (Prd) pezh a zo anavezet, sk.: an emskiant zo troot ouzh an anavezadoù a sell dre ret ouzh an unan.

anavezat ag., (Prd) a zo anavezet (er ster 1).

anavezour ag.& g., (Prd) neb a anavez (er ster 1).

anavezout v., 1) kemer keal eus 2) kaout keal eus; sl.: gouzout.

Notenn.- Meur a zerez zo d'an anavezout : 1) war bazenn ar spered, anavezout un dra zo dont ez-vennel da vezañ an dra-se 2) war bazenn ar vuhez, e lavarer ez anavez an traoù bev udb. pa en degemeront en o amva o tiorren azasterioù outañ, eleze o reiñ ster dezhañ : er ster-se ez anavez ar gwez an navez-amzer, ez anavez ar c'hi e vestr pe e daread; dre strisheat, e lavarer ez anavez ar vonedigezh udb., pa gemer an dra-se ur ster enni : un azhent o tegas kamm a monedigezh

un den pe ul loen a lavarer anavezat gant ar vonedigezh 3) war bazenn ar sturoniezh, dre astenn-ster, anavezout udb. zo e zegemerout evel ur reizhiad stlennadoù.

andiles ag., n'eo ket diles er sturioù 1 ha 2.

andilesa vi., diskouez, prouiñ andilestod un oberenn, un teul, h.a.

andilesroez g., ar bezañ andiles, dh. e ster 2 ar ger diles.

andilestod b., ar bezañ andiles, dh. e ster 1 ar ger diles.

anemouez ag., (Prd) n'eo ket emouez; g., stad anemouez.

anemouezet ag., (Prd) n'eo ket emouezet, sk.: tu anemouezet an emgorf.

anemouezded b., (Prd) ar bezañ anemouez.

anemouezel ag., (Prd) db. ar bezañ anemouez.

anemouezvezaf v., (Prd) bezañ, harvezañ anemouez.

e-neuz gant gl., dezhañ an hevalep stumm ha.

anglsaozelezh b., perzh bezañ angl-ha-saoz, sk.: e meur a zegouezh o deus klasket an Amerikaned, damantus d'o anglsaozelezh ha d'o barr-bevañ, mirout ouzh an enbroerezh estren.

angström g., unanenn ragad, par da  $10^{-10}$  metr, Å.

anhidridenn b., (Kim) korf o tisec'haf dre lemel ur volekulenn dour diouzh molekulenn un drenkenn, sk.: un oksidenn dredek a reer anezhi un anhidridenn, kediañ a ra ouzh an dour, o c'heneh un drenkenn.

anhidridenn fosforek b.ag., (Kim) anhidridenn  $P_2O_5$  an drenkenn fosforek  $H_3PO_4$ ; hv.: pentoksidenn fosfor.

anhidridenn garbonek b.ag., (Kim) anhidridenn  $CO_2$  an drenkenn garbonek  $H_2CO_3$ , homañ a anavezet hepken an haliou diwarni; hv.: dioksidenn garbon.

anhidridenn sulfurek b.ag., (Kim) anhidridenn  $SO_3$  an drenkenn sulfurek  $H_2SO_4$ ; hv.: trioksidenn sulfur.

anhidridenn sulfurus b.ag., (Kim) anhidridenn  $SO_2$  an drenkenn sulfurus  $H_2SO_3$ , homañ a anavezet hepken an haliou diwarni; hv.: dioksidenn sulfur.

anienelezh b., (Prd) 1) perzh bezañ anienel 2) domani anienoù, sk.: ha mar ne gloz nepred warni hec'h-unan peurglek ar ouiziegezh, ez eo peogwir ne deu-hi morse da zivigañ anienelezh ar bed.

anre ag., (Fiz) na re ket (an tredan, ar wrez, h.a.)

anreell b., (Fiz) elfenn en ur savadell o herzel ouzh tremen an tredan,

ar wrez, h.a.)

anreell b., (Fiz) elfenn en ur savadell o herzel ouzh tremen an tredan, ar wrez, h.a.

anreer ag.& g., (fiz) korf na re ket (an tredan, ar wrez, h.a.); hv.: difuer; sl.: tredananreer, gwrezanreer.

anren v. anreet, (Fiz) na ren (an tredan, ar wrez); gronnañ en ur metoù anre.

anreüs ag., (Fiz) na c'hell ket ren (an tredan, ar wrez, h.a.)

anreüstet b., (Fiz) ar bezañ anreüs.

anster ag., hep ster; g., diouer a ster.

aodel ag., a-geñver gant an aod, sk.: aradennoù an Arvor Habask a c'hoarvez eus ur studad diabarzh hag ur studad aodal.

atod b. (hBr.: alt), ger degaset e-barzh ur werzenn, hag eñ peuzanster, dre ezhommoù ar c'hlotañ.

aur g., (Au; elfenn nn.79; tolz Nad-atom = 197,2; douester = 19,4; teuzvarc = 1 063°C) metal bouk, melan, govalius hag orjalennus-kenañ, distabil e gediadoù.

aralvezh ag., en ur yezh all, oc'h ober gant ur yezh all, sk.: an daremp-redoù ret gant kevredigezhioù aralvezh a c'hell bezañ en ur yezh estren.

arallvroegach g., yezh ur vro all, termen dismeg; tro-lavar amprestet diouzh yezh ur vro all, sk.: prizioc'h c'hoazh eo darempred ar grennyezh, rak anni e vez kavet un ereadurezh hag ul lavarennadurezh nasoc'h ouzh anien hor yezh eget en teodyezhoù a-vremañ, breinaet krenn gant an arallvroegachoù.

arbenniat ag., oc'h arbenniañ, herzel, enebiañ ouzh, sk.: pa gresk an aerwark, ez argev speurenngrec'h ar voest davit ur c'hempouez nevez stre an nerzh-gwaskañ hag an nerzh diorret gant ar winterell arbenniat.

arbenniañ v., mont pe lakeat da vont arbennigour, gourdon, arrotat war.

ardivinkerezh g., hallad aveadurioù ardivinkel, sk.: gounezet a vez adarre kotoñs ha butun gant skoazell un ardivinkerezh arvevez.

argantet agv., warnañ ur gwiskad argant, sk.: speurennoù argantet.

argantvout v.-vezet (kv.hBr.: ercentbidi, Kb.: arganfod), (And) emouezañ ouzh udb. dre hanteradur ar c'hounañ, al luniañ, an deskrivañ, h.a.; sl.: kantvout, merzhout.

arqerzh g., heul an daskemmadurioù o tibennañ en ur stad a draoù, en un

disoc'h, sk.: argerzh ur c'hleñved; heul an oberatadurioù renet diouzh tizhout un disoc'h, sk.: argerzh ar poellata.

argerzhad g., 1) heuliad oc'h ober un argerzh 2) doarc-ober, -oberata diouzh tizhout ur pal, sk.: daou argerzhad zo evit lakaat glein an dour leiek.

argerzhadur g., 1) an argerzhañ 2) hent a heuilh pe a dle heuilhañ ur prosez, ur c'hengread, h.a., sk.: diouzh an argerzhadur-mañ e vez graet enroll- idigezh ar skolidi : ...

argerzhañ v., oberata diouzh tizhout un disoc'h.

argon g., (A; elfenn nn.18; tolz Nad-atom = 39,94) aezhenn rouez an aer, 0,8 eus an aergelc'h, diheged, dre-se danvezet da leuniañ ar c'hlogor- ennoù tredan.

arhent g., 1) pezh a laka war an hent 2) arouez-hañchañ, -kemenn 3) (brd) kement c'hoarvoud en amva o tevoudañ ur vonedigezh, sk.: arhentoù e vez ar gerioù lennegel, nemet arhentoù dibar, rak ouzhpenn lakaat ar beajour war an hent, e lakaont anezhañ da c'hanel ar vro ma'z a dezhi.

arhentadur g., an arhentañ; displegadur roet evit lakaat war an hent.

arhentañ v., lakaat war an hent, arroudenañ, sk.: lakaat war an hent, arhentet e vez al lenner gant ar gerioù a lenn, war-du an hontved a zifluk e penn e selloù.

arc'hantadur g., an arc'hantañ; bastidigezh arc'hant.

arc'hantañ v., 1) tennañ arc'hant eus; kaout e wezh arc'hant eus 2) bastañ arc'hant da, postañ arc'hant a.

arc'hantal ag., db. an arc'hant, o tennañ da pe o sellout ouzh an arc'hant, sk.: galloudeget e vez Gwazva ar C'hreizennerszh evit ren kement treuzgread arc'hantal ret gant enrollidigezh ar skolidi.

arc'helder g., (Yad) fuzm verb arvezet peurliesañ evit gourc'hemenn, hetañ, pediñ.

Notenn.- Diforc'h a lakaer stro ar fuzm hag an arver anezhi. Da sk.:  
deuet : fuzm arc'helder, arver gourc'hemenn pe hetañ,  
(ra) zavio : fuzm dazoned, arver hetañ,  
(e) zavio : fuzm dazoned, arver amzer da zont.

arc'henerzh g., ijinerezh an arc'henadoù.

arc'henour g., greantour arc'henadoù.

arc'himedel ag., (Fiz) savelet gant gwirienn Arc'himedes, sk.: ar bunt arc'himedel.

Arc'himedes g., mentoniour gresian, 287-212 k.J-K; (Fiz) gwirienn A., gwirienn-diazez an douzavoniezh, dezzevellet evel-henn : war nep

kaled bezet en ul liñvenn e-kempouez e werez un nerzh e-zerc'h, durc'haet war-grec'h, par e greñveder da bouez al liñvenn dislec'hiet, krog er poent ma edo kreiz-kerc'hell al liñvenn dislec'hiet.

arledadur g., (Fiz) an arlediñ; disoc'h an arlediñ.

arleizhidik ag., (Kim) tuet da arleizhiñ.

arleizhidigezh b., (Kim) an arleizhiñ.

arleizhiñ v., (Kim) db. korfoù kalet 'zo, kemer tamm ha tamm aezhenn dour an aergelc'h ha dre-se trefañ e dileizhenn dre zour.

arlivañ v., reiñ un arliv da; (Fiz) meskañ ur c'hementad bihan danvez livus gant ul liñvenn diliv evit gallout he diverzhout aesoc'h, sk.: ur bibenn e stumm U a zo enni ul liñvenn arlivet.

arlug g., (Fiz) stad ur c'horf euflennet mesket gant un hoverenn hep bezañ dileizhet enni, sk.: pa saver ar goulou ur wazennad dour puñset en ur ster, e weler kaledoù munut e-leizh en arlug e-barzh al liñvenn.

arlugañ v., (Fiz) lakaat en arlug.

arlugenn b., (Fiz) reizhiad o c'hoarvezout eus un heverenn hag eus ur c'horf all en arlug enni.

arnesadek ag., 2) db. un dezrevell, a zo kevazas evit muzulioù damresis hepken, pa evit darn eus an degouezhioù hepken, sk.: savelell Boyle-Maricotte zo ur savelell arnesadek, talvoudek avat en darnvuiañ eus an degouezhioù.

arneuv g., doare ur c'horf o venel war neuñv.

arneuviañ v., menel war neuñv.

arnevezvrezhoneg g., (Yon) rann nevez-diorreet eus ar brezhoneg a-vremañ, dh. db. tachennoù ar yezh o tennañ d'ar vuhez arnevez, d'ar ouezoniezh, d'ar c'halvezerszh, h.a.

arnodel ag., db. an anaoudegezh, oc'h emplegañ ur gwiriadur reizhiadek ken eus kevazastar an dezrevelloù ouzh an devoudoù, ken eus kempoellded an dezrevelloù etrezo.

arnodva g., lec'h ma vez renet arnoderezh, imbourc'herezh.

arouez kimiek b.ag., arouez, dezhi talvoudegezh doareadel ha kementadel, o teluniañ un elfenn gimiek.

arour g.& ag., neb a zo diazezet e vevidigezh war an arat; evel arar.

arourel ag., db. an aroureion pe an arouriesh, sk.: an Indianed a ren ur vuhez henvoazel, arourel ha bugulel, e-barzh gwazevaoù Arizona.

arouriezh b., pleusterezh pe studi an arat.

arsavlec'h g., lec'h terket evit ober arsav, dh. db. tankerroureion.

arval g.-ion, prener boas, ostiz, klient.

arver g., an ober gant, implij boas, sk.: arver an ijinenoù elektronek.

arverañ v., ober gant, implijout boas, lakaat da dalvezout.

arverek ag., a vez graet gantañ ez-voas.

arvel g., (Prd) pezh a vez lakaet war wel, enebet ouzh "arhent", sk.: al lavar gouziziegezhel a zo warnañ anienoù eus ar bed, lakaet war-wel gantañ, - arveloù e vez ar gerioù ennañ, ket arhentoù.

arvelaat v., (Prd) lakaat e stumm arveloù.

arvelañ v., (Prd) lakaat war wel; lakaat e stumm arvel.

arzaelañ v., daelañ a-zivout, sk.: un disentañ arzaelañ.

arzhrodel ag., db. an Arzhrod; db. ar Meurvor Arzhrodel.

Arzhrodel g., ar Meurvor Arzhrodel.

a-skiz rv., o luniañ ur c'horn bihan pe vihanoc'h gant ur roud, sk.: ar c'hevel-skej, a zo a-skiz he c'harvenoù ha dre-se linennheñvel o gorrennoù-harp.

asfalt g., (Kim) doare tar naturel a gendec'har ivez dre strilhañ an tiraoul.

astalvoudakaat v.& g., reiñ talvoudgezh en-dro d'ur gevrat, h.a., en tu all d'an termen divizet, sk.: ar garg a vez fiziet ennañ evit ur bloavezh gant diviz astalvoudakaat disebann.

asteurel v., degas e penn-kraec'h ur bajenn stad ar gont evel m'emañ e penn-traoñ ar bajenn a-raok.

astaol g., pezh a astaoler; stad ar gont degaset eus penn-traoñ ur bajenn da benn-kraec'h ar bajenn war-lec'h.

a-studad rv., dre strolleñnoù renket; db. oberidigezh an traozoù er greant-erezh, a-strolleñnoù, ha neket unan hag unan.

atalad kimiek g.ag., reollun o verkañ ur c'heñver a barder etre div stad ur c'hementad danvez, prl. a-raok ha goude un dazgwered kimiek, ar gazel gantañ o teluniañ molekul-derou, an eil kazel o teluniañ molekul-diwez an dazgwered.

atalour ag.& g., (Jed) gourdon war an atalouriezh.

atalourer ag., (Jed) db. atalouriezh.

atalouriezh b., (Jed) kevrenn ar jedoniezh oc'h oberata war arouezioù ez-lec'hiet ouzh ar c'hementadoù.

ateb g., respont, eilger, distro.

atabañ v., respont, eilgeriañ, distroañ.

atmosfer g., (Fiz) unanenn wask, par d'an aerwask reol, eleze muzuliet gant 760 mm bevargant da 0°C e-barzh korzenn d'forricelli, atm.

atom as.-enn, lodennoù danvez bihanañ a c'hell mont e dazgwered kimiek.

atomennder g., (Kim) db. ur c'hoif pur, niver an atomennoù a ya d'ober pep molekulenn anezhañ; sl.: -der

atomour g., neb a studi an atom.

atomouriezh b., kevrenn-studi o plediñ gant an atom.

a-unfeur rv. (- gant gl.), db. daou gementad, daou dra mentadus, n'emañ ket ar c'heñver etrezo re bell diouzh an unanenn, sk.: a-unfeur emañ tizh ur marc'h ha tizh ur c'harr-tan, n'emañ ket a-unfeur avat tizh ur marc'h ha tizh al luc'h.

a-untizh rv., 1) gant un tizh kendalc'hel 2) gant an hevelep tizh.

avelarignerzh g., gwered an avel o tispenn gwiskad gorre pluskenn an douar, sk.: an atiloù diwerez rak an avel- hag an dougrignerzh.

azverat v., reiñ ur stumm nevez da, sk.: e kefridi ar poellgor emañ azverat e koulz frammadur ar strolled.

bac'henn b., boest kloz diouzh un tu hepken, sk.: ar gwaskventerioù dre vac'henn zo savet war skouer an aerbouezerioù dre glozenn, nemet, e-lec'h bezañ peurglouz, e vez digor ar voest en ur penn da vezañ lakaet kehant gant ar metoù a vanner muzuliañ ar gwask ennañ, aless an anv bac'henn graet outi.

bank-fiziañ g.v., bank o tegemerout espern ar brevezidi.

bann g., nep lodenn a-zerc'h, eaunennek prl., en ur benveg, ur savadell, h.a., sk.: skuilhomp bevargant en ur gorzenn stumm-U hag ar bann A anezhi, lakomp dour ouzhpenn; en un dasparzh karrezennek, pep linenn a-sav, sk.: er bann kentañ ez enskriver an deiziadoù, ko.: rez, stoud.

bannad g., endalc'h ur bann.

bannarvest g., arvestoù azet diwar-bouez bannañ skinoù, evel ar fiftskeud-  
ennoù, ar skinwel, h.a.

bar g., (fiz) unanenn wask, anvet c'hoazh megabarienn, par da  $10^5$  paskal, b.

barienn b., (fiz) unanenn wask, anvet c'hoazh mikrobar, par da 100 paskal,  
ub.

bariom g., (Ba; elfenn nn.56; tolz Nad-atom = 137,36; douester = 3,75;  
teuzverk = 850°C) metal gwenn-argant, bouk, eus kerantiad ar metaloù  
prialkaliek, kavet en natur dindan e haloù sulfat ha karbonat, danvezet  
er gweraerezh.

barregezh dezougen b.v., pezh a c'hell reiñ tu da zilic'hiañ un tren, ul  
linenn pe ur rouedad hentoù-houarn, kirri-nij, bigi, h.a., sk.: roued-  
adoù kehentiñ ar Stadoù-Unanet zo dezho ur varregezh dezougen ramzel.

barzhoniañ v.& g., aozañ barzhoniezh, sevel barzhonegoù, sk.: hor barzhed  
a zalc'he strizh da reolennoù ar barzhoniañ kozh.

bastidigezh b., ar bastañ; roidigezh, pourvezidigezh, sk.: an teulidoù  
arveret da geñver bastidigezh ar yalc'hadoù-studi.

bezadell b., al lodann vucall aus ul liñvenn pa vez diazezet ar ouelezenn;  
hv.: dilav.

bazalt g., maen dislonkadurel tuzum, liv arzu.

bazaltek ag., a vazalt, bazalt ennañ, sk.: war an uhelgompezennoù bazaltek  
e c'honezer gwinih.

bazek ag., (Kim) dezhañ perzhioù bazenn; db. ar bazennoù.

bazegezh b., (Kim) perzhioù o verkañ ar bazennoù.

bazenn b., (Kim) nep korf a c'hell kemer ion  $H^+$  digant un danvez all.

bec'hiañ g., (Trd) kementad tredan e-sav war ur c'horf, ur rannig, h.a.,  
hv.: tredanvec'hiañ.

benel ag., (Yad) gwregel.

benven-strilhañ g.v., savadell danvezet evit strilhañ al liñvennoù; hv.:  
strilherez.

benzen g., ( $C_6H_6$ ) karbidenn hidrogen, korvèllek e volekulenn, liñvenn diliv,  
ganti ur c'hwez kreñv, kenderc'het dre rannstrilhañ ar c'houltron  
glaou; sl.: benzol.

benzol g., (Kim) 1) kenderc'had diwar strilhañ ar glaou, rannstrilhad dindan  
160°C, anvet c'hoazh eoul tanav 2) liñvenn diliv, frondus, a zelun  
 $C_6H_6$ , anvet c'hoazh benzen.

berredreg g., tredasur esunaet o tiskouez ar pep pennañ, pe ar pezh a zo  
ezhomm manegiñ eus udb.

bevad g., danvez bevel pe a orin bevel, sk.: an amann, ar glaou, ar paper  
zo bevadoù.

bevat ag., bevel pe a orin bevel, sk.: danvezioù meinat evel ar plastr,  
bevat evel ar prenn, a ya d'ober an tisz.

bevek ag., beved ennañ; dezhañ doare an traoù bev, sk.: er gimiezh, "bevek"  
zo tost da vat heñvelster da "karbonek" o vezañ ma kaver ur frammed  
atomennoù karbon oc'h ober ar molekul eus kement danvez bevel a zo.

bevad g., ar bevañ sellet evel un arc'hvelañ; sl.: buhezel, Notenn.

bevedek ag., a zo beved ennañ; db. ar bevedeg.

bevedeg g., an dra bev sellet evel unvez kevand; hv.: organeg.

bevedel ag., db. beved; sl.: buhezel, Notenn.

bevedour ag.& g., neb a studi ar beved, ar vededouriezh.

bevedoural ag., db. ar vededouriezh pe ar vededourion.

bevedouriezh b., studi ar beved, arc'hwel an organoù, h.a.

bevel ag., dezhañ perzh an traoù bev, sk.: tra bev n'eo ket ar gwad, o  
vezañ ma n'oufe bevañ e-unan, hogen un danvezenn veval eo.

bevenngêr b., kêr lec'hiet war an harzoù, sk.: Windsor, Hamilton, h.a.,  
anezho "bevenngêrioù Kanada" (the Border Cities of Canada).

bevus ag., o reiñ tu da vevañ, splotus d'ar beved, sk.: bevus-dreist e  
hañvale seurt "aer" bezañ, setu perak e reas Lavoisier "aer analadus  
kenañ" anezhañ.

bezus ag., a c'hall bezañ.

blein g., en ur reizhiad egorennnek, lec'h dezhañ ur perzh dibar; (Trd)  
lec'h en ur ganer, en ur rehant ma teu e-barzh pe ma'z a er-maez ar  
red tredan.

blein-maes g.rv., (Trd) lec'h en ur ganer, en ur rehant ma'z a dezhañ ar  
red tredan, ma teu dioutañ an elektron.

bloin-mui g.rv., (Trd) lec'h en ur ganer, en ur rehant ma teu dioutañ ar  
red tredan, ma'z a dezhañ an elektron.

bodad kefridiet g.agv., niver tud strollet da geñver ur sevenadenn dibar  
fiziet anno.

bon g., diazez, diazezlec'h; lec'h ma kav goudor, dafar, h.a., en aer-pe  
ar morlistri brezel etre an oberatadurioù.

bon aer-mor g.ag., bon brezel terket ken evit an aerlistri ken evit ar mor-listri.

bonad g., (Yon, Yod) rann ar ger ma vez staget outi an dibennoù troadennel, sk.: kontammet a veze sonenn ar bonad, evel hiziv e "livirit", "kerot"; hv.: pennef (R. Hemon), pennrann (Kervella).

Notenn.- Ouzh ar bonad e stager an dibenn : dered -fen, penn -où; ouzh ar bennrann e stager ar rekaerioù hag al lostgerioù : de- red -adeg.

bonrann b., (Dil) parzh ar bonverk o verkañ ar rann obererezh ma tenn dezhi an teul merket.

bonrifiv g., (Dil) parzh ar bonverk o verkañ ar skourr diazez ma tenn dezhi an teul merket.

bonrifivañ v., (Dil) merkañ gant ur bonrifiv.

bonverk g., (Dil) parzh an diellverk o tarmanañ rannbarzh arver an teul merket.

bonverkañ v., (Dil) merkañ gant ur bonverk.

boudelezh b., perzh bezañ boud; ar pezh a vout a zo d'udb., sk.: ar pezh-se, hon eus difermanet ez-hollek e lec'h furmel oc'h ober anezhañ an hontger, mar karomp bremañ savelañ e voudelezh keñverel, e kouezhomp gant un dra bennak heñvel a-walc'h ouzh Mougev Platon.

bouederezh g., ijinerezh an danvezioù bevañs.

bouedvirezh b., greanti mirerezh boued.

bouedvirezh g., ijinerezh danzen an danvezioù bevañs evit o mirout.

boullestr g., lestr arnodva, e gwer prl., e stumm ur bellenn gant ur gouzoug hir eun.

braslun g., skeudenn eunaet.

brasluniadur g., taolennadur dre skeudenoù eunaet.

brasluniañ v., taolennañ dre skeudenoù eunaet.

bred g., (Brd) selled an anaoudegezh arnodal o tagerout daou dermenadur, unan nac'hel : ar pezh eus un dra bev na c'haller ket displegañ dre ar savelennoù fizikel-kimiek, unan yael : ar vuhez evel anadenn godouezel pe emouezel.

bredel ag., (Brd) db. bred.

bredoniour g., (Brd) neb a studi ar bred.

bredoniel ag., (Brd) db. ar vredeniozh.

bredoniozh gg., (Brd) kevrenn studi o plediñ gant ar bred.

bremanel ag.& g., furm verb arveret peurliesañ evit merkañ an amzer-vremañ.

Notenn.- Diforc'h a lakaer etre ar furm hag an arver anezhi. Da sk.

an div frazenn : 1. br eo bremañ 2. ur metal eo an houarn.

1. eo : furm bremanel, arver amzer-vremañ

2. eo : furm bremanel, arver anamzerel.

bremañvrezhoneg g., brezhuneg komzet a-vremañ, dreist-holl hini an teod-yezhoù.

brileun ag., leun a vri, doujus kenan, sk.: ar studier "deboner" eleza, a-youl-vat, da, ha brileun e-keñver harezhañ hor c'honel.

brizhparadoz ag., dezhañ doare touallus ur baradoz.

buanded b., padelezh keñverel un anadenn, sk.: diouzh buanded an oksidañ e reer anv eus kannoksidañ pe leskiñ, eus moroksidañ pe merglañ.

buqule ag., db. ar vugulion pe o doara-bevañ pe ar gevredigezh diazezet war ar mesa chatal, sk.: an Indianed a ren ur vuhez hennoazel, arourel ha bugulel, e-barzh gwarezvañ Arizona.

buhezad g., (Brd) pezh a zo buhez, sk.: froud ar buhezadoù.

buhezadur g., (Brd) ar buhezañ; an disoc'h anezhañ.

buhezañ v., (Brd) greout ar vuhez evel anavezout, aleza dangorañ hag ergorañ e kement ha ma reont buhez un den.

Notenn.- Pe lavarer "anavezout" e vezet prl. ur greout distag, bevennet dre berzh e sellad pe a vod, didennet end-eun eus froud ar buhezañ. Pe lavarer "buhezañ", e varker an anavezout kevrenn hag a-vloc'h eus un anavezout, ur greout divevenn ha diastal, ur froud didor a anavezoutoù gant o anavezoutoù.

buhez ag., (Brd) db. ar vuhez, dh. buhez mab-den, emouez ha rdz.

Notenn.- Diforc'h eo buhez diouzh bevedel evel buhez diouzh beved, evel buhezañ diouzh bevañ : un anadenn vuhez eo ar c'hoarzh; war un dro ez eo-ef ar c'hempoell eus an anadenoù bevedel a wel ennañ ar sell bevedel, fiñvoù ar brusk, an dremm, h.a.; ar sell buhez avat a welo ennañ levenez, godis, h.a.; hevelap levenez, godis, h.a., o vezañ da gantañ buhezadoù an hini a c'hoarzh.

bunt g., (Fiz) nerzh diorroet gant un havezenn, sk.: bunt an dour ouzh deun al lestr zo dizalc'h diouzh stumm al lestr.

bunt arc'himedel g.ag., (Fiz) nerzh a-zerc'h durc'haet war-grec'h o werediñ war nep kaled bouzet en un havezenn, par e greñvder da bouez an havezenn dislec'hiet, krog ar poent ma edo kreiz kerc'hall an havezenn dislec'hiet; sl.: Arc'himedes.

buorzherzh g., ar buorzhañ; doare magañ ar chatal war gompezennoù hag

uhelgompezennoù ec'hon Norzamerika; hv.: ranching.

buorzherzh-masañ g., doare magañ chatal pleustret e Kornog Pellañ ar Stadoù-Unanet, al loened deuet d'o ment o vezañ kaset da lardañ d'ur rannbarzh stuoc'h.

buzad g., pezh a vez gonezet dre un taol kenwerzh.

## K

kailhastrann b., (Kim) oksidenn silikiom  $SiO_2$  a gaver pur er c'houarzh, dambur en traezh gwenn.

kalkiom g., (Ca; elfenn nn.20; tolz Nad-atom = 40,08; douester = 1,85; teuzverk = 760°C) metal gwenn, an hini pouezusañ eus kerentiad ar metaloù prialkaliek, kavet en natur en e halioù karbonat, sulfat, fosfat, danvezet en ijinerezhioù an temzoù hag ar simentoù.

kaledif v., (Fiz) db. un heverenn, mont er stad kalet, sk.: kaledif a ra an oksigen da -220°C.

kali g., (Kim) hidrosidenn galiom KOH o tiwanañ eus dazgwered an dour ouzh an oksidenn galiom  $K_2O$ , arveret evel disec'her.

kaliom g., (K; elfenn nn.19; tolz Nad-atom = 39,096; douester = 0,86; teuzverk = 62,3°C) metal alkaliek, tost d'an natriom, kavet en natur en e gloridenn, danvezet en ijinerezh an temzoù.

kabellañ v., ailpenañ (ul lestr) en doare da c'hronañ beg un duellenn, un dredanode, h.a., sk.: kabellomp an odoù gant pep a gorzenn doreziet leun a zileizhenn soda.

kalvizierezh g., an aozañ gant ampartiz, sk.: sellout a ra ouzh e c'herioù, kiañ a ra warno zoken, e "vicher" eo, kalvezerezh, kalvizierezh.

kammster g., fazi war ar ster; ster zoet dre fazi.

kamperezh g., db. baleerion, hañverion, h.a., an emziazezañ dibad.

kanevedennus ag., o tennañ d'ar ganevedenn; liesneuz ha kemmus, sk.: al lennegezh zo lec'h ar c'heñverioù hontgerel, dibar, kanevedennus, peur-gemmus avat ha peurlaosk.

kannadelezh b., perzh bezañ kannad; kefridi ur c'hannad, sk.: e pep degouezh

e c'houlennomp diganeoc'h talvoudakaat kannadelañ an daou azal kant-lavaret.

kannded b., stad ur c'hoef tommet betek ar poent ma taol luc'h gwenn.

kannder g., ar bezañ kann.

kannoksidaf v., oksidaf herrek gant laoskidigezh luc'h; hv.: leskiñ, ko.: moroksidaf.

kancuc'holladur g., ar c'hancuc'hellañ; disoc'h ar c'hancuc'hellañ.

kan-skarz g.v., korzenn, prl. dindan zouar, evit diskargañ an douzioù lous.

kantenn b., kranenn bihan he sav e-keñver he skin.

kantolz g., unanenn dolz, par da 100 kg, q.

kantvedennel ag., db. ur benveg-muzuliañ, o vezañ ar gantvedenn, doreziet e kantvedennoù.

kantvout v.-vezet (kv. hbr.: ercentbidi, Kb.: canfod), (And) merzhout en traoù en o dirvoud, hep hanteradur ar c'hounañ, al luniañ, an deskrivañ, h.a.; sl.: argantvout, merzhout.

karbidenn b., (Kim) kediañ diwar garbon hag ur metal pa un divetal.

karbidenn hidrogen b.g., (Kim) kediañ diwar garbon hag hidrogen; sl.: hidrokarbidenn.

karbon g., (C; elfenn nn.6; tolz Nad-atom = 12,04; teuzverk brasoc'h eget 4000°C) divetal a gaver e kement danvez bevel 'zo.

karbonek ag., (Kim) 1) sl.: anhidridenn garbonek; trenkenn g- b.ag., trenkenn a vefe he delun:  $H_2CO_3$ , na anavezet nemet an anhidridenn hag an halioù anezhi: sl.: karbonat; 2) db. kimiezh an danveziou bevek, hv.: bevek, proanek.

karbonat g., (Kim) hal diwar an drenkenn garbonek  $H_2CO_3$ , homañ o vezañ anavezet hepken dre nac'h anhidridenn  $CO_2$  hag he halioù and-eeun.

karbonat natriom g.g., (Kim) hal natriom diwar an drenkenn garbonek,  $Na_2CO_3$ .

karbonoc'h g., anhidridenn garbonek kaledet, arveret evel danvez-yenaat.

karbongimiek ag., db. karbongimiezh.

karbongimiezh b., kimiezh devedadoù ar c'harbon; hv.: glacugimiezh.

karbongimiezh g., neb a studi ar garbongimiezh.

karr medañ-dornañ g.v.v., ijinenn c'hounit-douar emgfresek o troc'hañ an ed, o tispartiañ greun ha plouz hag o taskoriañ ar plouz hordennet hag ar greun ansac'het.

ked g., (Kim) stad kediet, sk.: ez a div atomenn hidrogen e ked gant un atomenn oksigen.

kediad g., (Kim) korf pur unanet en-kimiek ennañ meur a elfenn.

kediadur g., (Kim) ar c'hediañ; disoc'h ar c'hediañ.

kediañ v., (Kim) unañ en-kimiek meur a elfenn.

kediat ag., (Kim) perzh kediad gantañ, sk.: ur c'horf pur a vez lavaret kediat mar bez tu d'e ec'haozañ, dre wered ar wrez, an tredan pe ur c'horf all, e meur a gorf pur nevez disheñvel dioutañ.

kedidik ag., (Kim) tuet da gediañ; a c'hell kediañ aes.

kediedigezh b., (Kim) ar c'hediañ, sk.: an oksidenn vevargant a zeu diwar unanidigezh, kediedigezh, atom bevargant hag atom oksigen.

kedouez ag. (kv.Br.: ked- gouez), (Brd) o kedouezañ; dezhañ ar galloud kedouezañ; g., stad kedouez.

kedouezad g., (Brd) pezh a zo kedouezet; sl.: kedouezañ, Notenn, dangozañ, dangozek, Notenn, emouezad.

Notenn.- An diforc'h etre emouezad ha kedouezad a c'heller lakaat war-wel evel-henn : an emouezad eo pezh a emouezan pa emouezan ouzh un dra (ur wezenn da sk.); ar c'hedouezad eo ar pezh a gedouezan anemouez; sl.: kedouezañ, Notenn.

kedouezadenn b., (Brd) gwezhiad kedouezañ.

kedouezadur g., (Brd) ar c'hedouezañ.

kedouezañ v., (Brd) anavezout dihanteret hep savelañ diforc'h etre anavezout hag anavezad; sl.: dangozañ, emouezañ, anavezout.

Notenn.- Ar c'hedouezañ zo enta an anavezout hollat, - evel da skouer "santadur ar yec'hed" pe "santadur an dihet" o ren en un den a-rack an ampent ma teu da vezañ emouez outañ. "Santadur ar..." a renk ar lakaat etre krochedoù, rak reiñ un anv dezhañ a empleg bezañ emouezet outañ ha dre-se bezañ kaset anezhañ da get evel kedouezad ha graet ur santadur anezhañ.

kedouezet ag., (Brd) a zo kedouezet.

kedouezded b., (Brd) ar bezañ kedouez.

kedouezel ag., (Brd) db. ar c'hedouezañ.

kedouezet ag.& g., (Brd) neb a gedouez.

kedouezerezh g., (Brd) ar c'hedouezañ; obererezh kedouezañ; galloudezh kedouezañ.

kedouezour ag.& g., (Brd) an hini a gedouez, boud kedouez.

kedouezve g., (Brd) rannbarzh-bred merket gant ar c'hedouezañ.

kedouezvezañ v., (Brd) bezañ, hanvezañ en-kedouez; hv.: kedouezvout.

kedouezvoud g., (Brd) 1) boud kedouez, sk.: monedigezh al loen zo monedigezh ur c'hedouezvoud, hv.: kedouezour 2) boud ar c'hedouezañ (ar ster-mañ o vezañ ster resis nemetañ ar ger kedouezvoud) 3) evel kedouezve 4) an hanvezañ en-kedouez, hv.: kedouezvezañ.

kedouezvout v., (Brd) evel kedouezvezañ.

kedveno g., ar men boutin o ren war ur stroll-tud da gefver ar c'hoarvoudoù, sk.: gouez d'ar c'hedveno amerikan e tis arver ar gremm d'erc'hanel bezañ un danvez arackaat.

kedvevad g., bevedeg o kedvevañ gant un all.

kedvevañ v., bevañ a-gevret, db. daou vevedeg a c'uennoù disheñvel, hevelep ma tenn korvo an eil eus ar c'hweliou-beved egile.

kedvevat ag., o kedvevañ.

kedveved g., ar c'hedvevañ; hollad an doareoù o verkañ ar c'hedvevañ.

kefloc'hañ v., db. ur pezh en ur wikefrs, lakaat dre berzh e loc'h ur pezh all da loc'hañ, sk.: pa gemm an aerwask e pella pe e nesa pennoù ar gorrzenn gromm, o kefloc'hañ un nadoz dirak un dremm dereziat.

kefloc'hel ag., db. kefloc'hañ pe kefloc'herezh.

kefloc'herezh g., treuzkaserezh al loc'h dre bezhioù kenvallet.

kefridiad g., neb zo fiziet ennañ ur gefridi, ur gerg.

kefridiel ag., db. kement a vez difezet en-talvoudek gant un aotrouniezh degemeret.

kehant g., hent darempredañ.

kehental ag., db. ar c'hehentiñ pe ar c'hehentoù.

keidargemmek ag., (Fiz) db. daou gementad oc'h argemmañ a-gevreizh, a vez kendalc'hel feur an argemmadurioù anezho, sk. keidargemmek e vez ec'honad ha tolz ul lifvenn; (Jed) db. ur gevreizhenn o verkañ argemmadurioù daou gementad keidargemmek, sk.: keidargemmek e vez kevreizhennoù ar c'hentañ derez,  $ax + by + c = 0$

keidesaouek ag., a zo esacuennoù par ennañ, pe etrezo, sk.: an dereziou merket war an trenkventerioù a vez kendivizadel ha keidesaouek.

keitat ag., db. un hinienn, a zo he ferzhioù sellet an-komentadel evel keitadoù diwar berzhioù an hiniennoù all eus he rumad, sk.: dadeuziñ a ra buan an enbroerion, o kemer stuz an "amerikan keitat".

keitwask ag., (Fiz) a zo par ar gwask enno; a zo par ar gwask e pep lec'h ennañ; hv.: kenaerwask.

keitwaskeg b., (Fiz) teolenn ar c'heitwaskennoù treset war gartenn ur rann-barzh, sk.: er geitwaskeg ne deo ket ul luniadur diflach.

keitwaskel ag., (Fiz) db. keitwaskted.

keitwaskenn b., (Fiz) krommenn savelet dre eren dre ul linenn didorr an holl lec'hioù keitwask war ur gartenn.

kelennel ag., db. kelenn pe gelennerzh, sk.: Gwazva ar C'halenn a studi ez-kelennel goulenn an danvez-skoliad.

kelfenn b., nep ec'honenn ahalet a-zero'h, kendalc'hel he skejad a-zremm, sk.: par eo ar c'henn-gwask etre daou boent eus ec'honenn ul livfenn a-kempuez da bouez ur gelfenn livfenn dezhi  $1 m^2$  da ziaz ha da sav an derc'hhed etre an daou boent.

kelfennad b., endalc'h ur gelfenn, sk.: gant seurt benvegou, e vez lakaet ur gelfennad livfenn da gempouezañ ar gwaskoù da vuzuliañ.

kemberañ v., db. ur stêr, dibenniñ en ur stêr all, sk.: stêr gKolombia, o kemberañ enni ar Snake River.

kementadek ag., dezhañ perzhioù a anavezad dre ar muzuliañ pe ar c'heñveriañ; sl.: doareadek.

kementadekaat v., mont pe lakaat da vont kementadek; treiñ perzhioù doareadel udb. e perzhioù kementadel, sk.: an armezhour a rank kementadekaat traoù evel ar vrogarantez, ar c'hredennoù, h.a.; sl.: doareadekaat.

kementadekted b., ar bezañ kementadek.

kementadegzh b., perzh bezañ kementadek.

kementadel ag., db. an anavezout pe ar perzhioù anavezet dre ar muzuliañ; ko.: doareadel.

kemmeskvro ag., a veur a vro ha mesket, sk.: an engroezioù kemmeskvro a weler o naradiñ dre ar straedoù.

kempoell ag., (Pll) o kenglotañ en-poelloniell; g., kenglotadur poelloniell.

Notenn.— Daou amplegad zo d'ar c'hempoell : a) ereoù poelloniell b) na vezañ emzislavar ebet; sk.: "Taldir a oa brezhon, Taldir a oa barzh, Taldir a oa barzh brezhon" zo ur reizhiad kempoell; "Taldir a oa brezhon, Taldir a oa brogarour, Taldir a oa brogarour gall" zo ur reizhiad di-gempoell (digempoell en divoud); "Taldir a oa brezhon, Taldir ne oa ket brezhon" (digempoell el levar).

kempoellaat v., (Pll) mont pe lakaat da vont kempoell.

kempoellañ v., (Pll) kenglotañ en poelloniell; lakaat da kenglotañ en-poelloniell.

kempoellded b., (Pll) ar bezañ kempoell.

kenaerwask ag., (Fiz) a zo enno aarwaskoù par, sk.: ez ereer dre ul linenn didorr an holl savlec'hioù kenaerwask; sl.: keitwask.

kenaozad g., (Kim) danvez, meskad pe godiad, a zo meur a elfenn ouzh e ober.

kenarzemm, a kenarzemm rv.& gl., (Fiz) db. div pe lies elfenn, a c'hoarvez dezho arzemmañ a-gevret.

kenarzemmad g., (Fiz) arzemmad un elfenn sellet a-geñver gant arzemmad un elfenn all.

kenarzemmadur g., (Fiz) ar c'henarzemmañ.

kenarzemmañ v., (Fiz) oc'h arzemmañ a-gevret.

kenarzemmat ag., (Fiz) o kenarzemmañ.

kenarzemmad b., (Fiz) perzh bezañ a kenarzemm, sk.: tu hevelop kenarzemmad a anavezomp : kraskiñ a ra an ec'honad pa zigresk ar gwask.

kenasant g., emglev dre zegemerout a-gevret udb., sk.: talvoudekaet a vez pep notenn geitat dre genasant Gwazva ar C'halenn hag ar skoliad.

kendael b., gwered an eil war eben eus div elfenn lakaet en ur c'heñver a eneberezh.

kendalc'helezh b., ar bezañ kendalc'hel, sk.: digemet e vez ur c'horf pur dre savolañ kendalc'helazh e berzhioù fizikel.

kendalc'henn silluskel b. ag., (Fiz) mentenn, kendalc'hel evit ul livfenn, o verkañ tuadur ar gorre anezhi da vihanaat; sl.: tannder-gorre.

kendec'heriad g., (Syr) ger, stumm geriel diwanet da geñver un hevelop ezhomm-yezhañ hag un all, sk.: kemeromp enta roll kendec'heriadoù brezhonek ar galleg "addition".

kendec'heriad ag., (Syr) a zo dezhañ perzh ur c'hendec'heriad.

kendivizad g., ar pezh, prl. tidel, degemeret dre emglev gant meur a hini.

kendivizadel ag., degemeret, prl. a-did, dre emglev, sk.: etrezo hãrzoù kendivizadel treset a-dreuz da stummadurioù unvan ar glenn.

kendivizadur g., ar c'hendivizout; disoc'h ar c'hendivizout.

kendivizout v., degemerout; prl. a-did, dre emglev.

kendouezhiad g., hollad elfennoù kendouezhiet.

kendouezhiañ v., lakaat a-gevret hep na ve ere ebet etre an elfennoù kenlakaet; sl.: kenlakaat.

kendouezhiañ

keneneber g.& ag., pep hini eus daou zen, daou nerzh, h.a., a stourm an eil ouzh egile.

keneneberzh g., obererezh kenenebiñ.

kenenebiñ v., stourm an eil ouzh egile.

kengenidik ag., bet ganet en hevelep bro, rannvro, h.a.

kengenidig g., neb a zo kengenidik.

kengeodedad g., neb a zo eus an hevelep keoded hag, sk.: ar Re Zu a c'houlenn gwirioù kevatal da wirioù o c'hengeodediz wenn.

kenneral ng., (Syr) etre gerioù, sk.: anv a reer eus kevazaster kengeral pa ziskouez gerioù kenetrezo keñverioù heñvel ouzh ar c'heñverioù a zo etre o dec'hezioù.

kenoltennañ v., db. daou c'her, div silabenn, oc'h ober ur glotenn.

kenorfadurel ag., db. kengorfadurezh.

kenorfadurezh b., studi-geñveriañ korfadurezh gouennoù disour.

kenorfadurour ag.& g., gourdon war ar kengorfadurezh.

kenorreenn b., gorreenn boutin etre div ec'honenn.

kenooun g., ober o tennañ da gement a sell danevellet, diellaouiñ, embann, sk.: Gwazva ar C'hengoun zo e geñveridi darber an embannadurioù, derc'hel an diellaoueg, ren ar c'helaouerezh.

kengrad b., youl frank; emglev a-youl-frank, sk.: kement dael etre Gwazva ar C'helenn hag ur c'helenn, mar ne vez ket kompazet dre gengrad, a vez daveet dirak Gwazva ar Genurzh.

kengraour g., (Rzh) neb a gemer perzh en ur c'hengread.

kengread g., (Rzh) kendivizad a-geñver gant un taol kenwerzh, ur marc'had, ur vestidigezh arc'hant pe labour, ur gevrat, h.a., sk.: envel ur c'heñveridiad evit klozidigezh ar c'hengread.

kenvezhoniezh b., studi ar c'heñverioù a zo etre ar yezhoù, dh. ar yezhoù kar.

kenstroll g., ere o terc'hel elfennoù a-gevret; pezh a zo dalc'het a-gevret, sk.: molekulenn an dioksidenn garbon zo kenstroll div atomenn oksigen gant un atomenn garbon; ag., dalc'het a-gevret.

kenstrolled g., hollad elfennoù dalc'het a-gevret.

kenstrolleñ v., derc'hel a-gevret; sl.: kenlakaat.

kensteriegezh b., ar c'haout keñverioù dre ar ster; hollad ar c'heñverioù dre ar ster, sk.: abeg zo da bouezañ n'eo ket hepken war gensteriegezh

ekiantel klok an daou c'her, met ivez war o gwirionded.

kenlakaat v., lakaat a-gevret, sk.: ur meskad a zo e elfennoù kenlakaat ennañ hep dazgwered kimisk etrezo.

Notenn.- Kenlakaat zo dezhañ ur ster hollek; hervez an doare m'emañ kenlakaat an elfennoù a reer anv eus kendouezhiañ pa n'eus ere ebet etre an elfennoù evel da sk. en ur meskad kimiek; eus kenstrolleñ pa'z eus un ere etre an elfennoù kenlakaat; hervez doare ar c'heñ-strolleñ e-unan e komzer eus kevelstrolleñ pa vez bodet an elfennoù bevenn ouzh bevenn evel da sk. ar vein en ur vogar, eus kevanstrolleñ pa'z a an elfennoù bodet d'ober un unvez nevez disheñvel he ferzhioù, evel da sk. an atom en ur volekulenn.

kenstudi b., studi a-gevret.

kenstudiañ v., studiañ a-gevret.

kensturdalek ag., (Men) dezhañ stumm ur gensturdaleg, sk.: ul lestr kensturdalek, dezhañ un diaz hirgarrezek 40 cm hed, 20 cm led, zo harp ouzh ur blaennenn a-zremm.

kenteliezh g., ar c'henteliañ; obererezh kenteliañ.

ken-tonkad g., hevelep tonkad, tonkad heñvel; den, tra zo dezhañ an hevelep tonkad ha, tud, traoù zo dezho an hevelep tonkad; ag., a zo dezhañ, dezho an hevelep tonkad, sk.: kement gra gaoues ouzh ar sevenadur brezhon hag ar sevenadurioù kentonkad dezhañ.

ken-tarmen g., (Yad) tarmen ma tave dezhañ ar raganv-stagañ; hv.: ger-diaraok.

ken-trevezhoneg g., (Yon) brezhoneg ar prantad sellet gant ar yezhourion evel derou istorel ar yezh, eleze ar 6<sup>t</sup>-8<sup>t</sup> kantved.

ken-uhelder ag., en hevelep uhelder.

kenurzhiañ v., lakaat ha derc'hel azas diouzh ur reizh, ur pal.

Notenn.- E-keñver levrierezh en deus ar c'heñ-urzhiañ daou bennskourr : frammañ ha sterniañ. Frammañ zo dezhañ daou skourr : saval ar steufiv, e zerc'hel en e reizh. Ar sterniañ zo anezhañ kemer an dirvoud ar steufiv; dre-se e ra div rann eus an dirvoud : an dirvoud kemeret evel diabarzh, an dirvoud lezet evel diavaez.

keñvereg g., (Pl) elfenn a zo a-dal d'un elfenn all, dre berzh aoz an traoù pe aoz ar reizh, sk.: ar c'hlotadur sonframmet etre ar ger "sammadur" hag e keñvereg "lamadur".

keñveriadus ag., a c'hall bezañ keñveriet.

keñveriek ag., a dalc'h ar c'heñverioù, sk.: keñveriek eo talvoudgezh

ar gwidre, berzh a raio er c'heñver-mañ, a zister skoazell e vo er c'heñver-hont.

kenvouezhienn b., (Yon) mouezhiad na c'hell bezañ distaget nemet gant harp ur vouezhienn; sl.: mouezhadoniezh.

kenvuhez b., buhez voutin, sk.: emgfreek e vez gwazadurioù ar genvuhez; sl.: kedvuhez.

kenvuhez ag., db. genvuhez.

kenwaz g., pep hini aus izili ur strollad labourerion; ezel ur gwazva; hv.: gwazour.

kenwazel ag., db. kenwaz, sk.: gant va gourc'hemennoù kenwazel.

kenwazelezh b., perzh bezañ kenwazel; perzh bezañ kenwaz, dere a genwaz.

keoded b., kêr pe rangêr; ster strizh : kêr dezhi un dezvad a-ziforc'h, un dezvad stadel, sk.: Keoded Vatikan; ster astennet : bro dezhi un dezvad stadel.

keodedel ag., db. keoded.

keodedelezh b., perzh bezañ keodedel; perzh bezañ keoded, aleze kacut un dezvad a-ziforc'h, un dezvad stadel, sk.: da zeiz kentañ ar bloavezh 1947 e voe graet ur gammad war-raok pa voe anavezet ar geodedelezh kanadian.

kerentiad g., (Kim) rumad elfennoù dezho perzhioù kimiek heñvel, sk.: kerentiad ar metaloù alkaliek, ennañ al litiom, an natriom, ar c'haliom, h.a.

kerneç'honad g., (Men) ec'honad ur gornenn.

kerneç'honenn b., (Men) kernenn ec'honenn.

kernenn b., (Men) lun mentoniel, gornenn pe ec'honenn, savelet dre loc'h un eunenn diloc'h ur poent anezhi ha harp ouzh ur gornenn gloz diloc'h.

kernorread g., (Men) gornread ur gornenn.

kernorreann b., (Men) kernenn gornenn.

keurvolekul as., (Kim) molekul o c'hoarvezout aus un niver bras a atomennoù, sk.: molekul kalz liesekoc'h a anavezet, enno miliadoù atom; keurvolekul int anvet.

kevandirelezh b., perzh bezañ kevandirel; perzh bezañ kavandir, sk.: dre berzh ar c'hemmoù-ledred bras, an torosennadur, ar gevandirelezh, e tiskouez Norzamerika lies hinbarzh.

kevanenn b., unvez kevan; nep tra sellat evel unvez kevan, sk.: lavarout a reer ez eo real parzh ur gevanenn, pa vez reizh diouzh kempoell ar gevanenn.

keñveriek

kevanframm g., framm klok drezañ e-unan.

kevanframmañ v., kevreañ ur savadur an doare ma vo klok drezañ e-unan

kevanigad g., hollad klok drezañ e-unan.

kevanstroll g., ere o terc'hel elfennoù kevanstrollet; pezh a zo dalc'het kevanstrollet; ag., er stad kevanstrollet.

kevanstrollad g., hollad elfennoù kevanstrollet.

kevanstrollañ v., bodañ hag eren unvezioù an doare d'ober un unvez nevez disheñvel he ferzhioù diouzh perzhioù an unvezioù bodet enni.

kevarzh ag. (hêr.: comard-), kendere, kevatal a wirioù (da); g., neb zo kendere, kevatal e wirioù (da); ezel ur gevarzhe.

kevarzhe b. (hêr.: comarde), bodad tud kendere, kevatal o gwirioù.

Notenn.- Diforc'haf : kevredigezh, (ster hollek) hollad tud etrezo darempredoù urzhiet pe get, (ster a-ziforc'h : ar Gevredigezh) hollad an dud, sellet diouzh ar c'heñverioù hag an darempredoù a zo etrezo; kevredad, bodad tud, pe tudelezhioù, savet en urzhiad, pe sellet evel un urzhiad; kevarzhe a emglec un arster skourel : bodad tud etrezo keñverioù a gevataldor ha darempredoù diazezet war ar gennrad. Keñveriañ : ur gevredigezh sevenadurel, ur c'hevredad kenwerzh, ur gevarzhe genskoazell.

kevarzhel ag., db. kevarzh; db. ar Gevredigezh sellet en-skourel evel ur gevarzhe.

Notenn.- Diforc'haf : kevredigezhel, sk.: heuliadoù kevredigezhel ar greantarezhañ; kevredadel, sk.: studiañ ar c'heñverioù etre tud ha mañ evel anadenn gevredadel; kevarzhe, sk.: bennozh d'al lezennoù kevarzhel o devez ar c'hopridi ehanoù paet.

kevarzhelezh b., perzh bezañ kevarzhel; perzh bezañ kevarzh.

kevazas ag. (hêr.: comadas), o klotañ reizh gant an ezhomm, ar pal, h.a., sk.: ul lavarenn gevazas ouzh pezh zo da lavarout, ur respont kevazas ouzh ar goulenn, un ti kevazas ouzh ezhommoù ar re a zo o chom ennañ.

kevazaster g., ar bezañ kevazas, sk.: kevazaster an dec'heriad ouzh e zec'heriad.

kevazaster kengerel g.ag., (Syr) kevazaster ar gerioù sellet evel elfennoù ur reizhiad-dec'heriañ, sk.: anv a reer aus kevazaster kengerel pa ziskouez gerioù kenetrezo keñverioù heñvel ouzh ar c'heñverioù a zo etre o dec'heriedoù, pe, resisoc'h, pa zec'her ar c'heñverioù-stumm etrezo ar c'heñverioù-ster a zo etre o dec'heriedoù.

kevazaster kengerel gerdarzhel g.ag.ag., (Syr) kevazaster kengerel diazezet war ar gerdarzhadur.

kevazaster kengerel gerdarzhel

kevazaster kenqerel sonframml g.ag.ag., (Syr) kevazaster kengerel diazezet war frammadur ar sonioù a ya d'ober ar gerioù.

kevazaster unqerel g.ag., (Syr) kevazaster ur ger sellet evel unvez-dec'h=eriañ, eleze evel dec'heriad e-keñver e zec'heriad.

keveldeuz g. (hbr.: cemel), teuzadur bevennoù daou bezh metal lakaat stok-ouzh-stok da vezañ soutet.

keveldeuzadur g., ar c'heveldeuziñ; disoc'h ar c'heveldeuziñ.

keveldeuziñ v., soutañ daou bezh metal dre lakaat teuziñ ar bevennoù anezho lakaat stok-ouzh-stok.

kevelele g., keñvereg dre heñvelder ar perzhioù, prl. diouzh ur savboent resis, sk.: askell an evn zo kevelele brec'h an den diouzh savboent ar gengorfadurezh, kevelele biñs ar vifsaaskell eo avat diouzh savboent al loc'honiezh.

kevelebiñ v., lakaat kevelele; savelañ ur c'heñver a gevelepted.

kevelep ag., keñvereg dre heñvelder ar perzhioù, sk.: ar vouzhiad zo kevelep d'ar soniad lakaat tetroz ar c'henn oc'h enebiñ mouezhiadoniezh ouzh soniadoniezh.

kevelepted g., perzh bezañ kevelep.

kevelstrollad g., hollad elfennoù kevelstrollet.

kevelstrollañ v., bodañ hag eren bevann ouzh bevann, sk.: merkañ a dleer ne vez ket an atom kevelstrollet, hogen darnsanket an eil en eben; sl.: kenlakeat.

keveskemm ag., o vont diouzh an eil tu evel diouzh egile, sk.: ur gevrat o tiferañ ar gouestloù keveskemm; o vont diouzh an tu enebek, sk.: al lavarenn geveskemm.

keveskemenn b., (Pll) lavarenn geveskemm, lavarenn bet dre eilpenañ urzh an termennoù en ul lavarenn all, sk.: al lavarenn "pouez ur c'horf 1 kg tolz zo 9,81 N" he deus da geveskemenn al lavarenn "tolz ur c'horf 9,81 N pouez zo 1 kg".

kevion ag., (Kim) a zo ennañ mōlekul ionaet war-zileizh.

kevionenn b., (Kim) liñvenn gevion.

kevran b. (krBr.: queffran), lodenn, parzh, skourr en ur gevredigezh.

kevranñ v., rannañ e lodennoù, dasparzhañ.

kevratad g., neb zo lodenn en ur gevrat.

kevratañ v., ober ur gevrat; sevel ur gevrat pe gevratoù, sk.: ar c'hevratañ ne deo nemet un arvez eus an treiñ-koskor.

kevratat ag., a zo lodenn en ur gevrat.

kevreizh b., (Kim) renkad korfoù karbongimiek dezho an un perzhioù, sk.: ar gevreizh trenkenn.

kevreizhed b., (Jed) ar bezañ kevreizh, sk.: e tenner korvo eus kevreizhed an aerwask d'an uhelder.

kevreizhal ag., (Kim) db. kevreizh, sk.: ar stroll kevreizhal OH.

kevroll g., ar c'hevrollañ; skourr obererezh o pladiñ gant ar c'hevrollañ, sk.: ar c'hevridiad fiziet ennañ kevroll ar skolidi.

kevrollañ v., verb-rumm evit enrollañ, ezrollañ, derc'hel roll, h.a.

kevrollerezh g., obererezh kevrollañ.

kevrollour, kevroller ag.&g., neb a gevroll, neb a zo e gefridi kavrollañ.

kib b., doare lestr ledan ha digor arveret en arnodvaoù fizik, kimiezh, h.a.

kibad vevargant b.g., kirinad vevargant arveret en arnodvaoù fizik, kimiezh, h.a., evit treuzlestrañ an aezhennoù da sk.

kib-tredanrannañ b.v., beol arveret er greanterezh evit tredanrannañ al liñvennoù, sk.: e daou gombod e vez dispartiet ar gib-tredanrannañ dre ur speurenn eplu en asbest.

kib-Volta b.g., ardivink ijinat gant Volta evit ec'haozañ an dour dre an tredan, anezhañ un doare kelozn treuzet e zeun gant div varrennig metal anvet tredanodeoù.

kilvizierezh g., micher ar c'halvez; labour ar prenn.

kimingadezh b., pezh a vez kemennet gant ur c'hannad, ul levier, h.a., sk.: en e gimingadezh d'ar C'huntell e genver 1956, ez erbad al levior ur c'hrennañ a 20 % war ar gorreadoù dindan winizh.

kimioberiek ag., tuet da vont e dazgweredoù, e kediadurioù kimiek.

kimioberiegezh b., perzh bezañ kimioberiek; hv.: oberiegezh kimiek.

kimior g., neb a blaustur war ar gimiezh.

kinvi as., kedvedad o c'hoarvezout eus falu ha foue, o kreskiñ war ar reier, ar gwez, sk.: al livadur rogell tennet goude goñf eus seurtoù 'zo a gūvi.

kirin b., lestr arnodva e gwer, ledan ha sklat.

klapad g., gwikefre o lezel an heverennoù da dremen diouzh un tu, nann diouzh an tu enep; ar pezh haloc'h eus ar wikefre-se; hv.: trap, trapig.

kletadurezh b., aezamentoù ar vuhez, prl. degaset gant an arokaat kalvezal, sk.: en "trailer" e ren ar gletadurezh arvevesañ.

kleuzeur dre gannded b.gl.b., kleuzeur a zo anezhi ur glogozenn war ec'haezet, enni un neudenn vetal o vont kann dre ur red tradan.

klevded b., pezh ur gensonenn (ur genvouezhienn) harvez ma tason pe get piegoù ar vouezh; sl.: amglev, heglev.

klor g., (Cl; elfenn nn.17; tolz Nad-atom = 35,457) divetal aezhel diouzh an doareoù reol, aezhenn wervelen heged, tanaillhus-kenan d'ar gwiadoù bev, ar voutinañ eus an haluzennoù, kavet dreist-holl e stumm kloridenn natriom.

klorañ v., (Kim) kediañ pe lakaat da gediañ ouzh ar c'hlor, sk.: ar raz klorat, ar gomoù klorat.

klorat g., (Kim) hal an drenkenn glorek.

klorat kaliom g.g., (ClO<sub>2</sub>K) hal kaliom an drenkenn glorek, amzileizh, arveret er vezekniezh evel diboreer, er greanterezh evel diliver hag evel danvez tarzh.

klorat natriom g.g., (ClO<sub>2</sub>Na) hal natriom an drenkenn glorek, dezhañ dre vras an hevelep perzhioù hag ar c'hlorat kaliom.

klorenn waskventañ b.v., boest kalet klozet gant ul lienenn stirenek, e kehent gant ur bibenn e stumm U a zo enni ul liñvenn arlivet, hevelep ma teu er bibenn un dilive kenfeur d'ar gwask o weredif war al lienenn pe sanker ar gloreenn an ul liñvenn, ha ma c'heller dre-se muzuliañ ar gwask-se.

klorhidrek ag.; trenkenn g- b., liñvenn daskrignus dileizhenn dre zour a gloridenn hidrogen HCl, danvezet evit kevanaozañ ar c'hloridennoù poliva inil, ar gomoù klorat, h.a.

kloridenn b., (Kim) hal an drenkenn glozhidrek; ion Cl<sup>-</sup>.

kloridenn galion b.g., (KCl) hal kaliom an drenkenn glozhidrek.

kloridenn hidrogen b.g., (HCl) kediañ klor hag hidrogen, auzhenn diliv, brout d'ar c'hwesa, aes da liñvennañ, hezilaizh-kenan en dour, trenkenn glozhidrek a reer eus he dileizhenn.

kloridenn natriom b.g., (NaCl) hal natriom an drenkenn glozhidrek, oc'h ober al lodenn vrasañ eus an holen-mor hag eus an holen-meen, bezant en darnvuiañ eus ar gwiadoù bev.

klotennañ v., ober ur glotenn (gant), sk.: heñvel a vezo evit "-if" ha "diñ" a glotenn gant "dibriñ".

klotennaouiñ v., sevel klotennoù.

klozenn b., boest kloz a bep tu, sk.: un aezbouezher dre glozenn a c'hoarvez eus ur voest vetal peurstank hag ec'haezhet.

koadeg c'hloev b.ag., lec'h ma kresk gwez rouez war un dro gant strouezh, sk.: koadegi gloev zo ouzh ar pantennoù, gwez dizibourc'h ha bodennoù speredek anezho.

kokennig b., lestr arnodva e pri poazh pril., evit ar gweazverkoù bras, sk.: tommomp un tamm sulfur en ur gokennig pri.

kog g., pezh sanellerezh o lezel pe o herzel un heverenn da dremen harvez al lakadur roet d'un alc'houez, sk.: an div hanterbellenn o vezañ an eil ouzh eben, ez ec'haezher etrezo hag e serror ar c'hog.

kog war boentell g.gl.b., kog a zo an elfenn stankus anezhañ e stumm ur gemenn, sk.: er greanterezh e kavaz an oksigen moustrer betek 120 kgp/cm<sup>2</sup> e korzennoù dir serrret dre ur c'hog war boentell.

kontlec'h g., diazevadur kenwerzhel en ur vro estren, sk.: ur c'hontlec'h diazezet gant Kevredad-Fauraoua Pleg-Mor Hudson.

koread g., annezad Korea; hv.: korean.

korfadur g., ar c'horfañ; disoc'h ar c'horfañ; doare m'emañ aozet ha kompennet an elfennoù a ya d'ober udb.

korfadural ag., db. korfadur; db. korfadurezh.

korfadurezh b., studi an doare m'emañ aozet ha kompennet an elfennoù a ya d'ober udb., korf un dra bev pril.

korfadurour g., neb a studi ar korfadurezh.

korfañ v., reiñ korf da; aozañ ha kompenn an elfennoù a ya d'ober udb.

korf eun g.ag., (Kim) korf na c'heller ket ec'haezañ o korfoù all; ko.: korf kediañ, kediañ.

korf pur g.ag., (Kim) danvezenn o c'hoarvezout eus ur seurt hepken a volekul, sk.: ur c'horf pur zo un danvezenn na c'heller dispartiañ e div zavezenn all dre rannstilhañ pe dre rannkorfañ; ko.: meskad.

kornbeañ v., pagañ dre ar c'hozn, sk.: kornbagit amañ ur werzhad timbroù par da deir gwezh timbradur ho kasadenn.

korvell g., lun stummet gant un eamad war gerc'h, ur gilwedenn; (Kim) lun stummet gant ur volekulenn, ur rann volekulenn, a zo anezhi ur chadennad war gerc'h, e stumm kilwedenn; ko.: diqorvell.

korvellek ag., dezhañ doare ur c'horvell; ko.: diqorvellek, alifatek.

korvoader g., gounid o tont diwar ur c'hevala, un embregadenn, ur vrokadenn, h.a., sk.: euzhpenn ar buzadoù empleget gant o mental genwerzh, e tenn ar Stadoù-Unanet korvoadurioù uhel eus o c'hevalaoù postet arallvro.

korvoder g. (krbr.: corvoder), pezh a c'hounid a vez tennet, bep bloaz

da sk., eus ur vicher, un embregerezh, ur rann armerzh, h.a., sk.: evit ar wezh kentañ en e istor e sav korvoder greanterezh ar Su ken uhel ha korvoder e c'hounit-douar.

korzenn-leuskel b.v., korzenn penneget ouzh ur savadell evit kas er-maez an aezhenn o tiwanañ.

korzenn-silluskaf b.v., korzenn bihan a-walc'h he skejad-diabarzh evit ma ve anat enni gwered ar silluskerezh.

kotoñsus ag., amsavus da c'hounidigezh ar c'hotoñs; o kenderc'hañ kotoñs, sk.: an nezadegoù hag ar gwiaherezioù a vez bremañ o paotaañ e Stadoù kotoñsus ar Su.

kouarz g., kailhastrenn bur kavet en natur dindan stumm mein strinkennek, arveret el luc'honiezh hag en dredanouriezh.

kouevr g., (Cu; elfenn nn.29; tolz Nad-atom = 63,54; douester = 8,95; teuzverk = 1 084<sup>g</sup>) metal arruz, govelius hag orjalennus, ar gwellañ tredanereer war-lerc'h an argant, kavet en natur er stad eun pe gediad (sulfidennoù).

koultron g., anv-rumm evit an danvezennoù arzu gludak a chom e dilerc'h stailhidigezh ar c'head, ar glauc, an tireoul; sl.: benzen, ter.

kraonell b., elfenn greiz; rann galatoc'h e diabarzh un dolzenn, sk.: ar menezioù, kraonelloù strinkennek ha gwiskadoù kenthaolek anezho.

kreiz-bunt g.v., poent-krog er pengennerzh diwar nerzhioù-bunt ul liñvenn ouzh ur c'horreann.

kreizennañ v., degas, daveañ d'ur greizenn; lakaat e dalc'h ur greizenn.

kreizennar g., neb a greizenn; neb a zo daveat dezhañ pe drezañ kement a sell ouzh udb.

kreizennerezh g., obererezh kreizennañ; skourr obererezh a vez daveat dezhañ pe drezañ kement a sell ouzh udb., sk.: Gwazva ar C'hreizennerezh zo e gefridi urzhiañ ha seveniñ an darempredoù.

kreizkorn ag., o vezañ pe o tremen e kreiz ur c'horn, eleze keit-ha-keit diouzh an daou du anezhañ.

kreizkornenn b., eunenn greizkorn.

kreizserzh ag., serzh war ur ranneunenn an he c'hreiz.

kreizserzhenn b., eunenn greizserzh.

kreiztu ag., o vezañ pe o tremen e kreiz un tu, da sk. eus ul liestueg.

kreiztuenn b., eunenn kreiztu.

krennvezh b., (Yon) yezh en he stad emdroadur istorel etre, alaze goude

stad an henevezh hag a-rack stad ar yezh-vremañ.

krennvezher g., (Yon) neb a gamze ur grennvezh.

krennvezhour g., (Yon) neb a studi ur grennvezh.

krennvezhouriezh b., (Yon) studi ur grennvezh.

krennvezh g., barzh a skrive er grennvezh, sk.: marteze a-walc'h o oa deuet da vezañ ur c'herienn peuzanster evit hor c'hrennvezhed e-unan.

krennverk g., (Dil) merk krennet d'ar pep retañ evit un arver dibar, sk.: sotret e vezer, pa ne vezer ket en arvar a zroukvesk, da grenañ diellverk un teul dre venegiñ hepken ar vonzann ha sifroù en teulrifiv: ar c'hrennverk eo.

krestenn b., gouelezennad karbonat kalkiom o tiwanañ ouzh speurennoù el listri ma tommer dour, kaoterioù, h.a., sk.: gant an heveleggouelezenn e vez skoilhet arc'hwel ar c'haoterioù : ur grestenn vaen-raz a chom peg ouzh o speurennoù, o stankañ tamm ha tamm an tuellennoù.

krestennañ v., gouelezennañ dindan stumm krestenn; lakaat krestenn war, sk.: lavarout a reer ez eo ar gaoter krestennet.

krom g., (Cr; elfenn nn.24; tolz Nad-atom = 52,01; douester = 6,9; teuzverk = 1 500<sup>g</sup>) metal kalat, gwann, dizaskrign, tost a-walc'h d'an houarn, kavet en natur dindan e oksidennoù.

krommenn-live b.g., krommenn savelet dre eren dre ul linenn didorr an hall boentoù kenlive, sk.: arat diouzh krommennoù-live.

kroniad g., (Arm) yoc'had varc'hadoueriezhioù nann gwerzhet.

kroniadur g., ar c'hroniañ; disoc'h ar c'hroniañ; (Arm) yoc'hadur marc'hadoueriezhioù nann gwerzhet.

kroniañ v., mirout (ul liñvenn) a redek; (Arm) dastum marc'hadoueriezhioù nann gwerzhet.

krugell an oadoù b.l.s., krommenn deluniañ niveroù tud ur boblañs renket dre urzh-kreskiñ an oadoù.

kulvor g. (Kb.: culfor, kv.Br.: mulgul), ervenn ma sank ar mor etre daou dir pe e diabarzh un tir.

kuntall g. (h.Br.: cuntul-, Kn.: cuntall), bodadenn, strolladenn; bodadenn-lozenniñ, sk.: Washington, Kêrbenn ar C'hevread, sez ar C'huntall (Congress).

kur g., 1) paraadur 2) mezagadur, sk.: ur c'hur kousked 3) chomadur a reer en un ti-, ul lec'h-yac'haat.

kurat v., 1) paraañ 2) mezagañ 3) ober ur chomadur en un ti-, ul lec'h-yac'haat.

kurdrev b., diazevadenn-yac'haat.

kurdrevad g., neb a zo oc'h ober ur chomadur en ur gurdrev.

kurdreviñ v., ober ur chomadur en ur gurdrev.

kurdrevour, kurdrevert ag. & g., neb a gurdrev.

kuriad g., neb a zo o kurat, er ster 3.

D

dambur ag., (Kim) hogos pur, sk.: an trapezh gwenn zo kailhastrann dambur.

damec'haezh ag., (Fiz) hogos ec'haezh.

damgompez ag., hogos kompez, sk.: ar re gentañ trevet a voe ar ranndirioloù-mañ, bennozh d'o zozosennadur damgompez.

damingal ag. & rv., hogos ingal, sk.: ar C'hompezennoù Bras, o sevel damingal war-du ar goznog.

damouezh v. damouezet, db. ar bevedeg, atebif ouzh nep tra o weredif outañ.

damoug g., ateb, prl. eun ha savelek, a-berzh ar bevedeg ouzh nep tra o weredif outañ, sk.: stankadur en anal dre berzh un damoug-diwall.

damzoolenn b., dezzevell-sturiant amstrizh, dispis, o c'houzñv dibaxderioù, h.a.

damziwerzhad ag., er jederezh arnodel, db. un elfenn a zo ken bihan he gwerzhad e-keñver ar gwezhadoù all ma c'heller he lezel e-maez kont d'an derez resister klasket.

dangozad g., (Prd) pezh a zo dangozat.

dangozañ v. (kv.hBr.: -cor-, ezcor), (Prd) anavezout hep savelañ un anavezad diforc'h diouzh an anavezour; sl.: ergozañ, Notenn.

dangozat ag., (Prd) a zo dangozat; savelet diwar-bouez an dangozañ, sk.: hirisus eo an naer-gobra (perzh dangozat), he dantadur zo marvus (perzh ergozat); sl.: ergozat.

dangorek ag., (Prd) dezhañ doare, ennañ perzh an dangozañ, sk.: un emzalc'h dangorek, ur varn dangorek.

Notenn.- An dangozañ zo un anavezout na anavez nag ar pezh ez eo nag ar pezh n'eo ket. Dangozour hag ergozour e vez bepred war un dro pep den; evel ergozour e saval an anezadur ma/nann-ma, evel dangozour ez eo dic'houzvez anezhañ; alese an daou emzalc'h : ergorek (o tizrannañ er merzhout, en dezvout, h.a., pezh a zo d'an anavezout diouzh pezh a zo d'an anavezad, ha se dre zizrannañ en anavezout an dangozañ diouzh an ergozañ); dangorek (o lezel dangozañ hag ergozañ unanet en anavezout, dre-se o lezel an dangozañ da wazañ an dizrann anavezout/anavezad).

dangorekted b., (Prd) ar bezañ dangorek.

dangoregezh b., (Prd) perzh bezañ dangorek.

dangorel ag., (Prd) db. dangozañ, sk.: ar gudenn a chom hag-ef e c'heller hevelebiñ an anavezout loenel ouzh an anavezout dangorel.

dangorelded b., (Prd) ar bezañ dangorel.

dangorelezh b., (Prd) perzh bezañ dangorel; domani an devoudoù dangorel, sk.: gwiziennet en dangorelezh emañ ober mab-den.

dangorelour ag. & g., (Prd) dalc'hiañ an dangorelouriezh.

dangorelouriezh b., (Prd) kelennadurezh o zeñf maie'h a bouez d'an dangorelezh eget d'an ergozelezh, o sallout da skouer an dangozañ evel an doare da dizhout ar wirionez pe ar gwirvoud.

dangozour ag. & g., (Prd) neb a zangoz; kv.: ergozour.

danvezelour ag. & g., (Prd) dalc'hiañ an danvezelouriezh; sk.: lañs ur sevenadur danvezelour war ur sevenadur danvelour.

danvezelouriezh b., (Prd) kelennadurezh o lakaat an danvez evel ar gwira vout nemetañ; kelennadurezh, pe emzalc'h er vuhez, o lakaat evel danvezal an talvoudoù pennañ.

danvezenn dizunvan b. ag., (Fiz) danvezenn o tiskouez d'an imbouc'h bezañ rannigoù diseurt ouzh hec'h ober.

danvezenn unvan b. ag., (Fiz) danvezenn na ziskouez ket d'an imbouc'h bezañ rannigoù diseurt ouzh hec'h ober.

danzeel ag., db. danzen; db. kenderc'hedoù labour-danzen mab-den, ko.: naturel.

danzeelded b., ar bezañ danzeel.

danzeelezh b., perzh bezañ danzeel; domani danzeel.

daouniver ag., daougement e niver, sk.: harvez goulakadenn Avogadro e vez en dour ar molekul hidrogen daouniver d'ar molekul oksigen.

daouec'honad ag., daouement e ec'honad, sk.: an hidrogen kediet zo daouec'honad d'an oksigen kediet.

daouzegeñn b., (Krf) parzh kentañ ar vouzellenn voan, anvet evel-se pa vez dezhi e-tro daouzek biziad hed; (Lzh) gwerzenn daouzek silabenn.

daouzegeñnek ag., (Lzh) a zo daouzek silabenn ennañ.

darbenn v., degemer, asantiñ, kavout mat.

darbenn g., degemeridigezh, asant.

darbennus ag., degemerus, asantus, sk.: mar bez darbennus disintez Gwazva ar Genurzh.

darnemren ag., emren evit traoù 'zo hepken, sk.: darnemren eo pep hini eus Stadoù-Unanet Norzamerika; g., stad bezañ darnemren.

darnsankañ v., db. un elfenn ec'honnenek, mont kenlec'h ul lodenn anezhi gant ul lodenn eus un elfenn ec'honnenek all, sk.: en hevelop kenstrolladoù ne vez ket an atom kevalstrollet, hogen darnsanket an eil en eben.

darvoud g., 1) kement a zegouezh 2) kement kemma a zegouezh gant ur boud hep kemmañ an anien anezhañ 3) pezh a c'hell kemmañ hep na ve kemmañ anien ar boud.

darvoudenn b., darvoud dibar, dh. er ster 3.

darvoudennel ag., db. darvoudenn, sk.: ur werzh framadurel zo gant ar furn, hag ur werzh darvoudennel gant ar stumm.

darvoudennelezh b., perzh bezañ darvoudennel; perzh bezañ darvoudenn.

daskediad g., (Kim) korf kimiak diwar gediañ kenetrezo un niver bras a volekul eus ur c'horf all; hv.: polimer.

daskediadur g., (Kim) an daskediañ; disoc'h an daskediañ.

daskediañ v., (Kim) db. molekul ur c'horf, kediañ kenetrezo a niver bras; hv.: polimerkaat.

daskediat ag., (Kim) db. ur c'horf, o tisoc'haf eus an daskediañ.

daskedierezh g., (Kim) obererezh, pleusterezh daskediañ.

daskrignañ v., (Kim) db. denvezennou kimiak evel an trankennoù, dispenn tamm ha tamm denvezennou all (metaloù, gwiadoù bev).

daskrignerezh g., (Kim) an daskrignañ; obererezh daskrignañ.

daskrignus ag., (Kim) dezhañ ar perzh daskrignañ, sk.: ul liñvenn daskrignus eo an drankenn glozhidrek.

daspazhidigezh b., an dasparzhañ, sk.: gant an Aotrouniezhou Kevreadel e vez reolet dasparzhidigezh ar c'hred.

daspuaner g., (Trd) ganer tredan o lakaat da dalvezout loc'h an ion etre div laonenn vetal oksidet da zereziou dishefivel o soubañ en ur gevionenn.

dasstrinkeonennus ag., ennañ dassoniou evel ar strink, dh. dre gevelebiñ, sk.: ar stummoù yezhel a henvoaz, anezho "personelazhiou" gourfaoterek, dasstrinkeonennus.

dasumad g., dezrevell hollekoc'h pe glokoc'h savet diwar dezrevelloù dibar pe darnel.

dave v. & g., ar moned pe ar c'has (war-du), sk.: ober dave da oberennou ur barzh; meneg-daveañ, sk.: respont d'ho lizher dave AB / kd.

daveadenn b., dezrevell o sevelañ ur c'hefver dibar, sk.: an toz mol M zo enta daveat da zouester an aezhenn dre ar reollun  $M = 29 d$ : daveadenn Avogadro eo.

daveadus ag., a c'hell bezañ daveat.

daveidigezh b., an daveañ; (Rzh) kasidigezh ur gra dirak an aozadur a zo en e gefridi plediñ gantañ.

daveañ v., kas (da, dirak, war-du); (Rzh) kas ur gra dirak an aozadur a zo en e gefridi plediñ gantañ, sk.: Gwazva ar C'hreizennerezh a zave goulenn an denvez-skoliad dirak Gwazva ar Genurzh; mont pe kas (al lenner, ar selaouer) war-du udb. a veneger evel klokadur, gwiriskadur, prouenn, h.a.

dazgwered g., gwered o tiwanañ da houl ur gwered all hag o herzel outañ; (Kim) ur reizhiad o c'hoarvezout eus korfoù eeun pe gediañ zo enni un dazgwered mar steuz korfoù 'zo tra ma tiwan korfoù all pe mar argemm kenfeurioù ar c'horfoù a ra ar reizhiad.

dazgwerediñ v., diskouez un dazgwered, kemer perzh en un dazgwered, sk.: a) teurel pled a reas Lavoisier ouzh toz kement denvezenn o dazgwerediñ b) dazgweredet en deus an natriom ouzh an dour, o c'heneal soda hag hidrogen.

dazgweredus ag., o dazgwerediñ; a c'hell dazgwerediñ.

dekmillionvedenn b., unan eus parzhioù un hollad rannet e dek milion a barzhioù par, arouezet  $10^{-7}$ , sk.: ment un atomenn zo dowerzhet a dekvedennoù angström, un angström o vezañ par d'un dekmillionvedenn vilimetr.

dedraidigezh b., an dedrañ, sevenidigezh fetis, e stumm un dra, eus ur mennoz, ur raktrae, h.a., sk.: dedraidigezh an aerbouezet dre vevargant a empleg anacudegezh saveleñnoù an doursavoniezh.

dedrañ v., degas da vezañ tra; seveniñ e stumm un dra, sk.: dre ar vomb-ezenn atomel e voe dedraet skiriañ an darc'hanoù.

dequeuzhat ag., bet, c'hoarvezet dre zegouezh.

dec'heriad g., (Syr) nep ger, nep stumm geriel sellet aval diwanet da geñver un ezhomm-yezhañ, sk.: mat eo merkañ an diforc'h etre "ger", "ster" diouzh un tu, "ezhomm-yezhañ", "dec'heriad" diouzh an tu all : dougen ster a ra ar gerioù, an ezhomm-yezhañ avat a lak ar yezh dougeres, un dougen gerioù eo an dec'heriañ.

dec'heriadur g., (Syr) an dec'heriañ; disoc'h an dec'heriañ, sk.: an oberoù yezhal dre natur, jediñ, soñjal, a vez ar muiañ en arvar da chom dezec'her, da goll o dec'heriadur pa goll ar yezherion an tu hag an dro da brederiañ.

dec'heriañ v. (Br.: de-, ger), (Syr) degas da vezañ ger, seveniñ e stumm ur ger, ur stumm geriel, sk.: dec'heriañ a vo graet aus hevelep diwanet gerioù da geñver un ezhomm-yezhañ.

dec'heried g., (Syr) pezh a zo dec'heriet, sk.: gant an dec'heried an deus koulskoude da welout ar ster.

dec'hnaouel ag., db. dec'hnaouiñ pe an dec'hnaouennoù; gantañ ur perzh dec'hnaouiñ, sk.: perzhioù dec'hnaouel a reer aus dezgweredoù dibar ur c'horf pur a ro tu d'e anavezout.

dec'hnaouenn b., perzh dec'hnaouiñ; kement anadenn o reiñ tu da anavezout difazi udb.

dec'hnaouiñ v. (Br.: de-, ec'h-, gnaouiñ-, kv.hiw.: asagninaim, ecne), savelañ an anaoudegezh spis eus natur un dra, sk.: goude lakaat an elianenn da dremen e van 5 cm<sup>3</sup> eus un aezhenn a zec'hnaouer evel o vezañ oksigen.

**Notenn.**- Diforc'hiañ : dec'hnaouiñ, anavezout natur un dra dre lakaat da zont a-wel warnañ perzhioù o tiskouez difazi an natur-se; dinoiñ, anavezout bezañ un dra en ul liestra, en ul lec'h, h.a.; dec'hnaouiñ zo savelañ ar bezañ-henn, an hennvoud, dinoiñ zo savelañ ar bezañ-anezhañ, an hanvoud.

dec'hnaouus ag., o tec'hnaouiñ; o reiñ tu da zec'hnaouiñ.

deled g., an deledif; dre astenn-ster, an deledusted, sk.: deled an aezhennoù a empleg o bezañ havoustr.

deledel ag., db. deled pa deledif.

deledif v., kreskiñ ec'honad dre werad ar gwask.

deledus ag., tuet da zeledeñ; gantañ ar perzh deledif, sk.: hevelep perzh an aezhennoù a veneger pa lavarar e vezont havoustr, da lavarout eo e tigresek an ec'honad anezho pa gresk ar gwask enno, ha deledus, da lavarout eo e tennont da geout brasoc'h ec'honad bepred.

deleduster g., ar bezañ deledus.

delenañ v., (Kim) db. ur c'horf kalet pe lifvel, degas molekul ur c'horf all d'en em stagañ pe da gediañ outañ, sk.: e tanvezer pe ar fosfor en-yen, pe ar pirogallet kaliom evit delenañ an oksigen.

delta g., enezenn, pe bloc'had enezennou, e stumm un tric'horn etre ar brec'hioù e ya d'ober genoù ur ster.

delun g. (Br.: de- lun(iañ)), arcouziadur o venegiñ kenac'h ur c'horf, framm ur savadur, h.a.

**Notenn.**- Sterioù emezek zo war delun ha reollun; delun avat a bouez muic'h war an deskrivañ e-unan, reollun war reollennoù diabarzh pezh zo deskrivet. Dre-se e verk reollun kentoc'h un argerzh (davaodur, dezgwered), delun kentoc'h un nouziadur.

dended b., ar bezañ den.

denek ag., dezhañ perzhioù dangorat an den, sk.: selioù denek ur c'hi; sl.: denei.

**Notenn.**- Diforc'hiañ a reer denek ha denei evel-henn : denek a verk un doare eus ar bezañ den, eleza eus an dangorelezh-den, denei a verk un doare eus an den-gourzhgergor. Lakaet da skouer ar c'hoarzh, al levenez. Ar c'hoarzh a anavezet dre ergorañ ouz an hini a c'hoarzh : perzh denei eo ar c'hoarzh; al levenez avat na anavezet ket dre he merzout evel ur perzh ergorat : pa ziskouez un den levenez, ha me test, al "lec'h" kentañ din da anavezout al levenez-se evel levenez zo va dangorelezh; hag anavezout a ran ez eo lacuet an den dre un ergorañ daouek : ouz va dangorelezh lusket gant al levenez, ouz an den dirazon. Denek e vez enta pezh a lusk an dangorelezh evel ma ra an den, da skouer an neuz-dremm mousc'hoarzhus; denei a vez pezh a verk mab-den an ergor-elezh, da skouer an em zorc'h al e-sonn.

denekted b., ar bezañ denek.

denegezh b., perzh bezañ denek, doare ar bezañ den, sk.: e kleñvedoù 'zo e hañval pep denegezh bezañ steuziet.

denegiezh b., evel denegezh, dh. o verkañ ar vadelezh, ar guñvalezh, sk.: gant denegiezh e vo graet ouz ar faezhidi; hv.: deneliezh.

denegour ag. & g., dalc'hind an denegouriezh, sk.: an emzalc'h denegour zo a-wezhioù ur gwaenn war ar c'hreizder.

denegouriezh b., kelennadur o lakaat da bal diorren an denegezh e pep hini eus an dud.

denei ag., db. an den; dezhañ perzhioù ergorat an den, sk.: keñveriañ an anavezout loanel gant an anavezout denel; sl.: denek.

denelred ag., ar bezañ denel.

denelezh b., perzh bezañ denel; domani perzhioù ergoret mab-den, sk.: deskrivañ doareoù bras an denelezh; hollad an dud, doaread mab-den, sk.: labourat evit an denelezh.

deneliezh b., 1) dere mab-den, hv.: deniezh 2) evel denegiezh.

denelour ag.& g., dalc'hiad an denelouriezh, sk.: lañs ur sevenadur danvez-elour war ur sevenadur denelour.

denelouriezh b., emzalc'h o lakaat ar pennañ preder e mab-den hag en traoù denel; (Prd) meizadur o lakaat an den evel an talvoud uhelañ-holl; kolennadur o lakaat da bal diorren an denegezh e pep hini eus an dud, hv.: denegouriezh.

deniezh b., dere mab-den, hv.: deneliezh.

deniezhel ag., db. deniezh.

-der (g.), gourfenn arveret evit merkañ ar c'heñverioù, sk.: tolzder ec'honel, keñver etre tolz hag ec'honad, gwadalkoolder, feur an alkool er gwad, keñver etre tolz an alkool ha tolz ar gwad, atomander, keñver etre niver an atom ha niver ar molekul en ur c'horf pur.

dereziennañ v., merkañ dereziannoù war, sk.: aerbouezek enskriver Richard a lez ar biz anezhañ ur roudenn war ur follenn dereziennet o tremen a-untizh ouzh e veg.

derc'hannour g., neb a studi an derc'hanoù.

derc'hannouriezh b., studi an derc'hanoù.

derc'hhed g., hed a-zero'h, sk.: an derc'hhed etre daou boent A ha B zo an hed etre an div blaennenn a-zremm o tremen dre A ha B.

desavadurel ag., db. desavadur pe desavel, sk.: an hentennoù desavadurel implijet bremañ e Breizh.

deskrivadur g., an deskrivañ; disoc'h an deskrivañ.

deskrivadurel ag., db. an deskrivadur pe an deskrivañ.

deskrivañ v., taolennañ, dezrevell doareoù udb. prl. dre ur skrid, sk.: kentañ emell pep kevrenn studi eo deskrivañ an anadennoù diwar-bouez ur reizhiad-notañ pe notadur.

desteriadur g., an desteriañ; disoc'h an desteriañ.

desteriañ v., diskouez ster udb.; reiñ ster d'udb. sk.: desteriomp an taolarnod-se ha diskouezomp ez eus anezhañ gwiriekadur Pennvon an Dour savoniezh.

destuziadur g., an destuziañ; disoc'h an destuziañ.

destuziañ v., kemer pe lakaat da gemer ur stuz disheñvel, sk.: un tamm re saunik e vefe koulskoude displegañ taerded ar stoum breizhek dirak an destuziañ gallek dre skorted ar geriadur-frammañ gallek; sl.: stuzikaat.

deurvoud, deurvezout v.ng. (displeget evel an devout), kavout mat, diouzh e c'hrad (ober udb.), arveret dh. el lavaredoù a sevender, sk.: ho teurvezet reiñ din hoc'h ali.

deveizañ v., treuzlakaat eus ur reizhiad dezevout d'un all, sk.: gwered ur c'horf lakaat war bladenn ur ventel (reizhiad anadennel) a zevotizer evel gwered un nerzh a-zero'h war-draoñ (reizhiad fizikel) pe evel ar sturiadell ouzh e zeluniañ (reizhiad ventoniel).

deverad g., ger deveret.

devidigezh b., an devañ; oberidigezh devañ.

devoud g., kement a zo pe a c'hoarvez, selllet evel sol d'an dezevout; fed.

Notenn.- Diforc'hañ a reer an termennoù anadenn, devoud, c'hoarvoud, savelad evel-henn : anadenn eo kement zo merzhadus; anadenn a ra dave d'ar bed evel tra merzhet; devoud eo kement zo gwiriadus; devoud a ra dave d'ar bed evel gwirvoud. E-touezh an devoudoù e tiforc'her ar c'hoarvoudoù (danevallet gant an Istor) hag ar saveladoù (dezrevellet gant ar Skiant). Sk. 1 : ar birviñ zo unan eus an anadennoù studiet gant ar fizik; sk. 2 : birviñ a rae ar mor dindan wrez tarzhadennoù an emgann (devoud istorel = c'hoarvoud); sk. 3 : birviñ a ra an dour da 100°C dindan 1 atm gwask (devoud skiantel = savelad).

devoud; bezañ e - udb., bezañ elfenn o lakaat udb. da vout, sk.: n'eo ket an embroañ a zo e devoud kresk-poblañs ar Stadoù-Unanet.

devouderezh g., an devoudañ; obererezh devoudañ, sk.: ezhomm he deus ar sturyezhouriezh da anavezout heuliad an dremmou bet gwisket gant ar yezh a-hed ar c'hantvedoù, a-benn lakaat war-wel ar c'hemmoù c'hoarvezet ha savelañ devouderezh ar c'hemmañ.

dezastum v., tennañ eus un pe lies dezrevell un pe lies dezrevell all evel an heuliad ret empleget ganti (ganto), sk.: dezastum kenfeur tolzou an oksigen hag an hidrogen kedit en dour diouzh kenfeur an ec'honadoù oc'h anavezout tolzderioù ec'honel an div aezhenn.

dezastumad g., dezrevell dezastumet; heuliad ret un pe lies dezrevell.

dezzrannadur g., an dezzrannañ; disoc'h an dezzrannañ.

dezzrannañ v., rannañ ur c'henaozad en doare da lakaat war-wel an elfennoù a ya d'e ober; hv.: elfenniñ, dielfenniñ.

dezzrannel ag., db. dezzrannañ.

dezhanner, dezhannour g., neb a zezrann.

dezvad g. (kv.h8r.: dadm, Kb.: daddf), (Rzh) stuz lezennel, stadel ub. pe udb., oc'h emplegañ ar gwirioù, an dleadoù, h.a., sk.: Kaodad Vatikan zo dezhi un dezvad stadel.

dezvadur g., (Rzh) 1) evel dezvad 2) hollad an testennoù o tiferañ doare ub. pe udb. e-keñver lezenn, sk.: dezvadur ur gevredigezh.

dezvadurel ag., (Rzh) db. dezvadur.

dezvern v., burutellañ dre gefveriañ.

dezvarnel ag., db. dezvern, sk.: e sigur pep pennad, un amwalad war buhez ar skrivagner, selledoù dezvarnel war e oberoù.

dezvel ag. (kv.h8r.: dadm, Kb.: daddf), (Rzh) reizh diouzh al lezennoù, sk.: eizh kant mil gopreostour mac'hikat a vefe bep bloaz o treuziñ an harzoù, dacu c'hant mil anezho o tremen en-dezvel ha c'hwec'h kant mil hep paperoù.

dezventadur g., an dezventañ; disoc'h an dezventañ.

dezventañ v. (Br.: dez-, mant-), muzuliañ spis; savelañ kementadoù diouzh ur reolenn, ur c'hanfeur, h.a., sk.: pouezus eo roll delunioù ar c'horfoù kediad er jedadurioù dezrannañ ha dezventañ, pa ranker savelañ pouez un elfenn pe dragantad un elfenn en ur c'hediad.

dezventel ag., db. dezventañ.

dezventer, dezventour g., neb a zezvent.

dezventerezh g., obererezh, kalvezerezh dezventañ.

diac'hin ag.& rv., troet pe o vont a-c'hin.

diac'hinad g., lavar o vont a-c'hin d'ar meno boutin.

diac'hinañ v., treiñ pe mont a-c'hin; lavarout diac'hinadoù.

diac'hinad ag., db. diac'hinañ; db. diac'hinenn.

diac'hinenn b., (Pll) nep lavarenn, nep anadenn o vont a-c'hin d'ar meno boutin, d'ar gortoz, d'ar gwirhañvalout.

diac'hiner, diac'hinour g., neb a dro pe a ya a-c'hin; neb a vez boas da lavarout diac'hinadoù.

diac'hinuz ag., tuet da vont a-c'hin; tuet da lavarout diac'hinadoù.

diaczhennañ v., db. ul lifvenn, mont kuit en aezhann, sk.: diazezañ a ra ar fankeier ha kaset e vez an douz deuet glein d'ar poullou-diazhennañ.

diamaezh ag., db. ur c'hargiad, ur soudard pe forzh pe labourer, graet

gantañ e amzer amaezh, pe aet a-ziwar an oad; g., stad neb zo diamaezh, hv.: retred.

diamaezhiañ g., neb zo diamaezh.

dianles ag. (Br.: dian-, les, kv.Br.: diles, lesanv), db. skridoù, obere- ennoù savet war anv un aozer goude e varv, pe roet evel danevell- desteni darvoudoù evito da vezañ bet savet goude marv an testoù gwirion.

diarver ag., na vez ket arveret, sk.: pa voe skrivet ar "Mezelour" e oa an dacu c'her-se hogozik diarver ha damzisoñjet o sterioù; g., stad diarver.

diawelus ag., gouest, boas, tuet da ziwelañ; a c'heller diawelañ, sk.: agentaou c'hoazh e krede d'an Amerikaned e oa o bro evit bastañ d'o holl ezhommoù diawelus ha diziwel.

diazas ag., n'eo ket azas, sk.: an douaroù krin, diazas ouzh ar gounezerezh.

diazastad b., ar bozañ diazas.

diazazadenn b., gwezhiad diazezañ; an disoc'h anezhi, sk.: ar c'hêrioù- tasman, ar mengleuzioù lezet e darn a verk a-walc'h breskter an diazazadennoù mengleuzel.

diazazañ v., (Kim) gouezennañ, sk.: diazezañ a ra ar fankeier.

dibennlotañ v., (Lzh) o klotañ dre o dibenn, sk.: anat eo ez eo faos unan eus an div werzenn 62 ha 65 na zibennlotont ket.

dibennlotenn b., (Lzh) klotenn dibenn ur werzenn.

dibennlotennañ v., (Lzh) klotennañ e dibenn ur werzenn.

diboreadur g., an diboreañ; disoc'h an diboreañ.

diboreer ag.& g., louzdu da zistrujañ ar garveved a zo e devoud ar c'hleffv- edoù.

diboreerezh g., an diboreañ; pleusterezh, kalvezerezh an diboreañ.

diboreañ v., distrujañ ar garveved a zo e devoud ar c'hleffvedoù.

didalvoudekaat v., tennañ e dalvoudegezh digant, sk.: dre an notenn-mañ ez eo didalvoudekaat an notenn a-raok.

didalvoudekadur g., an didalvoudekaat; disoc'h an didalvoudekaat, sk.: degamunnet e vo dindan deir sizhun an didalvoudekadur d'ar c'helennar fiziet ennañ priantidigezh ar rummad-studi.

didennañ v., lekaat evel o vezañ empletget, dezastum, sk.: ha mar gouzomp ez eo divatomennek pep molekulenn hidrogen pe oksigen e tidennimp ez a div atomenn hidrogen e ked gant un atomenn oksigen.

dieiltro ag., na c'hell ket eiltreñ; n'eo ket eiltroet.

dieiltroüs ag., na c'hell ket eiltreñ.

dieiltroüstad b., ar bezañ dieiltroüs.

diellaoueg b., dastumad dielloù.

diellaouif v., dastum dielloù, sk.: a kefridi Rann an Diellaouif emañ derc'hel diellaoueg ar strollad.

diellverk g., (Dil) merk lakaet war un diell evit gallout e renkañ, sk.: anavezet e vez pep taul en diellaoueg diwar-bouez un diellverk.

diellverkañ v., (Dil) lakaet un diellverk war.

diembregadus ag., na c'hell ket bezañ embreget.

diembregadusted b., ar bezañ diembregadus.

diemouesat v., (Brd) mont pe lakaet da vont diemouez.

diemouez ag., (Brd) en deus paouezet emouezañ; sl.: anemouez; g., stad diemouez.

diemouezad g., (Brd) pezh a zo diemouezet.

diemouezañ v., (Brd) paouez emouezañ.

diemouezat ag., (Brd) a zo diemouezet; a zo savelet diwar-bouez an diemouezañ, sk.: doare diemouezet ar youliñ, c'hoantoù diemouezet.

diemouezded b., (Brd) ar bezañ diemouez.

diemouezel ag., (Brd) db. diemouezañ.

diemouezez ag. & g., (Brd) heb a ziemouez, sk.: ar bred diemouezez.

diemouezour ag. & g., (Brd) an hini a ziemouez, sk.: mab-den zo emouezour ha diemouezour war un dro.

diemouezva g. (Brd) rannbarzh diemouezet ar bred; ko.: emouezva.

diemouezvezañ v., (Brd) bezañ, hanvezañ diemouez, sk.: n'emañ ket pell bredourinn 'zo e lavarout ez eo hanvezañ mab-den un diemouezvezañ; hv.: diemouezvout.

diemouezvoud g., (Brd) 1) boud diemouez, hv.: diemouezour 2) rannbarzh ar bred na vez ket tizhet gant an emouezañ, diemouezva 3) an hanvezañ diemouez, hv.: diemouezvezañ.

**Notenn 1.-** Ar ger diemouezvoud a die bezañ dilezet gant ar yezh resis : an emouezvoud o vezañ, er yezh resis bepred, boud an emouezañ, hag an diemouezvezañ o vezañ ur paouez emouezañ, eo anat na c'hell ket bezañ eus ur "boud ar paouez emouezañ".

**Notenn 2.-** Gwell eo diforc'hañ diemouez- hag anemouez- : diemouezet a dalvez "emouezet da gentañ, diemouezet goude", anemouezet a dalvez "n'eo ha na voe emouezet nepred".

diemouezvout v., evel diemouezvezañ.

dientanus ag., na c'hell ket bezañ entanet, sk.: an helioc o vezañ un aezhenn dientanus.

diferadenn b., gwezhiañ difereañ; en disoc'h anezhi, sk.: e kefridi Rann ar Reizhennañ emañ lakaet e stumm reizhenoù diferedennoù ar Poell-gorô.

difred ag., dilabour, hep gourc'hwel, sk.: paot ouzh paot ez a an dud-labour difred.

difuer ag. & g., denvez o virout ouzh ar red tredan a dremen; kv.: anrear.

difuif v., mirout ouzh ar red tredan a dremen; goloif gant un difuer; kv.: anren.

diged ag., (Kim) nann kediet; g., stad diged.

digediadur g., (Kim) an digediañ; disoc'h an digediañ.

digediañ v., (Kim) db. ur c'horf kediat, mont, pe e lakaet da vont en e elfennoù; dispenn ur c'hediadur.

digedidigezh b., (Kim) an digediañ.

digeit ag., dibar e hed, pe o hedoù; dibar e vraster (hervez al lec'hioù da skouer), pe o braster.

digeited b., ar bezañ digeit, sk.: digeited an dudagezh er Stadoù-Unanet.

digemadur g., an digemmañ; disoc'h an digemmañ, sk.: emañ an hidrogen en ul lec'h dibar e-keñver hevelep digemadur.

digemmañ v., diforc'hañ, saveleañ dishefvelderioù stre.

digempoell ag., (Pl1) n'eo ket kempoell; g., stad digempoell; sl.: kempoell, **Notenn.**

digempoelled b., (Pl1) ar bezañ digempoell.

diglav ag., hep skoazell klav ebet, sk.: darvezenoù na ziskouez ket, d'ar sell diglav pe dre gorrgresker, bezañ rannigoù diseurt ouzh o ober.

digordet b., ar bezañ digor, sk.: ne vez morse peurgloz emfram gouziieg-ezhel ebet, - lavarout a reer c'hoazh ez eo digor, hag a reer zoken aus seurt digordet ur perzh bagol.

digorvell g., lun stummet gant un eread eaun, hep kilwadenn; (Kim) lun

stummet gant ur volekulenn, ur rann volekulenn, a zo anezhi ur chadennad hep kilwadenn; ko.: korvell.

digorvellek ag., dezhañ doare un digorvell; sl.: alifatek.

digroniadur g., an digroniañ; disoc'h an digroniañ.

digroniañ v., lakaat da redak ul liñvenn a oa stanket outi; (Amm) kavout sav d'ur yoc'hadur marc'hadourezhioù nann gwerzhet.

dihanterat ag., hep termen etre, sk.: ar merzhout zo un anavezout dihanterat.

diheced ag., diaes dezhañ kediañ.

diheceted b., ar bezañ diheged.

diheglenk ag., diaes da glenkañ, sk.: ar gwaskventerioù dre liñvenn a vez reizh, falan, resis, hogen dihezoug, diheglenk.

diheglenktad b., ar bezañ diheglenk.

diheñvelson ag., na vezont ket distaget heñvel.

diheñvelsonded b., ar bezañ diheñvelson, sk.: an eil abegoù-se, o tennañ da embregadusted ar gerioù ha d'o diheñvelsonded a renker e-touezh an abegoù stummadel.

diheren ag., na ren ket ar wrez, an tredan, h.a.

dihorended b., ar bezañ diheren.

dihevesk ag., db. div liñvenn, na zilaizhont ket an eil en eben.

diheveskted b., ar bezañ dihevesk.

dihevoustr ag., na zigresk ket e eo' honad dindan wrez ar gwask.

dihezoug ag., diaes da zougen, da zezougen.

dihezougded b., ar bezañ dihezoug.

dic'hourdon ag., na vez ket boas, arroutet, sk.: oberennoù a ouezoniezh uhel, diblustradus gant tud dic'hourdon.

dilaoskidigezh b., an dilaoskiñ, sk.: kalz abretoc'h e c'hoarvez an dilaosk-idigezh oksigen.

dilaoskifi v., lezel da vont kuit, sk.: tommet en ur gorzenn-arnod e teuz ar c'hlorat natriom, neuze e tilaosk klogorennoù oksigen.

dilav g., liñvenn o chom war-c'horre ar ouelezenn; hv.: bazadell.

dilavadur g., an dilavañ; disoc'h an dilavañ.

dilavañ v., lezel al lei da ouelezennañ.

dilaviñ v., db. al lei, gouelezennañ.

dilav raz g.g., sl.: dour raz.

dileizhad g., liñvenn disoc'h an dileizhañ; hv.: dileizhenn.

dilerc'hiañ ag., deleet e-keñver an diorreadur, an emdroadur real, sk.: sellout an trivliadoù evel stummoù dilerc'hiañ en emdroadur mab-den.

diles ag. (hBr.: diles, dilis, Kb.: dilya), 1) db. an oberennoù, an teulioù a zo diwar zorn an eozer lakaat dezho, sk.: ur varzhoneg diles gant Taliesin; 2) db. ar mennoziou, ar monedigezhioù eztolet gant ar me gwirion, ha ket devoudet gant an emdro, ar c'hedveno, h.a., sk.: ar vrogerouriezh diles zo aes a-walc'h da dermenañ, lu e ve avat ober anv aus "rannvrogerouriezh" diles; sl.: gwiriek, talvoudek.

dilese v., diskouez, prouañ dilested un oberenn, un teul, h.a.

dilestred g., ar bezañ diles, parzh bezañ diles, dh. er ster 2.

dilested b., ar bezañ diles, dh. er ster 1.

diliv ag., hep liv, sk.: un aezhenn diliv, dic'hwaz, divlaz eo an oksigen.

dilivañ v., mont pe lakaat da vont diliv.

dilivded b., ar bezañ diliv.

diliver ag. & g., danvez arveret da zilivañ.

dilouer ag. & g., danvez dilouañ.

dilouerezh g., an dilouañ; pleustrerezh, kalvezerezh an dilouañ.

dilouañ v., distrujañ ar garveved dre lakaat marvus dezho ar metoù ma vevent (dourennoù ha danvezioù bevek, daouarn, dilhad, diabarzh an tiez, h.a.)

dilufrañ v., mont pe lakaat da vont dilufr, sk.: lufur eo troc'h an natriom evel an dir lintr, hogen dilufrañ a ra buan.

dinoñ v. (hBr.krBr.: dino-), savelañ bezañ udb., dizoleañ, sk.: ur c'horf eun aezhel eo an oksigen : en dinoet hon eus en aer; sl.: dec'hnaouiñ.

dioksidenn b., (Kim) oksidenn a zo div atomenn oksigen en he molekul.

dioksidenn garbon b.g., (Kim) kediañ karbon hag oksigen CO<sub>2</sub>; hv.: anhidridenn garbonek.

dioksidenn natriom b.g., (Kim) kediañ natriom hag oksigen, Na<sub>2</sub>O.

dioksidenn sulfur b.g., (Kim) kediañ sulfur hag oksigen SO<sub>2</sub>; hv.: anhidridenn sulfuruz.

dioksidenn vanganez b.g., (Kim) kediañ manganez hag oksigen MnO<sub>2</sub>.

direr ag. & g., (Kim) korf eun pe gediañ gouest da zelenañ an oksigen dre eo'haozañ e gediaoù, sk.: un direr eo an natriom pa eo'haoz an dour, o telenañ an oksigen hag o tilaoskiñ an hidrogen anezhañ.

dirèn v., digas ur sellad d'ur sellad kevatal emsavoc'h, sk.: dirèn ur gensturiel d'un hirgarrez; digas d'an doareoù reol ur vuzuliadann graet diouzh doareoù dibar, sk.: dirèn d'an doareoù reol (0°C, 1 atm) ec'honad un aezhenn muzuliet diouzh an doareoù 15°C, 1,2 atm; (Kim) delenañ an oksigen dre ec'haozañ e gediadoù.

direrezh g., kenderc'herezh an dir.

direrezh b., greanti kenderc'hañ an dir.

dirforn b., forn da zenzen an dir.

dirvoud g. (Kb.: dirfod), (Prd) ar pezh a zo, sellet en e berzhioù ergorat, sk.: an dispac'h a ziwan eus an digloterezh etre gwirvoud ar bobl hag an dirvoud ma rank ar bobl bezañ, dre-se ez eo an dispac'h un dont eus bac'h he dirvoud reuzeudik; sl.: gwirvoud, Notenn.

dirvoudel ag., (Prd) db. dirvoud.

dirvoudelded b., (Prd) ar bezañ dirvoudel.

dirvoudelezh b., (Prd) perzh bezañ dirvoudel; domani pezh a zo dirvoudel; hollad dirvoudoù.

diskalfañ v., reiñ roudoù distag da, sk.: re yaouank eo hor strollad evit bountañ skourroù re ziskalfet an eil re diouzh ar re all.

diskejenn b., elfenn a zo pe a seller evel o vezañ diskejus, sk.: evit an dazgweredoù kimiek, e c'heller sellout an atomenn evel ur rannig diskejus, un diskejenn.

diskejus ag., na c'hell ket bezañ rannat, sk.: eil perzh an atom a oa, gouez da zDalton, bezañ diskejus.

diskejusted b., ar bezañ diskejus, sk.: saveleñ kevandalc'h an tolz ha pennaenn diskejusted an atom a c'houlenn ma ve kavet en eil kazal an atalad kimiek kement atomenn a zo er gazel gentañ.

disklot ag., o tisklotañ; g., stad disklot.

disklotad g., poent ma tisklot daou dra; gwerzh un disklotadur.

disklotadur g., an disklotañ; disoc'h an disklotañ.

disklotañ v., bezañ hep klotañ, koll ar c'hlotañ, sk.: ur bobl ne c'hell ket padout pell gant he stuzagezh hag he stadegezh o tisklotañ.

disembann ag., e-maez embann, kuit a embann, sk.: gant diviz astalvoudekaat disembann.

diseurtezh b., db. un niver traoù, selladoù, h.a., an disheñvelded anezho, sk.: diseurtezh doareoù an dourioù naturel a ziskouez n'int ket un hevelep korf.

dishadenn ag., dieub a hadennoù kleñved, sk.: dishadenn rik e tle bezañ defez ar surjian; g., perzh, stad dishadenn.

dishadennaat v., lakaat da vezañ dishadenn, sk.: dic'hallus e vez dishadennaat an daouarn, setu perak e wisk ar surjian ur re vanegoù gom.

dishadennañ v., evel dishadennaat; distrujañ an hadennoù kleñved war-c'horre pe e-barzh an traoù, dre ar wrez, ar skinoù, an danveziou kimiek, h.a.

dishadenned b., ar bezañ dishadenn.

dislec'hiañ v., ergas (udb.) eus al lec'h ma edo, sk.: par e vez ar bunt arc'himedel da bouez al lifivenn dislec'hiet.

dispenn v., (Kim) gwerediñ war ur c'horf en doare ma steuz n'eo ket hepken e berzhioù, hogen ivez e vezañs, sk.: en dazgweredoù kimiek a vez dispennet ar molekul, ne vez ket dispennet an atom.

distenner g., gwikefre evit digreskiñ gwask an aezhennoù o tont ar-maez eus al listri m'o mirer war voustr.

distokañ v., pellaat an eil diouzh egile daou bezh a oa a-stok; (Trd) pellaat elfennoù un troc'h-red en doare na c'hell ket ar red tredan tremen, ko.: enstokañ.

disvann g., (Fiz) an disvannañ; anadenn an disvannañ.

disvannad g., (Fiz) pezh a zo disvannet.

disvannadur g., (Fiz) an disvannañ; disoc'h an disvannañ.

disvannañ v., (Fiz) db. ur gorre linter, ur melezour, disteurel ar gwagennoù luc'h.

disvanner ag.& g., (Fiz) stignadell da zisvannañ.

disvannidigezh b., (Fiz) an disvannañ.

disvec'hiañ g., (Trd) pezh a zo disvec'hiet, prl. en un taol.

disvec'hiaenn b., (Trd) gwezhiañ disvec'hiañ.

disvec'hiañ v., (Trd) koll bec'hiañ; tremen ur c'hementad tredan a-dreuz un anreaz, un aezhenn da skouer.

divatomennder g., (Kim) ar bezañ divatomennek.

divatomennek ag., (Kim) db. ur volekulenn, a zo div atomenn ouzh hac'h ober; db. ur c'horf, a zo div atomenn oc'h ober pep hini eus e volekul, sk.: divatomennek e vez an darnvuiañ eus ar c'horfoù eun aezhol.

divediñ v., tennañ digant (udb.) ar perzh bezañ-bed, sk.: divediñ a ra (ar barzh) ar ger, ouzh e lakaat di-ster a-grann e-keñver ezhommoù ar bed.

diverzh ag., e-maez merzhidigezh, hep bezañ merzhet, sk.: diorreet emañ an nerzh-se ouzh daou du ar follenn ha mannel e vez ar penn-gannezh, dre-se e chom diverzh ar gwored anezhañ.

divesaouenn b., lec'h etre div lizherenn, div linenn-skrid, h.a., par da ziv wazh un esaouenn, sk.: merkañ mat an divesaouenn etre al lizherennoù.

divesaouennañ v., stignañ lizherennoù, linennoù-skrid, h.a., o lakaat divesaouennoù etrezo, sk.: ar skrid a vo divesaouennet al lizherennoù ennañ.

divesaouennek ag., stignet hevelep ma'z eus divesaouennoù ennañ.

divevus ag., na c'heller ket bevañ ennañ, diwarinañ, h.a., sk.: alese an anv "ezote" (divevus) a reas Lavoisier ouzh an aezhenn-se, hag a vez boaziet c'hoazh e gallec evit an nitrogen.

divnatriom ag., (Kim) div atomenn natriom en e volekulenn, sk.: sulfat divnatriom pe sulfat neptu natriom.

divezoniel ag., db. divezoniezh.

divezoniezh b. (kv. hBr.: diued), kevran ar brederouriezh o studiañ finvez buhez mab-den hag an hentoù daviti.

divezoniezh ag. & g., gourdon war an divezoniezh.

divoud g., (Pll) en ul lavareñ, ar pezh a gomzer anezhañ, enebet ouzh ar pezh a lavarer anezhañ.

diwarez ag., hep gwarez, sk.: arvarus eo an aradurezh, pa laka diwarez an atilou rak an avel- hag an dourgrignerezh.

diwezhel ag., db. un diviz, un diferadenn, na c'heller ket ober engalv outo, sk.: diwezhel e vez hevelep disentez a-berzh Gwazva ar Genurzh.

diwirabeg ag., hep abeg gwirion, sk.: nep skoliad a dremen diwirabeg hep daveñ e koulz poelladennoù eus ur rummad a vez gouzaout teir gwezh.

dizarbenn v. & g., nac'h asantiñ da, nac'h degemer (ur goulenn, ur c'hinnig, h.a.); ko.: darbenn.

dizarbennus ag., o tizarbenn, oc'h emplegañ dizarbenn, sk.: darbennus pe dizarbennus e c'hell bezañ disentez Gwazva ar Genurzh.

dizaskriq ag., na c'heller ket bezañ daskrignet, sk.: ur metal dizaskriq eo ar c'hrom.

dizec'her ag. (kv.: di- dec'heriañ), (Syz) hep dec'heriadur, hep eztaoladur e stumm gerioù, sk.: an oberoù yezhel dre natur, jediñ, soñjal, a vez ar muiañ en arvar da chom dizec'her, da goll o dec'hiadur.

dizec'hel v., paouez darc'hel, lozel en e frankiz un dra bet dalc'het,

sk.: Florida dizalc'het gant Spagn e 1819.

diziawel ag., n'eo ket diawelet; na c'heller ket bezañ diawelet, sk.: an holl ezhornoù diawelus ha diziawel.

dizistrann ag., n'eo ket disrannet, sk.: alies e vez dispartiet hidrogen an dour e div rann bar, tre ma chom dizistrann an oksigen; na c'heller ket bezañ disrannet.

dizunvan ag., db. un danvezenn, o tiskouez d'an imboure'h bezañ rannigoù diseurt ouzh hec'h ober, sk.: danvezenn dizunvan a reer eus an dour Leik; ko.: unvan.

dizunvanded b., ar bezañ dizunvan.

dizunvandelz ag., db. ur c'horf, n'eo ket kendalc'hel an tolz e pep hini eus al lec'hioù anezhañ; ko.: unvandelz.

doare g., (Fiz, Kim, h.a.) stuz ar bed e-keñver un anadenñ, un devoud, h.a.; sk.: an ec'honad V zo 22,4 l diouzh doareoù reol.

doaread g., perzh o verkañ udb., sk.: ar stumm, al liv, al loc'h zo doareadoù ar c'horfoù fizikel; unan eus teir rummen Aristoteles, an daou all o vezañ ar c'hementad hag an davead.

doareadek ag., dezhañ perzhioù a c'heller anavezout war-eeun hep skoazell ar muzuliañ pe ar c'heñveriañ, sk.: ar c'henedour a wel en daclenn livet un devoud doareadek, ar marc'hadour taolennoù un devoud kementadek.

doareadekaat v., mont pe lakaat da vont doareadek; treiñ perzhioù kementadel udb. e perzhioù doareadel, sk.: ar greantiour o jediñ gwerzh an dud-labour a gementadeka mab-den, ar vaouez o welout en he gopr buhez he ziegezh a zoareadeka an arc'hant; sl.: kementadekaat.

doareadektad b., ar bezañ doareadek.

doareadeqezh b., perzh bezañ doareadek.

doareadel ag.; db. an anavezout, pe ar perzhioù anavezout, war-eeun, hep skoazell ar muzuliañ pe ar c'heñveriañ, sk.: an arouezioù, lakaat war bep hini un dalvoudegezh doareadel ha kementadel, a vez strolllet d'ober an dalunioù kimiek.

doareadelder g., ar bezañ doareadel.

doareadalezh b., perzh bezañ doareadel.

doareadur g., an doareañ; disoc'h an doareañ.

doareañ v., merkañ doare udb., sk.: an anv-gwan a dalvez da zoareañ ar pezh meneget gant an anv-kadarn; savelañ doare udb., sk.: n'oufen ket doareañ pezh a welis neuze; reiñ un doare da, sk.: an anv-gwan a zoare an anv-kadarn.

doareoù reol l.ag., (Fiz, Kim) doareoù gwrezverk, aewask divizet (0°C, 76 cm bevergant) evit gallout kañveriañ mentadoù 'zo, an ec'honad da sk.

doesventer g., banveg da vuzuliañ douester al lifvennoù.

dour eour g.g., anv amouiziel ar beroksidenn hidrogen tanavet, arveret da zilivañ ar blev, alese e anv; hv.: dour oksiqen.

dour-fenn g.v., dour o vont dreist barr eus ul lestr fennet.

dourgrignerezh g., gwered an dour o tispenn gwiskad gorre pluskenn an douar, sk.: an atiloù diwarez rak an avel- hag an dourgrignerezh.

dourmezhonezh b., rann an nerzhoniezh o plediñ gant al lifvennoù.

dour oksiqen g.g., anv amouiziel ar beroksidenn hidrogen tanavet; hv.: dour eour.

dour raz g.g., diloizhenn dre zour a raz distan; hv.: dilav raz.

dourren v.& g., kas an dour diouzh an ezhommoù.

dourrenel ag., db. dourren; db. dourrenouriezh.

doursavoniezh b., rann ar savoniezh o plediñ gant al lifvennoù.

dour-strilh g.v., dour diwar strilhañ, sk.: eus an dour strilhañ pe dour-strilh e reomp ur c'horf pur.

dregantad g., feur dre gant, arouezet : %.

dregantadel ag., db. dregantad, sk.: kenaoz dregantadel ur c'hediad o vezañ anavezet, savelañ delun ar c'horf.

dregantat ag., jedet dre gant, e stumm un dregantad, sk.: ur feur dregantat.

dreistad g., (Arm) pezh a chom a varc'hadourezhioù nann gwerzhet, sk.: an ezpozhiañ ne deu ket a-benn da zigroniañ kement-all a varc'hadourezhioù, ken ma chom dreistadoù.

dreistandur ag., er-maez eus standur voas un aozadur, sk.: e kefridi Rann ar Seveniñ emañ seveniñ ar c'hefridioù dreistandur.

drokvesk g., ar c'hemer dre fazi udb. evit un all.

ehaniad g., neb a zo war ehan-labour, ehan-skol, h.a.

e-harz gl., e-stok gant, e metoù, sk.: pa zev ar fosfor e-harz an aer o tiwan un oksidenn anvet pentoksidenn fosfor.

ec'haezh ag. (kv.: ec'h-, aezh), tennet dicutañ an aezhenn en leunie; g., ec'honder ec'haezh.

ec'haezhañ v., tennañ an aezhenn diouzh, sk.: buanaat a reer ar silañ dre ec'haezhañ dindan ar sil.

ec'haezhded b., ar bezañ ec'haezh.

ec'haezhel ag., db. ec'haezh pe ec'haezhañ, sk.: ar gwaskventer ec'haezhel a c'heller danvaziñ evit gwaskoù etre un nebeut mm ha 700 mm bevergant.

ec'haezhidigezh b., an ec'haezhañ.

ec'haoz g., an ec'haezhañ.

ec'honadel ag., db. an ec'honad pe an ec'honadoù, sk.: dezventañ ec'honadel an oksigen zo kement ha muzuliañ ec'honad an oksigen en ur meskad.

ec'honad mol g.g., (Kim) ec'honad N molekulenn eus ur c'horf aezhel muzuliet diouzh doareoù reol, sk.: an ec'honad mol zo 22,4 l evit an holl aezhennoù; sl.: N, doareoù reol, mol.

ec'honded b., ar bezañ ec'hon, sk.: ec'honded ar gorreadoù gonezet.

ec'honder tolzel g.ag., mantad fizikel, ha mantenn geñverek, termenet ovel rannet an ec'honad dre an tolz, atalad mantawouriezhel M<sup>1</sup>-L<sup>3</sup>.

eikont ag., pevar-ugent; sl.: niveriñ.

eilkeal g., keal o tont evel heuliad, deverad, displegad eus un all, sk.: met mar tremenomp bremañ d'an eilkealioù deveret diwar ar c'heal a dolz M, ec'h anataomp e heuilh ar poellata brezhonek hag an hini gallek hentadurioù dishañvel.

eildereziad g., skoliad an deskadurezh eil derez.

eilenrollañ v., enrrollañ un eil gwezh.

eilrenk ag., o tont war-lerc'h un dra all evit an dalvoudgezh, ar pouz-uster, h.a., sk.: an houarnouriezh, manet eilrenk a-pad-pall en arbenn da varregezhioù distar ar c'hondon.

eilskrivadenn b., gwezhiañ eilskriveañ; an disoc'h anezhi, testenn savet

diwar un destenn all a adskriver ger evit ger, sk.: eilskrivadennoù  
Kêrvarker ne oant ket gread aketus dalc'hmat.

eilskriver g., neb a eilskriv, sk.: un eilskriver ne oa ken ar "beleg a  
vro Gernev" war a hañval.

eiltreñ v., db. un argerzh, un dazgwered, goude bezañ ast eus ar stad-derou  
d'ar stad-diwezh, mont war-gil eus ar stad-diwezh d'ar stad-derou.

eiltrev b., eil diazevadur (ti-kenwerzh, greanti) o klokaat oberiadegezh  
un all.

eiltro ag., gallus dezhañ eiltreñ; g., an eiltreñ.

eiltroad b., gwezhad eiltreñ.

eiltroadur g., an eiltreñ; disoc'h an eiltreñ.

eiltroidik ag., tuet da eiltreñ.

eiltroidigezh b., an eiltreñ.

eiltroüs ag., gallus dezhañ eiltreñ; tuet da eiltreñ.

eiltroüsted b., ar bezañ eiltroüs.

eizhenn b., (Lzh) gwerzenn eizh silabenn.

eizhennek ag., (Lzh) a zo eizh silabenn ennañ.

eizhgwernenn b., (Lzh) rann varzhoneg o c'hoarvezout eus eizh gwerzenn.

elfenn b., (Kim) ar c'horf eeun sellat evel danvez-kediañ, sk.: evit ur  
c'horf ungenezhiek, e veneg an anv korf-eeun ar molekul, an anv elfenn  
an atom anezhañ.

elienvolz b., (Kim) benveg da vuzuliañ ec'honadoù an aezhennoù o vont d'e  
dazgwered kimiek, sk.: an elienvolz zo ur gorzenn war tev, dereziat,  
treuzet ar penn-krec'h anezhi gant daco vroud platin ur milimetr hed  
etrezo, lakaat war ha genou en ur givad vevargent.

emastenn g., (Arm) ar c'hreskif dre lakaat da dalvezout ar barregzhioù,  
sk.: emañ armez ar Stadoù-Unanet e barr e emastenn.

embregadus ag., a c'hell bezañ embreget; a zo aes da embreger.

embregadusted b., ar bezañ embregadus, sk.: an eil abegoù-se, o tennañ da  
embregadusted ar gerioù ha d'o diheñvalsonded, a renk e-touezh an  
abegoù stummadal.

emgavadeq b., keñtidigezh un niver a dud.

emgafren v. & g., db. ijinennoù, rannoù greantioù, h.a., mont en-dro hag  
emreolif diouto o-unan hep emell mab-den.

emgorf g., e gorf evit an unan, sk.: e kleñvedoù 'zo e kollez keal an  
emgorf.

emouezaat v., (Brd) mont pe lakaat da vont emouez.

emouez ag., (Brd) oc'h emouezañ; dezhañ ar galloud emouezañ, sk.: pennañ  
porzh mab-den eo bezañ emouez; g., stad emouez, sk.: dias eo rannañ  
an emouez diouzh an diemouez.

emouezad g., (Brd, And) pezh a zo emouezet; sl.: emouezañ, Notenn, storañ,  
Notenn.

emouezadenn b., (Brd) gwezhad emouezañ.

emouezadur g., (Brd) an emouezañ; disoc'h an emouezañ.

emouezañ v., (Brd, And) kacout keal dihanteret eus an unan ha, gant an unan,  
eus traoù all, sk.: er meleziour en em welan, dre an emouezañ avat en  
em welan oc'h em welout.

Notenn.- Doare dibar an emouezañ a gemenn arver an araogenn ouzh :  
emouezañ a ran ouzh ur wezenn emañ direzon; ar wezenn n'emañ ket em  
spered hogen er bed; abaoe Husserl e tiforc'her ur sellad trahontal  
(ar wezenn ma emouezan outi) hag ur sellad enmanel (ar pezh a emouezan  
pa emouezan ouzh ar wezenn) pe emouezad; sl.: ergorad, gourzhergor,  
merzhout.

emouezat ag., (Brd) a zo emouezet, sk.: doare emouezet ar youliñ.

emouezded b., (Brd) ar bezañ emouez.

emouezel ag., (Brd) db. an emouezañ.

emouezer ag. & g., (Brd) neb a emouez, sk.: ar boud emouezer; kv.: emouezour.

emouezerezh g., (Brd) an emouezañ; obererezh emouezañ; galloudezh emouezañ.

emouezour ag. & g., (Brd) an hini a emouez, boud emouez.

emouezva g., (Brd) rannbarzh-bred merket gant an emouezañ; Ko.: diemouezva.

emouezvaez g., (And) maez dioureet gant an emouezañ, sk.: "An anadennoniezh  
zo studi boelladel an emouezvaez".

Notenn.- Diwall a veskañ emouezva, parzh al lunegor ijinnet gant Freud  
evit taolennañ bred mab-den, hag an emouezvaez deskrivet gant an emouezañ  
oc'h emouezañ outañ e-unan.

emouezvezañ v., (Brd) bezañ, hanvezañ ond-emouez; hv.: emouezvout.

emouezvoud g., (Brd, And) 1) boud emouez, sk.: an emouezvoud nemetañ er  
bed eo mab-den, hv.: emouezour 2) boud an emouezañ (ar star-mañ o  
vezañ star rasis nemetañ ar ger emouezvoud) 3) rannbarzh ar boud a zo  
e dalc'h an emouezañ, hv.: emouezvaez 4) rannbarzh ar bred a c'hell

bezañ tizhet gant an emouezañ, hv.: emouezva 5) an hanvezañ end-emouez, hv.: emouezvezañ.

emouezvoud v., evel emouezvezañ.

emskiant b., (Prd) skiant (er star 1) an unan, sk.: an emskiant vroadel.

**Notenn 1.-** Diforc'hañ a reer skiant hag emskiant evel-henn : ar skiant zo troet ouzh anavezadoù na sellont ket dre ret ouzh an unan, an emskiant ouzh anavezadoù a sell dre ret ouzh an unan; sk.: ar skiant keodedel na laka ket e kont perzhioù dibar ur geoded, an emskiant vroadel avat a lak e kont broad an unan, dibar ha diforc'h-mat diouzh ar re all.

**Notenn 2.-** Diforc'hañ a reer emskiant hag emouezañ evel-henn : gant emouezañ e pouezer war fuzm an anavezout : "anavezout an unan, ha gant an unan, an traoù all"; gant emskiant e pouezer war danvez an anavezout, eleze doare an anavezad. An emouezañ zo un anavezout-ergorañ oc'h emplegañ anavezout an unan hogen harpet e gein outañ ha digor-frank ouzh traoù all; an emskiant zo un anavezout liesfuzm (ergorañ, dangorañ, o holl vodalezhioù, hag an holl genaoadurioù etrozo) troet war-du an unan ha kement a sell outañ : an emskiant vroadel da skouer a c'hall bezañ enni saveladurioù ergorel fraezh (anaoudegezh ouiziel istor, yezh, armerzh ar vro), hogen seurt saveladurioù zo goustennet dre ret gant luskoù dangorel rik o tennañ da "esbr" dibar, da wriziennadur an hiniennoù er vre end-seun. Dre-se e ranker arvezañ emouezañ en anadennoezh, emskiant en treserezh-ene (sk.: an emskiant reuziet); ar vroadeniezh e studi an div, hag a rank o diforc'hañ mat.

emzivrezif v., ober diouzh skouer an unan; en em neuzeañ diwar an unan, sk.: "mar gellfed lemal diouzh ar geriadur kement a ziwanas (...) dre emzivrezif ar yezh, e tizelofed moarvat e diaez pep yezh ur reizhiad-etzteurel berr a-walc'h (...)" Morleau-Ponty.

enanalat v., kentañ prented an analañ, sachañ aer er skevent; sachañ (un elfenn) er skevent, sk.: er c'hârioù ez enanaler mogedennoù ha poultrennoù e-leizh.

enaog g., an enazañ, sk.: evel-se da skouer e vo savet reollun enaoz an dour.

enkil g., (Arm) digresk ar c'henderc'h pe gorrekaat en e gresk.

enklotenn b., (Lzh) klotenn diabarzh, sk.: evit diskouez arvez an enklotennoù, ar pep gwellañ eo kemer ur skouer : Bezet fiER an matERi / Un dra vrAS eo ho fantASI.

enklotennañ v., (Lzh) klotennañ e diabarzh ur werzenn.

enklozañ v., lakaat e-barzh ha serriñ war, sk.: enklozañ a ra ouzhpenn ur werzhad timbroù par da dair gwazh timbradur e gasadenn.

enepwered ag., a zo e wered, pe o gweredoù, enebak; g., gwered diarreet enep d'un all.

engalver ag.& g., (Rzh) neb a ra engalv ouzh ur vainedigezh, un disantez, h.a.

enc'hwezhañ v., kas (un eazhenn) e-barzh, sk.: traoufuzmadur e dir eus ar potin war deuz dre enc'hwezhañ ennañ oksigen.

en-ven rv., (Kim) d'er gwrezverkoù boas, hep tomañ, sk.: ac'haozet e vez an oksilit dre wered en dour en-yen.

enmanel ag., (Prd) db. enmanif, sk.: er merzhout enmanel, na ziraez an emouezvoud netra a gemant na ve ket a anien gantañ; sl.: trehontel.

enmanelded b., (Prd) er bezañ enmanel.

enmanelezh b., (Prd) perzh bezañ enmanel; domani enmanel.

enmanif v., (Prd) manel e-barzh domani un anien; sl.: trehontif, Notenn.

enmanus ag., (Prd) oc'h enmanif.

enstokañ v., (Trd) lakaat elfennoù un troc'h-red an eil ouzh eben en doare ma c'hell ar red tredan tremen; ko.: distokañ.

entalvoud g., (Rzh) db. ul lozenn, un teul, h.a., an daracuiñ kaout talvoudagezh.

entalvoudegañ v., (Rzh) db. ul lozenn, un teul, h.a., mont pe lakaat da vont e talvoudagezh.

eran v., (Trd) stagañ en doare ma c'hell ar red tredan tremen dre ar stag, sk.: an ode erret ouzh blein-maes an daspugnerioù a vez anvet maezode.

ergorad g., (Prd) pezh a zo ergoret, eleze merzhet, dezvest, kounet, h.a.

**Notenn.-** Ur resisadenn zo d'ober amañ : "soñjal a ran e Loeiz"; an ergorad n'eo ket Loeiz, hogen pezh a soñjan pa soñjan ennañ; heñvaldra evit ar merzhout, ar c'hounañ, h.a. E berr, an ergorad eo pezh a ergorer pa ergorer ouzh udb.; sl.: gourzhergor.

ergoradel ag., (Prd) db. an ergorad, sk.: "E-touezh an deskrivadurioù-se amañ deskrivadurioù an ergorad; hevelep durc'hadur an deskrivañ a reer anezhañ ergoradel; outañ ez enebar an durc'hadur ergorel, o sellout ouzh modelezhoù an ergorañ e-unan, da skouer ar merzhout, ar c'hounañ, h.a." (Husserl).

ergorañ v. (kv.hBr.: ercor, "ictum"), (Prd) verb-rumm evit merzhout, dez-evout, kounañ, h.a., eleze evit modoù an anavezout o savelañ un anavezad diforc'h diouzh an anavezour; sl.: dangorañ, gourzhergor.

**Notenn.-** An ergorañ zo enta ur skeañ, ur pellaat, un argas d'an nann-me;

un daelañ eo ivez, o saveleñ e zaou deumen, ar me diouzh-un tu, ar gourzha ergor diouzh an tu all. An ergorañ, o saveleñ un disrann etre me ha nann-me, a zevoud ivez un eil enebadur : mar deo ergorañ saveleñ un anavezad evel diforc'h diouzh an anavezout, e ranker ober anv eus un "anavezout" diziforc'h diouzh e anavezad, un "anavezout" hep disrann etre me ha nann-me; an dangorañ eo.

ergorat ag., (Prd) a zo ergoret; savelet diwar-bouez an ergorañ, sk.: perzhioù ergorat an traoù.

ergorek ag., (Prd) dezhañ doare, ennañ perzh an ergorañ, sk.: un emzalc'h ergorek, ur varn ergorek; sl.: dangorek, Notenn.

Notenn.- Dre an ergorañ e vez an nann-me savelet hag anavezad evel nann-me; ergorek ez eo anta an emzalc'h o tisrannañ pezh a zo d'ar ma-oc'h anavezout diouzh pezh a zo d'an nann-me da anavezout.

ergorekted b., (Prd) ar bezañ ergorek.

ergorekzh b., (Prd) perzh bezañ ergorek.

ergorel ag., (Prd) db. ergorañ, sk.: an anavezout ergorel a eneber quzh an anavezout dangorel.

ergoreled b., (Prd) ar bezañ ergorel.

ergorelezh b., perzh bezañ ergorel; domani an devoudoù ergorel, sk.: verb an ergorelezh zo "rannañ", verb an dangorelezh zo "teuziñ".

ergorelour ag. & g., dalc'hiad an ergorelezh.

ergorelouriezh b., kelennadurezh o reiñ talvoudegezh hepken d'an ergorelezh, o sellout da skouer ar sentidigezh, an trivliadoù evel stummoù dilec'hiad ha war-staouez en emdroadur mab-den.

ergorour ag. & g., (Prd) neb a ergor, sk.: dangorour hag ergorour e vez bepred war un dro pap den; evel ergorour e saval an enebadur me/nann-me, evel dangorour ez eo dic'houzvez anezhañ; sl.: dangorour.

esaouenn b., hinienn esou; esou termenet evel mentenn.

esou g. (kzbr.: essou), lac'h etre daou pe lies tra; hed etre daou lac'h en egor; diforc'h etre div elfenn en ur skeul; sk.: e ranner an esou e 15 esaouenn hag ez astenner an dereziadur d'ar c'harann a-bezh.

eufleñnañ v., lakaat e stumm rannigoù munut-kenan, sk.: ur c'horf eufleñnet mesket gant un heverenn hep bezañ dileizhet enni.

evezhial ag., db. an evezh; o tennañ d'ar gefridi evezhiañ, sk.: gwazva ar genurzha a studi ez-evezhial goulenn an danvez-skoliad.

ezenalat v., eil prantad an analat, kas er-maez eus ar skevent an aer bet sachet enno gant an enalat; kas (un elfenn) er-maez eus ar skevent

dre an ezanalat, sk.: dinoñ a reer aes-tre bezañ an dicsidenn garbon en aer ezanalat dre c'hwazhañ en ur werennad dour-raz.

ezger g., ar ger evel eztaol; eztaol e stumm gerioù.

ezgerel ag., db. ezger pe ezgeriañ.

ezgeriad g., pezh a zo ezgeriet.

ezgeriadenn b., gwezhiad ezgeriañ; pezh a zo ezgeriet en un taol.

ezgeriadur g., an ezgeriañ; disoc'h an ezgeriañ.

ezgeriadus ag., a c'hell bezañ ezgeriet.

ezgeriadusted b., ar bezañ ezgeriadus.

ezgeriañ v., ezteurel e stumm gerioù, sk.: ne dizhe ket ezgeriañ e levez

ezgeridik ag., tuet da ezgeriañ.

ezgeridigezh b., an ezgeriañ.

ezgeriel ag., evel ezgerel.

ezgerienn b., bomm ezgeriañ; heuliad gerioù, prl. erret dre ur ster, sk.: ul lavarenn zo kement ezgerienn a c'hell bezañ lavaret gwir pe faos.

ezhonn-vezhañ g.v., (Syr) kement a denn da lakaat mab-den da ober gant ar yezh.

ezrevall b., deskrivadur e reizh ur roll.

ezrevallañ v., deskrivañ e reizh ur roll, sk.: a) pa ezreveller un tauliad e verker niver ar skouerenoù a hep teul a ya d'e ober b) war linenn gentañ an daolenn amañ stad ar gont da zeiz kentañ ar prantad ezrevall.

ezrevallad g., roll traoù, menegoù, h.a., ezrevall.

ezrevalladur g., an ezrevallañ; disoc'h an ezrevallañ.

ezroll g., an ezrollañ.

ezrollañ v., lakaat e-maez roll, sk.: ezrollet e vez dre ret ar skolidi e diwez pep rummad-studi.

ezrollidigezh b., an ezrollañ, sk.: hevelap ezrollidigezh a c'hell devoudañ frauzidigezh gwir ar skoliad da vezañ enrollet a-c'houdevezh.

eztalvoud g., (Rzh) db. ul lezenn, un teul, h.a., ar paouez kaout talvoud-egezh.

eztalvoudegañ v., (Rzh) db. ul lezenn, un teul, h.a., mont pe lakaat da vont e-maez talvoudegezh.

eztannidigezh b., an eztennañ.

eztaol g., an diskouez trivliadoù, mennadoù, mennoziou, h.a. dre ar jestr-  
erazh, an neuz-dremm, al lavar, h.a.; disoc'h an ezteurel; tro-lavar,  
gerienn sellat evel diskouezadur un trivliad, ur mennad, ur mennoz.

eztaoladur g., an ezteurel; disoc'h an ezteurel.

eztaolus ag., tuat, gouest da ezteurel; oc'h ezteurel kalz pe gant nerzh.

eztaoluster g., ar bezañ eztaolus; tuadur, gouestoni da ezteurel, sk.: ur  
meni "personelezh" en devez enta ar ger lennegal, un "dremm", na vez  
morse kaset da hesk gant nep studi an eztaolusterioù anezhi.

ezwerzhadif v., ar jederezh arnodel, diskentañ ar gweredoù estren o tont da  
faosañ d'ezwerzhadur ar gwerad muzuliet, sk.: gwerzhad dik pouez ur c'horf  
a vez sevelet dre ezwerzhadif bunt arc'himedel an aer war ar c'horf ha  
war ar pouezioù merket.

## F

fellaenn b., (Arm) prantad diskar en armerzh ur vro, ur rannvro, h.a.

feldspat g., anv-rumm haloù un dronkenn heksasilikak, silikatoù daouek  
aluminium hag ur metal alkaliek, oc'h ober ar 52 % eus ar greunit, ar  
46 % eus ar bazalt.

fellat ag., a dremen hep ober e zlead, e gefridi, pezh a oa gortozet digantañ,  
sk.: e kefridi Rann ar Sevennif emañ (...) kemer lec'h ar skourroù fellat.

fenner ag., sl.: lestr fenner.

fenolftalein g., (Kim) merker dre liv, diliv gant an tronkennoù, o trefi  
glasruz gant ar bazennoù.

feur (e) gl.; db. ur c'hementad, bezañ e feur un all a dalvez n'emañ ket  
ar c'heñver etrezo re bell diouzh an unanenn, sk.: re vihan ez eo tolz  
un atomenn e-skoaz an tolzoù studiet boas, ar re-mañ o vezañ e feur ar  
gramm; hv.: a-feur-ment gant; sl.: a-unfeur.

feur-kenaoz g., keñver etre kementadoù an elfennoù a ya d'ober udb., sk.:  
dre ec'haozañ hag enaozañ an dour e lakaer anat ez eo kendalc'hel feur-  
kenaoz an dour.

filipinad g., annezad Filipinas.

Filipinas l., enezeg 300 000 km<sup>2</sup> e Mor Sina, trevadennet gant Spagn  
diwar 1527, trec'hpere'hennet gant ar Stadoù-Unanet e 1898, dizalc'h  
abaoe 1946.

filipinat ag., db. Filipinas pe Filipinaz.

flammer g., benveg evit tizhout gwrezverkoù uhal diwar-bouez ur bomm  
aezhenn entanet, ar flammer ordinal o tanvezif an aezhenn-leskiñ hag  
an aer, ar flammer oksiaketilen o tanvezif an oksigen hag an aketilen  
hag o tizhout gwrezverkoù 3000°C.

flammleskiñ v., leskiñ gant flammoù, elzeze pa vez aezhel an helosk pe pa  
c'han aezhennoù helosk; ko.: mutleskiñ.

forzh b., (Trd) mentad gin d'an harz, elzeze rannad ar read dre ar barr,  
 $C = R^{-1} = U^{-1}I$ ; atalad Giorgi :  $L^{-2}M^{-1}TQ^2$ ; hv.: tredanforzh.

forzhus ag., (Trd) gantañ ar perzh diskouez forzh ouzh tremen ar red tredan;  
hv.: tredanforzhus.

forzhusted b., (Trd) mentenn o verkañ perzh un danvez heren da ziskouez  
forzh ouzh tremen ar red tredan; mentad termenet evel gin d'an harz-  
usted,  $1/p = U^{-1}IL^{-1}$ ; atalad Giorgi :  $L^{-3}M^{-1}TQ^2$ ; hv.: tredanforzhusted.

fosfat g., (Kim) hal an dronkenn fosforek, danvezet dh. evel temz-dour.

fosforek, trankenn - b.ag., (H<sub>3</sub>PO<sub>4</sub>) trankenn veinel kreñv, darbaet dre  
wered an dronkenn sulfurek war ar fosfatoù naturel.

foug as. (La.: fungus), plant kriptogamek hep klorofil, en o zouezh al  
louedennoù, ar c'heball-touseg, h.a.

framm g., 1) strollad pezhioù kempennet diouzh un urzh pe ur gefridi, sk.:  
framm an doenn 2) doare ma'z eo kempennet pezhioù ur framm l, sk.:  
gant ar volekulenn hidrogen e kaver ivez ur framm heñvel 3) ar c'hempenn  
a zo etre parzhioù ur framm l kemeret evel sellad distag, sk.: ar frammoù  
kezentiadet a vez disheñvel eus an eil meuriad d'egile.

frammad g., 1.2) endalc'h ur framm; hollad fellis kempennet e reizh ur framm,  
sk.: frammadoù atom eo ar molekul 3) hollad o tennañ e berzhioù diouzh  
e gempennidigezh muioc'h eget diouzh an danvez a zo ouzh e ober, sk.:  
"ar stummad a vez termenet dre enebadur ouzh un danvez estren dezhañ,  
hogen ar frammad n'en devez endalc'h ebet diforc'h dioutañ : an endalc'h  
e vez end-beun, kantvezet evel kempenn poelloniel" (Cl. Levi-Strauss)

frammadel ag., db. ar frammad, dh. er ster 3.; hv.: frammadurel.

frammadelezh b., perzh frammadel; perzh bezañ frammad.

frammadelour ag.& g., dalc'hial ar frammadelouriezh.

frammadelouriezh b., kelennadurezh o lakaat ar frammadoù, er ster 3., da

selled kentañ ar vredenizh, ar gevredadonizh, ar yezhonizh, h.a.

frammanoniel, frammanonizhe ag., db. frammanonizh.

frammanonizh b., studi ar frammanon 3.

frammanonour g., neb a oar diouzh frammanonizh.

frammanour g., 1) ar framman; disoc'h ar framman 2) evel framman 2. 3) evel framman 3 pe framman 3.

frammanour ag., db. frammanour, dh. ar ster 3., sk.: ur werzh frammanoural zo gant ar fuzm, hag ur werzh darvoudennel zo gant ar stumm.

framman v., kempenn parzhioù udb. diouzh un urzh, ur gefridi, ur pal; sl.: kenurzhiañ, Notenn.

frammanvezañ v., (Arm) db. embregerezhioù, kenstrivañ dizalc'h, hep emell ar Stad dh.

frammanbreger v., (Arm) diazezañ kenderc'hioù, kenwerzhioù, h.a., en-dizalc'h, hep emell ar Stad dh.

freuz-yalc'h g.b., (Arm) digempouez dieiltro en arc'hanterezh ur riez, ur gennad-armezh, h.a., sk.: goude brezel 14-18, war-lerc'h ur prantad emastenn, e tiwaskas ar Stadoù-Unanet un enkadenn c'harv denoquet e 1929 dre ur freuz-yalc'h.

froud d'an Acour b., ergerzhadeg vras e c'hoarvezas e Norzamerika en 19t kantved da heul dizoloadur acour er Gornog Pellañ, sk.: bev e van bepred ar remziadoù nevez afoer ar "Froud d'an Acour" a gasas e 1848 miliadoù klaskerion war-du tiriadoù digevannez ar Gornog Pellañ.

fuzm b., 1) (Usv) evit ar skolastik, pezh a ro hennelezh d'an danvez, ha boud d'an dza: "forma dat esse rei" 2) da heul, stericù niverus diwanet dre lakeat da dalvezout war meur a dachenn eus ar preder an enebadur skolastikel etre ar fuzm hag an danvez, dh. (P11) ez eur risklet eus an enebadur usvedoniel: fuzm (hennelezh) - danvez (materia prima), d'an enebadur poelloniel: fuzm (keñver, kempenn) - danvez (termenoù e-keñver, e kempenn) 3) (Yon) anien yezhel ur ger, enebet ouzh ar stummoù a c'hell kemer hervez an degouezhioù, hevelep enebadur o tennañ da enebadur skole astikel ar "forma substantialis" ouzh ar "forma accidentalis", sk.: "un diforc'h a ran etre "stummoù" ha "fuzmoù": ar "stumm" e-keñver ar son hag ar skritur, ar "fuzm" e-keñver ar yezhadur" (Roparz Hemon) 4) arveret ac bet ivez ar ger "fuzm" evit treiñ an alamaneg "Gestalt", hinienn o tennañ hec'h hennelezh diouzh hec'h emgempenn diabarzh, keñver o werediñ er reiz hag en traoù war un dro, hogen gwel eo ober er stericù-se gant framman, framman, emframman (sl.)

fuzmek ag., 1) (Usv) a zo dezhañ fuzm er ster 1. 2) (P11) a zo ennañ ur reizhiad keñverioù, ur c'hempenn poelloniel.

fuzmekañ v., (P11, Jed) diren un hollad stlennadoù, ur c'hozef anavezadurioù d'ar reizhiad keñverioù a zo ennañ, sk.: fuzmekañ zo komentioù o tiwanañ etre an arouezioù-se.

fuzmekted b., ar bezañ fuzmek.

fuzmegezh b., (P11, Jed) perzh bezañ fuzmek, sk.: brasoc'h fuzmegezh zo ar pezhioù war an daolenn-wezboell eget er mein strewet war ur park.

fuzmel ag., db. ar fuzm, sk.: heñvalderioù fuzmel zo etre an evn hag ar c'harr-nij; o tennañ d'ar fuzm, o sellout ouzh ar fuzm, sk.: poellonizh fuzmel.

fuzmelaat v., reiñ un doare fuzmel da, sk.: an Iliz kenkoulz hag ar Stad o deus fuzmelaat an dimeziñ; reiñ perzh bezañ fuzm da, sk.: ar "ya" d'ar beleg ha d'ar maer zo fuzmelaat evel an degemer eus ar stad-dimeziñ; reiñ fuzm d'ar fuzm diwar-goust an danvez, an dalc'h, an anien, sk.: un arver d'al lennegezh eo ar fuzmelaat.

Notenn.- Un heklever en deus ivez en darempredoù denel an enebadur skole astikel etre ar fuzm hag an danvez. Ar fuzm avat, mar ro boud da danvez ar c'heñverioù kevredigezhel, en ro en-arouezel, eleze dre astenn he fuzmelezh war un danvez estren d'an dalc'h, sk.: ar paperoù, ar sinadurioù da gefver un emglev. Seurt astenn-fuzmelezh a reer ar fuzmelaat anezhañ, ha fuzmeladoù eus an doareoù savelet drazañ.

fuzmelad g., disoc'h ar fuzmelaat; doare eus fuzmelezh ur c'hengread, sk.: fuzmeladoù ur gevrat.

fuzmeladur g., ar fuzmelaat; disoc'h ar fuzmelaat; doare ma tle bezañ sevenet un dra evit bezañ talvoudek e-keñver lezenn pe dereat e-keñver kevredigezh, sk.: fuzmeladur an dimeziñ.

fuzmelach g., fuzmelad dibouez, dreistezhomm, gt ster dismeg.

fuzmelacour ag. & g., neb a ro pouez d'ar fuzm diwar-goust an danvez, an dalc'h, dh. en darempredoù denel.

fuzmelacouriezh b., fuzmelaerezh g., tech, emzalc'h ar fuzmelacourion.

fuzmelded b., ar bezañ fuzmel, sk.: fuzmelded al lidoù na denn netra eus o zalvoudegezh.

fuzmelezh b., (Prd) perzh, doare fuzmel, sk.: fuzmelezh ar sevender a re dioutañ ur perzh a sevenadur; perzh bezañ fuzm, sk.: fuzmelezh ar jedonizh a ro tu da jediñ hep kaout tra da jediñ war e zivout; perzh tennañ d'ar fuzm, sellout ouzh ar fuzm, sk.: fuzmelezh ar jedonizh a dalvez e sell hepken ouzh fuzmegezh an traoù.

fuzmeliezh b., doare fuzmel a-berzh ub., eleze diwirion, sk.: fuzmeliezh

e ziskleriadurioù ne douelle den.

furmelaour ag. & g., (Prd) dalc'hiad ar furmelouriezh; evel furmelaour.

furmelouriezh b., (Prd) emzalc'h, kelennadurezh prederouriel, kenadoniel, h.a., o reiñ muioc'h a bouez d'ar furm eget d'an danvez; ez-strizh, kelennadurezh Kant o lakaat talvoud divazoniel ur gread e dalc'h ar furm (ar mennad) anezhañ, ha n'eo ket en danvez (er sevenidigezh) anezhañ.

G

galen g., (Kim) sulfidenn blom naturel PbS.

gaouus ag., a c'hell nozout, sk.: e kefridi Adrann an Difenn emañ pleustriñ war gement gra gaouus a-berzh hiniennoù pe aozadurioù a-ziavaez.

ganet v. ganet, (Kim) db. un dazgwered, ur c'horf o tazgwerediñ, h.a., lakaat (ur c'horf) da ziwanañ, sk.: pegement bennak e ve an ec'honadoù oksigen hag hidrogen mesket en elienvolz, e ked an div aezhenn, o c'hanel dour, bepred diouzh un havelep kenfeur.

genezh g., natur dibar ub. pe udb., sk.: an holl aezhennoù a c'hoarvez a volekul, savadurioù atom a un genezh evit ar c'horfoù eeun, liesgenezh evit ar c'horfoù kediat.

gerdarzhel ag., db. gerdarzh; o tennañ d'ar gerdarzh, sk.: setu perak e reer eus saurt kevazaster ar c'hevazaster kengerel gerdarzhel.

geriadur-frammañ g.v., ar pep pouezusañ eus geriadur ur yezh a-fat bezañ ur framm d'ar vuhez, d'ar spored, d'ar yezh hec'h-unan, h.a., sk.: un tamm re eeunik e vefe koulskoude displegañ taerded ar stourm breizhek direk an destuziañ gallek dre skortad ar geriadur-frammañ gallek.

geriel ag., db. er ger pe ar gerioù, sk.: stummoù geriel hep ster-kent.

gerielezh b., perzh bezañ geriel.

gavel-skei b.v., doare turkez arveret da droc'hañ ar metaloù.

ginfeur g., keñver etre daou gementad hevslep ma van kendalc'hel liesad an daou niver o merk, sk.: bezet an daou gementad en argemm a ha b, ez eus ur ginfeur etrezo mar galler skrivañ ab = k, k o vazañ ur gendalc'henn.

glavegezh b., perzh bezañ glavek; keñver termenet evel rannad dre an amzer

eus ar c'hementad glav a gouezh en ul lec'h, muzuliet peuzliesañ e mm tevder dre viz pe dre vloaz.

glaou-tresañ s., glaou koad diwar skourroù ar gwez-gwerzhidi, danvezet da dresañ.

glaeruz ag., liv etre ruz ha limestra.

glein ag., db. ul liñvenn dh., na weler korfig ebet en arlug enni, a zo peurvuill hec'h ec'honenn; hv.: boull, kleuz.

gleinaet v., mont pe lakaat da vont glein.

gleinded b., ar bezañ glein.

glizhennadur g., ar glizhenniñ; disoc'h ar glizhenniñ.

glizhenniñ v., db. un aezhenn, liñvenniñ a dakennoù munut, ar skouer anavezetañ eus an anadenn-se o vazañ ar glizh.

gnevif v. gnaouet (krBr.: gneuff), dont war-wel, anat.

goarlec'h g., lec'h ma'z eer da gemer goar, eleze da dremen un shan-labour, h.a., sk.: terket ez eus bet ivez goarlec'hioù, traezhennoù, menezdrevioù, sportoù goafv.

gom g., anv-rumm danvezennoù gludek ha stirennek a denner eus sabr gwaz 'zo; danvezenn galvezadal dezhi perzhioù er gomou naturel.

gounezel ag., db. gounit-douar, gounezerezh, hv.: gounidigezhel.

gounezorezh g., pleustrerezh ar gounit-douar.

gopreostour g., gwezhour a ya da goumant evit padalezh an eost, sk.: eizh kant mil gopreostour mec'hikat a vefe bep bloaz o treuziñ an harzoù.

gorread-harp g.v., kementad ur c'horreenn-harp, sk.: da gaout kammou-stumm bihan e ranker digreskiñ ar gwask, eleze, evit un nerzh lakaat, kreskiñ ar gorread-harp.

gorread-unanenn g.b., gorread dezhañ gwerzhad un unanenn, sk.: an nerzh o werediñ dre c'horread-unanenn a reer anezhañ nerzh gorread, pe gwask.

gorrek ag., db. ul loc'h, ur c'henn, ur gwered, o c'houlenn an-keñveriek hir amzer, sk.: er merglañ e c'hoarvez un oksideruzh gorrek; ko.: harrek.

gorreenn-harp b.v., gorreenn-stok etre daou gorf dalc'het an ail euzh egile dre berzh ar ponnerder, h.a.

gorreer g., ardivink da zibradañ semmen ponner, sk.: ar gorreer dre vif, ar gorreer dre zour.

goudelakaat v., lakaat goude, da heul, sk.: teurvezit gwolout an notenn goudelakaat.

goudelakaat

gouelec'hiek ag., dezhañ doare ur gouelec'h, sk.: er su, ez eo krinennek kompezennoù ha steudadoù an arvor, warno ar chaparral teusk, ha gouelec'hiek an diabarzhvro.

gouelezenn b., gwiskad rannigoù kalet munut da gentañ en arlwg en ul liñvenn ha diskennet el lodenn draoù anezhi dre berzh ar ponnerder, un nerzh-digreizañ, h.a.

gouelezennañ v., db. rannigoù kalet en arlwg, diskenn d'an traoñ; hv.: diazezañ, sk.: an dilavañ, anezhañ lezel al lei da ouelezennañ e deun al lestr.

gouezoniel ag., db. gouezoniezh; hv.: skiantel.

gouezoniezh b., 1) dre vras, studi boelladel kement a c'hell bezañ anavezot, sk.: ar ouezoniezh arvez; hv.: skiant 2) studi boelladel ur sellad resis, sk.: gouezoniezh ar stered pe steredoniezh.

gouezoniezhel ag., db. gouezoniezh.

gouezonour ag. & g., gourdon war ar ouezoniezh pe ur ouezoniezh

gouezour ag. & g., neb a zo gant ar c'halloudezh anavezout dihanterat; sl.: kedouezour, emouezour.

gouezvezañ v., bezañ, hafvezañ gant ar c'halloudezh anavezout dihanterat; hv.: gouezvout; sl.: kedouezvezañ, emouezvezañ.

gouezvoud g., 1) boud gant ar c'halloudezh anavezout dihanterat, hv.: gouezour 2) boud an anavezout dihanterat (hemañ eo ster resis ar ger gouezvoud) 3) rannbarzh ar boud e dalc'h an anavezout dihanterat 4) rannbarzh ar bred merket gant an anavezout dihanterat; sl.: kedouezvoud, emouezvoud.

gouezvout v., evel gouezvezañ.

gouiziad g., neb a oar; neb zo gourdon war ur gevran stud, sk.: rankout a ra ar ouiziaded mui ouzh mui en em strolleñ a-benn ren o imboure'hadennoù.

gouiziadoniel ag., db. gouiziadoniezh.

gouiziadoniezh b., (Prd) studi o kemer da sellad ar ouezoniezh hec'h-unan, he fennaennoù, he hentenoù, he c'hudennoù poelloniel, h.a., he c'hefverioù prederouriel, h.a.; hv.: epistemologiezh.

Notenn.- Diforc'h a reer ar ouiziadoniezh, studi dezvarnel ar ouezoniezh, hag an anaoudoniezh, studi boelladel an anaout, ken evel greout, ken evel galloudezh.

gouiziadoniezhel ag., evel gouiziadoniel.

gouiziadonour ag. & g., gourdon war ar ouiziadoniezh.

gouiziadur g., kement a oar ub.; pezh a ouezer dre vras pe db. udb., sk.: gouiziadur mab-den a gresk bramañ en ur bloavezh kement ha gwezhall en ur ober ur c'hantved.

gouiziadurel ag., db. gouiziadur pe gouiziadurezh.

gouiziadurezh b., hollad an traoù gouezet pe gouiziadur; studi ar gouiziadur.

gouiziadurour ag. & g., neb a studi ar gouiziadur, sk.: kentañ tra a verk ar gouiziadurour eo an digempouez a zo e spered hor c'hempredidi, pep hini ac'hanomp o vezañ gouiziek-bras war un dachennig ha diouiziek war ar peurrest.

gouiziadus ag., a c'hell bezañ gouezet, hv.: gouezadus; a c'hell bezañ kemeret da sellad gant ar ouezoniezh ha lakaet e stumm gouiziadur.

gouiziat ag. (krbr.: gouyzyat), a oar; gourdon war un gevran stud.

gouiziata v., kemer anaoudegezh ouezoniel aus udb.; lakaat anaoudegezh udb. da vezañ gouezoniel, sk.: anavezot eo ar pellsanterezh, gouiziataat avat n'eo ket bet c'hoazh.

gouiziatastur g., ar gouiziata; disoc'h ar gouiziata, sk.: gouiziatastur un dra a vez graet alies kantvedoù war-lerc'h an anavezadur anezhañ.

gouiziatastus ag., a c'hell bezañ gouiziataat, sk.: e-pad pell e voe ur gudenn gouzout ha gouiziatastus e oa pezh a verked gant ar ger "ane".

gouiziataer ag. & g., neb a ouiziata, sk.: ar poell gouiziataer.

gouiziataerezh g., obererezh, pleusterezh gouiziata.

gouiziel ag., db. ar gouzout, dh. ar gouzout gouezoniel, sk.: pezh a zigemm ar poellata gouiziel diouzh ar poellata boutin n'eo ket bezañ pe divezañ pleustrek, met pleustriñ war ar gouzout; hv.: skiantel.

gouizielded b., ar bezañ gouiziel.

gouizielezh b., perzh bezañ gouiziel, sk.: hon tech a ugentvediz eo lakaat gouizielezh a-lec'h ma vez a-walc'h gant skiant voutin ar vuhez.

gouizielour ag. & g., dalc'hial ar ouizielouriezh; unan techet d'ar ouizielouriezh.

gouizielouriezh b., emzalc'h, kredenn, kelennadurezh oc'h ober aus ar ouezoniezh tachenn nemeti an anaoudegezh, o lakaat e vo diskoulmet ganti kement kudenn o tennañ da donkadur mab-den.

gouiziek ag., a oar kalz; gourdon war un pe lies tachenn.

gouizieq g., neb a oar kalz; neb zo gourdon war un pe lies tachenn; sl.: gouezonour, gouiziad.

gouiziegezh b., perzh bezañ gouiziek; pezh a oar unan gouiziek.

goulenniad g., neb a c'houlenn, sk.: Gwazva ar C'hreizennerezh a zegemenn d'ar goulenniad meneg an darbenn ha sav ar yalc'had-studi.

gouleskerezh g., ijinerezh ar gouleskiñ glaou.

gouraval g., acouraval bras eus India; hv.: pamlemouzen.

gourdoniad g., neb zo gourdon war un danvez, sk.: stummet a vo' muioc'h a imbours'herion, a galvezourion, a c'hourdonidi.

gourfenneriañ v., lakaat ur gourfenner (da), sk.: gervel un anv-kadarn nevez devezet dre c'hourfenneriañ da zisplegañ ur c'heal nevez zo unan eus hentenoù disvez ar geriaoua brezhonek.

gourc'hwal g., (Kb.: gorchwyl), implij avit un den en un embregerezh.

gourzhergor g., (Prd) pezh a zo ergoret outañ; sl.: ergorañ, ergored.

**Notenn.**- Enebadur zo etre gourzhergor hag ergored en doare merket gant ar skouer-mañ : "soñjal a ran e Loeiz"; an ergored n'eo ket Loeiz, hogen pezh a soñjan pa soñjan enañ; ar gourzhergor zo Loeiz; heñvaldra evit ar merzhout, ar c'hounañ, h.a.

gourzhergorek, gourzhergorenek ag., (Prd) dezhañ doare ar gourzhergor, ar gourzhergorenoù.

gourzhergorel ag., (Prd) db. gourzhergor.

gourzhergorenn b., (Prd) evel gourzhergor, gant pouez lakaat war ar perzh a hinienn.

gourzhergorennañ v., (Prd) kemer da c'hourzhergor, treiñ e gourzhergorenn, sk.: "An ergored (Objekt) a zeu da vezañ gourzhergor (Gegenstand) da heul un treiñ dibar ouz e c'hourzhergorennañ (vergegenständlichenden)" (Husserl).

gourzhergorenek ag., (Prd) evel gourzhergorek.

goustennañ v., bezañ dindan ha dec'hel war steg, war astenn; (Brd) db. luskadoù, reiñ tro da elfennoù all da vezañ kevreet, da chom kendalc'hel, h.a., sk.: savladurioù ergorel goustennet gant luskoù dangorel rik.

goustenner ag. & g., neb a c'houstenn; (Men) hirdu un tric'hozn serzh.

gouzplegañ v., chom hep lakaat ur ger en ur frazenn ma oa e blas anni, a vezañ ma chom sklaer ar frazenn heptañ, sk.: en nac'hañ e veze gouz zispleget "ma" : en un merchoñ yen na chome den e'n bed.

gouzout v., anavezout o vezañ gouest da reiñ da anavezout pezh a anavezout.

**Notenn.**- An diforc'h etre gouzout hag anavezout zo war dachenn ar c'hehentif : gouzout a empleg kehentif, eleze eztaurel pezh a anavezout en doare ma ve anavezout ivez gant an hentez.

gra g., (Rzh) kement ober reizhataet dre lezennoù pe kendivizadoù.

gread g., pezh a zo graet; (Rzh) evel gra; sl.: kenread, treuzread.

gremder gorreel g.ag., mentad fizikel texmenet evel rannad ur grem dre ur gorread, atalad mentawouriezhel MT-2; sl.: tennder, tennder-gorre.

gronnvan g., lec'h ma'z eus danvezioù a-gostez evit an dazont, sk.: ar Goadeg vBreat, anezhi unan eus brasañ gronnvanoù prenn bouk ar bed.

gwareg tredan b.g., tremen tredan etre div ode a-dreuz d'un aezhenn, o reiñ gwrezverkoù uhel ha gouloù kreff.

gwask g., (Fiz) mentad, ha mentenn geñverek, texmenet evel rannad un nezh dre ur gorread, nezhder gorreel, atalad mentawouriezhel : MI-17-2.

gwaskizelvan g., en ur geitwaskeg, poent-kreiz izelwask, sk.: mar bez ar poent-kreiz ur poent izelwask, an aewwask o kreskiñ bep ma pellaer dioutañ, e reer anezhañ ur gela'houdenn, pe c'hoazh ur gwaskizelvan, pe, ez-verr, izelvan; sl.: gwaskuhelvan.

gwaskaouer g., (Fiz) savadur fizikal evit anataet gwared an aewwask, doare mental bet erlec'hiet enni ouz ha fladennoù div bellenn genbouez, nemet kleuz ha klaz brasoc'h an eil eget eben : lakaet dindan ur c'hloc'h erret ouz ur sunerez-c'houlloñ, e kostez ar ventel war-du ar bellenn vrasañ pan ec'haezhez.

gwaskuhelvan g., en ur geitwaskeg, poent-kreiz uhelwask, sk.: mar bez ar poent-kreiz ur poent uhelwask, an aewwask o tigrskiñ pe bellaer dioutañ, e reer anezhañ un adkalc'houdenn, pe uz gwaskuhelvan, pe un uhelvan; sl.: gwaskizelvan.

gwaskus ag., o waskañ, sk.: an aer a ziorre ouz ar speurenn nerzhoù gwaskus.

gwaskventañ v., muzuliañ ar gwask, sk.: klozenn-waskventañ.

gwaskventer g., banveg da vuzuliañ ar gwask.

gwazadur g., ar seveniñ kefridioù boutin; aozadur kret evit seveniñ kefridioù boutin, sk.: amañ ivez e vez emgefreak gwazadurioù ar genvuhez.

gwazadurel ag., o tennañ d'ar gwazadur, sk.: advezet e vez diouz zot ar reizhennoù gwazadurel; db. gwazadurezh.

gwazadurezh b., studi, pleustierezh war ar gwazadurioù, sk.: Skol ar Wazadurezh; ar gwazadurioù en ur vro, pe an urzhiadur anezho, sk.: Kemplezhkenan e vez gwazadurezh ar riezoù anavez.

gwazadurour ag. & g., neb a studi pe a bleustr war ar wazadurezh pe ar gwazadurioù.

gwazrifiv g., (Dil) parzh ar gwazverk, anezhañ un niverenn o patvedañ an teul pe an teuliad.

gwazverk g., (Dil) merk lakaet war un teul pe un teuliad arveret e-ser ar gwazodur; sl.: diellverk.

**Notenn.**- Diforc'h a lakaer stre an diellverk, merk lakaet war un teul evit e renkañ en diellaoueg hag ar gwazverk, merk lakaet war un teul pe ur strobad teulioù e sell eus an ober ganto.

gwaledus ag., e c'hell bezañ gwelet, sk.: an dilive h ne c'haller muzuliañ nomet mar bez gweladus al live er gozenn.

gwenn zink g.g., (ZnO) oksidenn zink.

gweraerezh g., ijinerezh ar gwer.

gwerc'h (hBr.: guerg) ag., e fedus, gweradus; g. efed, e fedusted, gweredusted, sk.: marc'h va huñvre n'en deus gwerc'h ebet evit va c'has er-maez eus va c'hembr.

gwerc'hañ v., (Prd) kaout efed, gweradif, oberiañ; bezañ end-eeun, dre enebadur ouzh bezañ gallus, mennet, martezeet, h.a.

gwerc'hek ag., (Prd) dezhañ gwerc'h; o vezañ end-eeun, ha ket hepken o vezañ gallus, mennet, h.a.

gwerc'hekted b., (Prd) ar bezañ gwerc'hek.

gwerc'hegezh b., (Prd) perzh bezañ gwerc'hek.

gwerc'hel ag., (Prd) db. gwerc'hañ, sk.: ar merzhad zo ar sellad mennel, an dra merzhet ar sellad gwerc'hel.

gwerc'helled b., (Prd) ar bezañ gwerc'hel.

gwerc'helezh b., (Prd) perzh bezañ gwerc'hel; perzh gwerc'hañ.

gwerzh b., 1) kementad arc'hant a seller evel kevatal d'udb., sk.: setu gwerzh va c'houmanant; nep tra e kement hag o kaout gwerzh, sk.: ur werzh diogel eo un daolenn livet 2) braster kevatal d'udb, en ur c'heñver divizat, sk.: gwerzh un nerzh zo gwerzh ar c'hrañvder anezhañ; nep tra e kement hag o kaout gwerzh en ur c'heñver divizat, sk.: ur werzh skeuliadel eo krañvder an nerzh 3) dre estenn-ster, kevatalder nep tra daveadus pe gañveriadus, sk.: ur werzh skeuliadel en deus krañvder an nerzh, ur werzh sturiadel en deus an nerzh e-unan ez-strizh; nep tra e kement hag o kaout gwerzh er ster 3., sk.: ur werzh sturiadel eo an nerzh ez-strizh.

**Notenn.**- Diforc'hañ a reer gwerzh ha talvoud evel-henn : gwerzh a empleg un daveañ, ur c'heñveriañ, eleze ur c'heñver ergorat; talvoud a empleg ar bastañ d'un ezhomm, eleze ur c'heñver dangorat. Er yezh voutin a kaver an daou ster gant ar verb talvezout, sk.: "an armel-se a dalvez din evit renkañ va zraoù (bastañ a ra da'm ezhomm, keñver dangorat), daoust ma

ne dalvez ket kalz a dra (he gwerzh zo bihan, keñver ergorat). Er yezh dangorelezh, sk.: "ur werzh fizikel, jedoniazhel"; gant talvoud hag e zeveradoù bewezh ma vez empleget, pe da nebeutañ ma ne ranker ket lakaat er-maez, un dave d'an dangorelezh, sk.: "an talvoudoù speredel", "talvoudegezh un ti". Merzhout a reer an diforc'h stre "talvoudegezh un ti" ha "gwerzh un ti", stre "ar gwerzhioù armerzhel" hag an "talvoudoù armerzhel".

gwerzhad b., peadra o talvezout (kement ha), sk.: kornbegit amañ ur werzhad timbroù par da deir gwezh timbradur ho kasadenn.

gwez-gwerzhidi s.l., krennwez prenn bouk a zenvezer ar c'head anezho d'ober glauc-tresañ; hv.: koad-gwerzhidi.

gwezhour ag.& g. (kv.hBr.: gueith), labourer, micherour, neb a labour en un embregerezh, sk.: tremen a ra hevelep gwezhourion gant goprou izel, draist-holl ar "wet backs".

gwezhour-douar g.g., labourer-douar gopret, sk.: ar Ra Zu zo bodet stank e Stadoù ar Su Kozh, ma vezent draist-holl metaerion ha gwezhourion-douar.

gwezha g. (kv.hBr.: gueith), stal-labour; en ur greanti, rann gouestlet d'un emell resis, sk.: adalek ar gwezhvaoù peuraocañ betek ar stlejadoù frammañ.

gwid g., rann greiz ur vourc'h, lec'h ma emañ tolpet an tiz-anez; sl.: Gwitalmeze; ko.: ploug, sl.: Ploudalmeze.

gwiriek ag., reizh ennañ e-unan e-keñver e abeg, e ziazez, e furn, e bal, h.a., sk.: un dezastumadenn wiriek; reizh e-keñver Gwir, sk.: ur gevrat wiriek, sl.: diles, talvoudek.

**Notenn.**- Diforc'hañ a reer gwiriek ha talvoudek evel-henn : gwiriek a verk ur perzh diabarzh (petra dalvez ennañ e-unan ?); talvoudek a verk ur perzh diavaez, keñveriek (petra dalvez en degouezh-mañ-degouezh ?); sk.: gwiriek eo ar gevrat-mañ moarvat, talvoudek avat n'eo ket ken o vezañ m'eo aet e-biou deiziad he zemen.

gwiriekaat v., lakaat da vezañ gwiriek; diskleriañ gwiriek.

gwiriekadur g., ar gwiriekaat; disoc'h ar gwiriekaat.

gwiriekted b., ar bezañ gwiriek.

gwiriegezh b., perzh bezañ gwiriek, sk.: gant an imbours'hadennoù arnevez eo bet lakaet en arvar gwiriegezh savelenn Boyle-Mariotte, talvoudek e chom avat en darnvuiañ eus an degouezhioù.

gwirvoud g., pezh a zo e gwirionez; sl.: dirvoud.

Notenn.- Diforc'hañ a reer gwirvoud ha dirvoud evel-henn : dirvoud zo pezh a zo evel m'emañ en e berzhioù ergoret; gwirvoud a empleg un damant d'ar wirionez, dre-se galloud mab-den da drehontañ an dirvoudelezh; da skouer, ur bobl reuzeudik, pa ne gav ket en he stad-bremañ pezh a glot gant hec'h emskiant-pobl, a en em dro war-du pezh a zo merket dezhi gant hec'h emskiant-pobl evel o klotañ ganti, ha dre-se en em gav enebet he dirvoud, - ha stad-bremañ, - hag he gwirvoud ma tro outi; derou pep dispac'h eo.

gwirvoudel ag., db. gwirvoud.

gwirvoudelled b., ar bezañ gwirvoudel.

gwirvoudelezh b., perzh bezañ gwirvoudel; domani pezh a zo gwirvoudel; hollad gwirvoudoù.

gwrezanre ag., na re ket ar wrez.

gwrezanreell b., elfenn en ur savadell o herzel ouzh tremen ar wrez.

gwrezanreer ag.& g., korf na re ket ar wrez.

gwrezanren v.-reet, na ren ar wrez; gronnañ en ur metoù anre ouzh ar wrez.

gwrezanreüs ag., na c'hell ket ren ar wrez.

gwrezanreüsted b., ar bezañ gwrezanreüs.

gwrezderc'hanel ag., (fiz) db. an dazgwered-uniañ derc'hanoù div atomenn skañv da c'heneh un atomenn bonnezoc'h, hevelep dazgwered o c'hoarvezout hepken da wrezverkoù a-uc'h d'ar milion derez C.

gwrezreer ag.& g., korf o ren ar wrez.

gwrezren v.& g., ren ar wrez.

gwrezreüs ag., a c'hell ren ar wrez.

gwrezreüsted b., ar bezañ gwrezreüs.

gwrezrannadur g., ar gwrezrannañ; disoc'h ar gwrezrannañ.

gwrezrannañ v., ec'haozañ ur c'horf kimiek dre wered ar wrez, sk.: dre wrezrannañ ez a ar c'hleiz e dioksidenn garbon hag e' raz kriz.

gwrezverker g., benveg da anavezout ar gwrezverk.

H

hal g., (Kim) kediañ o tisoc'hañ eus dazgwered un drenkenn hag ur vazenn, sk.: ar gloridenn natriom, pe hal-mor, pe helen-boued eo an hal boutinañ.

halhidrek ag., (Kim) adanv-rumm an trenkennoù diwar gediañ an haluzennoù ouzh an hidrogen (trenkennoù klorhidrek, fluorhidrek, h.a.)

halidenn b., (Kim) anv-rumm halioù an trenkennoù halhidrek (klorhidrek, fluorhidrek, h.a.)

halus ag., (Kim) o c'heneh un hal pe halioù.

haluzenn b., (Kim) anv-rumm divetaloù halus evel ar c'hlor, ar fluor, ar brom, an iod.

haluzennañ v., (Kim) kediañ pe lakaat da gediañ ouzh un haluzenn, sk.: haluzennañ a reer ar gomoù evit kaletaat ar gorre anezho.

hanbarzh g., disparti ar gouennoù, h.a., sk.: er Su dreist-holl, dre lezennoù ar Stadoù, dre errez ar Re Wenn, ha gwezhioù 'zo, dre an heg, e vez an hanbarzh o ren el lec'hioù foran, er skolioù, en ilizoù zoken.

hanbarzhiañ, hanbarzhif v., dispartiañ ar gouennoù, h.a., sk.: seul vui ma sanker er Su, seul strizhoc'h e vez hanbarzhiet ar Re Zu.

hanbarzhiadur g., an hanbarzhiañ; disoc'h an hanbarzhiañ.

hanbarzhidigezh b., oberidigezh hanbarzhiañ.

hanbarzher ag.& g., neb a hanbarzh.

hanbarzherezh g., obererezh, pleusterezh an hanbarzhiañ.

hanbarzhour ag.& g., neb a hanbarzh; neb zo a-du gant an hanbarzh pe an hanbarzherezh.

hanterat ag., dre termennoù etre, sk.: pa'z anavezan un den hepken dre ar pezh a zo bet lavaret din gant tud all, em eus un anadudegezh hanterat anezhañ; sl.: dihanterat.

hanterbellenn b., (Men) lodenn eus ur bellenn rannet e daou dre ur blaenn geheder.

hantergementañ v., digreskiñ d'an hanter, sk.: gwalout a reomp e ranker daougementañ ar gwask evit hantergementañ an ec'honad.

hanvout, hanvezañ v. (stummoù gwelloc'h eget hanvezout, sl.: Defar 63, p.48).

hanvout, hanvezañ

harz g., (Trd) mentenn o verkañ eneberezh ur reall ouzh tremen ar red tredan : mentad termenet dre rannad ar barr dre ar read,  $R = UI^{-1}$ ; atalad Giorgi :  $L^2MT^{-1}Q^{-2}$ ; hv.: tredanharz.

harzus ag., (Trd) o harzel; gantañ ar perzh diskouez harz ouzh tremen ar red tredan, sk.: harzusoc'h e vez an houarn eget ar c'houevr; hv.: tredanharzus.

harzusted b., (Trd) mentenn o verkañ perzh un danvez heran da ziskouez harz ouzh tremen ar red tredan; mentad termenet dre ar jedad : harz liesaet dre ar skejad rannet dre had ar reall,  $\mu = RL^2/L = UI^{-1}$ ; atalad Giorgi :  $L^3MT^{-1}Q^{-2}$ ; hv.: tredanharzusted.

heberzh ag., perzh mat gantañ, sk.: heberzh eo, a dra sur, ar c'hendarc'had amerikan.

heboell ag., mat diouzh ar poell, sk.: ar c'hilsk d'ar brasañ korvo a oa dezho ar reolenn heboell nemeti.

hektar g., unanenn c'horread par da  $10^4$  metr karrez, arouez : ha.

hedkreizer ag. & g., eounenn o rannañ diouzh an hed e div hantorenn, sk.: stignañ gerioù an talbenn en doare ma vint dasparzhet mat a bep tu da hedkreizer an destenn, ha neket da hedkreizer ar stensil.

hedesaouenn b., esaouenn lec'hiet diouzh an had, sk.: an hedesaouenn, da lavarout eo pep dilec'hiadur aus ar paper pa dremen roll ar skrifer aus un ask d'egile.

heged ag., (Kim) o kediañ aes.

hegeted b., (Kim) ar bezañ heged.

heglenk ag., aes da glenkañ, sk.: splet ar gwaskventerioù dre vac'henn eo bezañ start ha heglenk.

heglenkted b., ar bezañ heglenk.

helev ag., (Yon) db. ur gensonenn distaget gant daskren plegoù ar vouezh, sk.: /g b d z/; hv.: mouezhiet; ko.: amlev.

helion g., (He; elfenn nn.2; tolz Nad-atom = 4,003) ar skañvañ aus an aczh- ennoù rouez, dilaoaket gant ar c'horfoù skinoberiek, bezant en aergelc'h hag en aezhennoù naturel 'zo.

hemoglobin g., danvezenn livek ruz ar gwad, hezileizh en dour, kudiadik ouzh an oksigen, dalc'het e kelligoù ruz ar gwad, e arc'hwel zo kas an oksigen aus ar skevent d'ar gwiadou ha digas an dioksidenn garbon aus ar gwiadou d'ar skevent.

henhil g., diagentiazh pell, sk.: Amerikaned a henhil.

hennded b., (Prd) ar bezañ henn, eleze ar bezañ an dra-mañ ha ket un dra all.

hennelezh b., (Prd) perzh bezañ henn, eleze pezh a ra ez eo un dra an dra-mañ ha ket un dra all.

hennvoud g., (Prd) boud o vezañ henn, boud dibar udb.

Notenn.- Diforc'hañ a reer hennvoud hag hanvoud evel-henn : hennvoud zo e-keñver an aters : petra eo ? pe vout eo ? hanvoud zo e-keñver an aters : hag-eñ ez eus anezhañ ? hag ur boud zo anezhañ ?

henstumm g., stumm, prl. eus al lavar, arveret en ur marevezh kozh, ha bremañ dilezet.

henstummel ag., dezhañ doare un henstumm pe an henstumm.

hentadur g., 1) ar mont eus ul lec'h d'un all; al lun treset gent unan o hentañ 2) an tremen eus ur stad-poellata, -bevañ, h.a. d'un all; ar sellad o c'hoarvezout eus heulied stzdoù an tremen-se, sk.: mar tremenomp bremañ d'an eilkeallioù devarat diwar ar c'heal a dolz, ec'h anataomp e heuilh ar poellata brezhonek hag an hini gallek hentadurioù disheñvel ha marteze enebok pa seller a-dost 3) darempredadur.

hentadurel ag., db. an hentadurioù pe an hentadurezh.

hentadurezh b., studi, pleustrezh war an hentadurioù er stered 1. ha 2. 3) daremprederezh, sk.: mar fell da Ganada anta bezañ ouzhpenn ur rannvro amerikan e rank pootaat e hentadurezh politikal ha sevenadurel gant Koznegouropa.

hentañ v., 1) mont eus ul lec'h d'un all, sk.: klaskit hentañ dre saurt strouezh 2) tremen eus ur stad-poellata, -bevañ, h.a. d'un all, sk.: er boellonjezh eo e voure hentañ 3) darempredañ.

heolwenn g. (Kb.: heulwen, kv.Br.: Loarguen), sklerijenn an heol, sk.: hinonetañ hag heolistañ kêr ar vro-se eo Victoria, ac'hano al lesanv a reer anezhi : "Keoded an Heolwenn" (The City of Sunshine).

herap ag., aes da dreuziñ gant ar wrez, an tredan, h.a.; hv.: reda.

herended b., ar bezañ heran; perzh bezañ heran; hv.: redeted.

herrek ag., db. ul lec'h, ur c'hemm, ur gwered, o c'houlenn en-keñveriek barr amzer, sk.: al leskiñ e c'hoarvez un oksiderez herrek.

heveleb g., an un boud, sk.: un heveleb eo Abeozen hag aczer Finvez Osian; an un maizad, sk.: un heveleb eo marteze anavezout dangorel mab-den hag anavezout al loan.

hevelebiñ v., lakaat da vezañ hevelep, sk.: ar bugel a heveleb pep aotrouniezh ouzh e dad; savelañ ur c'heñver a hevelebiñ, sk.: hevelebiñ an danvez ouzh ar gremm; savelañ hennelezh ub. pe udb., hevelebet e voe ar muntrer.

hevelep ag., un boud (gant); un maizad (gant).

hevelepted b., ar bezañ hevelep; perzh bezañ an un boud.

hevesk ag., db. div liñvann, a zileizh an eil en eben.

hevoulc'h ag., aes da voulc'hañ, sk.: tresañ war an danveziou hevoulc'h.

hevoustr ag., a zigresk e ec'honad dindan wared ar gwask.

hevuzul ag., aes da vuzuliañ; a c'hell bezañ muzuliet, sk.: ur pouez 14,3 mg, eleze hevuzul evit ur ventel likant ouzh ar c'hentigramm.

hevuzulded b., ar bezañ hevuzul; perzh bezañ hevuzul.

hidrokabidenn b., (Kim) anv-rumm evit ar c'hediadoù diwar garbon hag hidrogen, kavet dh. en tirsoul; hv.: karbidenn hidrogen.

hidroksidenn b., (Kim) korf o tisoec'hañ aus kediadur un pe lies stroll hidrosksil OH ouzh ur metal.

hidroksidenn galkiom b.g., (Kim) hidroksidenn  $\text{Ca}(\text{OH})_2$  o tiwanañ aus dazgwered an dour ouzh an oksidenn galkiom pe raz kriz  $\text{CaO}$ ; hv.: raz distan.

hidroksidenn natriom b.g., (Kim) hidroksidenn  $\text{NaOH}$  o tiwanañ aus dazgwered an dour ouzh an oksidenn natriom  $\text{Na}_2\text{O}$ ; sl.: soda.

hidroksil ag. & g., (Kim) stroll kevreizhel OH; ion  $\text{OH}^-$ .

hindrev g., (H; alfenn nn.1; talz Nad-atom = 1,008; berzverk =  $-253^\circ\text{C}$ ; teuzverk =  $-257^\circ\text{C}$ ) skañvañ aezhann a zo, entanus kenan, darbaret en-greantel dre dredanennañ an dour, danvezet da gevanaozañ meur a gorf, an amoniak da sk.

hinbarzh g., (Don) rennbarzh termanet diouzh an hin, sk.: dre berzh he c'hemmoù-ledred bras, he zorosennadur, he c'hevandirelezh, e tiskouez Norzamerika lies hinbarzh.

hindrev b., diazezedenn-yac'haat e-lec'h ma'z a an dud da dennañ o mad aus an hin.

hindrevad g., neb a zo oc'h ober ur chomadur en un hindrev.

hindreviñ v., ober ur chomadur en un hindrev.

hindrevour, hindrevez ag. & g., neb a hindrev.

hiperbolenn b., (Men) lec'h ar poentoù havelep ma'z eo kendalc'hel diforc'h o fallderioù diouzh daou boent.

hirderkañ v., terkañ e-pad pell amzer.

hirdermen ag., a zo lakaet e dermen, e bal pell en dazoned, sk.: hogen ar Gouarnamant a rankas kinnig ul leviadur gonidigezhel hirdermen.

hirdommañ v., tonnañ e-pad pell amzer, sk.: oksidatur ar bevargant o c'heneal an oksidenn  $\text{HgO}$  pa hirdommer ar metal-se.

hirc'houzoug ag., dezhañ ur gouzoug hir, sk.: e-barzh un dortann hirc'houzoug e klozas bevargant hag aer.

hollat ag., o tennañ d'un unvez klok, ha n'eo ket d'ar c'hevzennoù; e-vloc'h, hep diforc'hañ kevrennoù.

hontaer g., (Lzh) pezh zo en tu all d'ar ger pe d'ar gerioù, dh. er ster-mañ : mar kemerer an anavezout evel moned an anavezout d'an anavezout, e stader e rank hevelep moned o tagouzhout gent ar gerioù dilammat pelloc'h, kaset ganto trema un hontger, sk.: ar brasañ gwirvoud o vezañ gant an hontger, ar gerioù o vezañ ar skeud anezhañ hepmuiken.

hontgerel ag., (Lzh) db. hontger, sk.: al lennegezh zo lec'h ar c'hevzennoù hontgerel, dibar, kanevedennus, pourgemmus avat ha pourlaosk.

hontved g., (Ptd) pezh zo en tu all d'ar bed a) pe en ur ster boudoniezhel b) pe en ur ster anaoudoniezhel : mar kemerer an anavezout evel moned an anavezout d'an anavezout, ha ma reer an anavezout aus ar bed, e c'heller lakaat moned an anavezout da zilammat pelloc'h, trema un hontved, sk.: an diforc'h nemetañ etre al lennegezh a-vremañ hag he diarogetezed eo e ra-hi aus he hontger un hontved war un dro; sl.: hontaer.

hontvedel ag., (Ptd) db. hontved.

houarnek ag., dezhañ doare an houarn; ennañ houarn, sk.: mein houarnek; (Kim) o venegiñ kediadoù an houarn pa vez gantañ e vrasañ galloud-kediañ, sk.: ar gloxidenn houarnek  $\text{FeCl}_3$  a eneber ouzh ar gloxidenn houarnus  $\text{FeCl}_2$ .

houarnus ag., puilh an houarn ennañ, sk.: kondon houarnus Breizh; (Kim) o venegiñ kediadoù an houarn pa vez gantañ e vihanañ galloud-kediañ, sl.: houarnek.

chaparral g., doare koadeg c'hloev a gaver e Kalifornia, anezhi gwez dizibourc'h ha bodennoù sparnek.

C'H

c'hwec'hawerzenn b., (Lzh) rann varzhoneg o c'hoarvezout eus c'hwec'h gwerzenn.

I

ilqroaz ag., db. daou lun mentoniell, enebet dre ur beg.

iod g., (I; elfenn nn.53; tolz Nad-atom = 126,9; douester = 4,95; teuzverk = 114°C) divetal eus kerentiad an haluzennoù, kalet e stumm pailhur en doareoù ordinal, aezhidik kenan (burezh limestra), hezileizh en alkool (livadur iod), kavet en natur e reizh iodidennoù hag iodatoù, darbarat dre ludañ ar felu-mor.

iodat g., (Kim) hal an drenkenn iodek HIO<sub>3</sub>.

iodidenn b., (Kim) hal an drenkenn iodhidrek; ion I<sup>-</sup>.

ionaat v., (Kim) mont en ion, sk.: hevelep ec'haozañ ar molekul en ion a reer anezhañ an ionaat.

isvorañ v., diskenn pe lakeat da ziskenn dindan gorre ar mor, sk.: evit isvorañ e ranke ponnezaat al lestr.

izelvan g., sl.: gwaskizelvan.

Y

yalc'h b., (Arm) nevid an teulioù-kret, an aour, h.a.; lec'h ma vez renet hevelep nevid.

yalc'hel ag., db. yalc'h.

yalc'hesez b., (Arm) lec'h ma vez renet nevid an teulioù-kret, an aour, h.a.

c'hwec'hawerzenn

sk.: kentañ yalc'hesez ar bed eo Wall Street.

yenata v., yenañ ha dere'hel yen.

yenataerez b., savadell, benveg yenata, sk.: bremañ, e-lec'h leuskel ar vurezh da dec'hel en aergelc'h, dastumomp anezhi en ur gorzenn dalc'hel yen dre vezañ grennet gant dour war zisred, - seurt savadell a reer yenataerez anezhi.

vezhkadour ag. & g., neb a ren un emgann, prl. broadel, war dachenn ar yozh.

vezhkadourel ag., db. ar yezhkadouriezh pe ar yezhkadourion.

vezhkadouriezh b., studi, pleusterezh an emgann, prl. broadel, war dachenn ar yezh.

L

laerez b., korzenn-, kan-diskarg evit ur reñver livvenn, sk.: ul lestr fennez zo ul lestr ma ehom kendalc'hel ennañ rez al livvenn bennozh d'ul leerez.

lamm-feur g.g., kommadenn drum e feur ur varc'hadourezh, h.a., sk.: ken gwazh e vez ul lamm-feur war prizioù an ed e Yalc'h Winnipeg evit tieion ar Bradeg hag un drevad fall.

lammgemm g., kemm trumm, hep tremen dre stadoù-, dre werzhadoù-etre, sk.: pa c'hell div elfenn kediañ diouz meur a genfeur, e vez lammgemm etre ar c'henfeurioù.

laonenner g., ardivink, ijinenenn d'ober laonennoù metal.

laorfael ag., o tennañ da Stêr Sant-Laorfael.

laoskidigezh b., al leuskel, sk.: laoskidigezh gwrez ha luc'h.

lavarenn b., (Pll) kement ezgerienn a c'hell bezañ lavaret gwir pe faos; (Yad) stroll gerioù o c'hoarvezout eus ur verb hag eus ar gerioù kevreet outañ dre o c'hefridi.

lavarennadur g., ar frammañ lavarenoù; doare ma'z eo framm al lavarenoù.

lavarennadurezh b., (Lzh) studi, pleusterezh war al lavarennadur; doare dre vras ma vez framm al lavarenoù gant ur skrivagner, en ur yezh, h.a., sk.: prizioù c'hoazh eo darempred ar grennezh, rak anni e

lavarennadurezh

vez kavet un e-readurezh hag ul lavarennadurezh nasoc'h ouzh anien hor yezh eget en teodyezhoù a-vremañ.

lavarennañ v., frammañ lavarennoù.

lavig g., fiñv dibaoez, sk.: molekul ar vurezh dour, rannigoù peurheñval holl, ganto lavig dizurzh ha dizehan.

ledek ag., (Prd) a zo e gevrennoù pep hini er-maez eus ar re all evito da hanvezout kempred; eleze, en-plaustrek, o hanvezout en egor.

ledeked b., (Prd) ar bezañ ledek.

ledegezh b., (Prd) perzh bezañ ledek, sk.: "amañ al ledegezh e-keñver an egor evel m'amañ ar badegezh e-keñver an amzer" (Leibniz).

ledeneb g. (hBr.: letanep), pajenn; (Dil) en un tauliad, pep hini eus ar pajennoù da heul.

ledenn b., darn egor, pril. gorreenn, sk.: ar marc'had-beveziñ a reer eus al ledenn vro ma vez gwerzhat ur c'henderc'had; (Men) unan eus an dave-annoù kenserzh, douget war an ahel lavaret a-dreuz Ox.

ledesaoenn b., esaouenn lec'hiet diouzh al led, sk.: al ledesaouenn, da lavaret eo ar pallder etre div lizharann pa skoer gant ar skriverezh.

ledsonenn b., (Yon) kensonenn o c'hoarvezout eus ur sonenn, sk.: gant i u y d e vez savet al ledsonennoù j w q d kevelep ganto.

ledvouezhienn b., (Yon) mouezhiad kevelep gant ul ledsonenn diouzh sell ar vouezhiadoniezh, sk.: / j w q d /.

lei g., danvez kalet e stumm rannigoù en arluz dre ul liñvenn.

leiañ v., lekaat lei da zont en ul liñvenn.

leider g., dezec stankter al lei en ul liñvenn.

leiek ag., db. ul liñvenn, a zo lei enni.

lein g., db. un aervag, an uhelder brasañ a c'hell tizhout, sk.: un ampoent a zou m'eo per ar bunt arc'himedel da bouez an aervag, mannel enta ar penngennezh, paouez a ra ar valcoñs a bignat, tizhet he deus he lein.

leiventer g., benveg da vuzuliañ leider al liñvennoù.

leiventerzh g., kalvezerezh muzuliañ leider al liñvennoù.

lenadur g., al lenañ, disoc'h al lenañ, sk.: oksidatur a reer eus lenadur an oksigen ouzh ur c'horf eeun pe gediad.

lenañ v. (kv.hBr.: linom, -len-), mont stag ouzh; (Kim) db. ur c'horf aezhel, mont da gediañ ouzh (ur c'horf all liñvel pe galet).

lenn-gloz b.ag., lodenn eus ur ganol etre div zor ur skluz, sk.: ar skluz a c'hoarvez eus ul lenn-gloz etre daou skorf, pep hini o c'hallout digeriñ el lenn-gloz dre un nor.

leraozañ v., danzen al ler.

lestr fenner g. ag., lestr gant ur gorzenn-diskerg pe laerez, arveret da vuzuilhañ ec'honad ar c'horfoù, ec'honad al liñvenn o vont dreist barr dre al laerez o vezañ par da ec'honad ar c'horf soubet.

leti g. (krBr.: letty, Kb.: llety), ostaleri, ti ma kav ar veajourion bod ha boued, sk.: e kreiz-kêr e vez barniet burevioù ha stalioù, letioù ha gwazvaou e-barzh skraberioù-oabl diwanet mask-ha-mask gant tiez izel.

leuriad b., endalc'h ul leur; hollad ar selladoù gallus evit un doare-sellout pe ur sellboerñ, sk.: evel domani bredoniell etrelakaet ez eo ar yezh diforc'h-splann diouzh leuriad ar storgezh rakvoudel.

leuriadur g., ar bezañ lauzet pe leuriad; titl, kefridi ul leuriad.

leve diamaezh g.g., arc'hant roet evel gopr da unan graet gantañ e amzer amaezh, pe eet a-ziwar an oad.

leviatadenn b., gwezhiaid leviata, sk.: evit tremen eus ar skorf-traoñ d'ar skorf-krec'h ez eo heñval al leviatadenn, nemet war an tu-gin.

leviour g., penn pe rener ur gevredigezh, ur strollad, ur vodadeg, ur Stad, h.a.; sk.: Washington, Kêrbenn ar C'hevread, sez ar C'huntall hag annez kefridiel al Leviour.

liesek ag., a zo ennañ meur a gevran, meur a elfenn, pe dezhañ meur a zoare, pe a c'houlenn meur a luskad digant neb a glask e gompren, e ober, h.a., sk.: liesek eo kenaoz ar gwin.

liesgenezh ag., a zo anezhañ pe ennañ elfennoù disurt o natur.

liesgenezhiel ag., evel liesgenezh; dezhañ ar perzh bezañ liesgenezh.

liesgeriek ag., a zo anezhañ pe ennañ meur a c'har, sk.: "laquidiguez a nevez" zo hir, liesgeriek, diaes da embreger ha da zeverañ.

linenndresadur g., evel tresadur linennek DAGB.63; al linenndresañ.

linenndresañ v., deluniañ diwar-bouez linennoù mentet, sturiet, h.a.

linenndreser ag.& g., nob a linenndres; enskriver diwar-bouez linennoù, sk.: un aervoezer linenndreser.

linenndreserezh g., oberezh, pleustrezezh al linenndresañ.

linennheñvel ag., a-stumm gant ul linenn, eleze dezhañ ur c'horreenn bihan kenan he led e-skoaz he hed, sk.: ar c'hevel-skej, linennheñvel gorrennoù-harp he c'harvanoù.

lintrañ v., diskouez lintr, lufr; lakaat gorre udb. da vezañ peurgompez, prl. dre rimiañ, sk.: lintret e c'hell bezañ ar metaloù, ne c'hell ket bezañ an divetaloù.

liñvennadur g., al liñvennañ; disoc'h al liñvennañ.

liñvennañ v., treiñ e liñvenn.

liñvennidigezh b., al liñvennañ.

litium g., (Li; elfenn nn.3, ar skañvañ eus an elfennoù kalet; tolz Nad-atom = 6,94; douester = 0,534; teuzverk = 186°C) eus kerentiad ar metaloù alkaliel, dezhañ perzhioù heñvel a-walc'h ouzh re an patriom, arveret er greanterezh gwrezderc'hanel.

litre g., unanenn dalc'had termenet evel ec'honad 1 kg dour pur d'e zouester brasañ ha dindan 1 atm aerwask; arouez : l.

Notenn.- Al litre zo par da 1,000 027 dm<sup>3</sup>; er pleustr avat prl. e seller al litre hag an dekimetre difs evel par.

livadur g., dileizhadur dre zour, alkool, h.a., ur c'horf kimiek, danvezennoù oberiek ur blantenn, h.a., sk.: livadur iod, livadur rogell; hv.: tentur.

liveata v., savelañ ul live pe liveoù, sk.: krommenn liveata an aerwask a reer eus ar grommenn o taluniañ argetmedurioù an aerwask a-gevreizh d'an uhelder.

livek ag., dezhañ liv, sk.: un danvezenn livek naturel, al livadur rogell.

livegenn b., danvezenn livek.

live dre zour g.gl.g., benveg gwalennataerezh evit muzuliañ ar c'hemm-live etre daou lec'h, live an dour ennañ o talvezout da savelañ plaenenoù a-zremm.

livrizhañ v., lakaat e stumm livrizhenn.

livrizhenn b., reizhiad o c'hoarvezhout eus ul liñvenn strewet a-dakennoùigoù munut kenan dre ec'honenn ul liñvenn-all dihevesk.

livrizhus ag., db. 'ul liñvenn o tougen enni ul liñvenn all strewet, homañ o vezañ anvet liñvenn livrizhet.

lizher-kae g.v., lizher graet da geñver ur gasadenn evit merkañ an doareoù anezhi, endalc'h, kaser, degemerer, h.a.

loc'hadeg b., dilec'hiadur lies hini war un dro, sk.: diawlout a c'heller avat loc'hadeg ar c'heitwaskennoù war an Douar a-bezh.

loc'hadus ag., a c'hell bezañ loc'het.

loc'hven g., al lec'h ma loc'hez dioutañ,

loc'had g., (Kim) an dezventerezh, bezafis un danvez diouzh ur c'hementad re vunut evit bezañ muzuliet.

louzoù-karzhañ g.v., danvezenn evit kreskiñ galloud-nastat an dour.

lufr metalek g.ag., luc'h-m dibar a weler gant ar metaloù lintret; hv.: lintr metalek

lug ag., o virout a analat, dh. db. un aezhenn a analer, sk.: deviañ a ra ar sulfur, o leuskel un aezhenn lug, pazus; g., evel luganal g.

luganal ag., a zo stanket e anal dre ur fromadenn, dre un damoug-diwall ouzh un aezhenn dagus; g., stankadur an anal dre berzh ur fromadenn, un damoug-diwall, h.a.

luc'harz g., arz sevel arvestoù dre ober gant al luc'h, evel al luc'h-skouennerezh, ar fivvskouennerezh, h.a.

luc'honiell ag., db. luc'honiezh.

luc'honiezh b., studi anadennoù al luc'h.

luc'honiezhel ag., db. luc'honiezh.

luc'honier ag.& g., gourdon war al luc'honiezh.

luc'hvannskouenn b., bannskouenn azet e doare da vezañ bannet war ur skramm.

lunegor g., (Pll) lec'halezh diorreet gant al luniañ, pe dedraet a ve, pe vennoziel e vanfa, sk.: e lunegor freudel ar bred emañ savlec'h ar Ma etre an Dreistma hag ar Se.

Notenn.- Ul lunegor a c'hell bezañ diorreet gant luniañ an egor-bed, dre ur gartenn pe ur voullann-Douar douaroniezh da skouer; hogen, hep mont betek o dedrañ bepred, e c'heller lavarout e tiorre spered mab-den dibacuez lunegoroù evit meizañ ar c'heñverioù, nes pe pell e vefent diouzh an egor-bed, da sk. ar c'heñverioù poelloniell, bredoniell, kevredadoniell, h.a.

lunegoradur g., (Pll) al lunegoriñ; disoc'h al lunegoriñ.

lunegorel ag., (Pll) db. lunegor.

lunegorenn b., (Pll) elfenn eus ul lunegor; luniadenn udb. e pe dre ul lunegor, sk.: lunegorenn ur rouedad keñverioù.

lunegoriñ v., (Pll) luniañ dre ziorren ul lunegor, sk.: arvarus eo al lunegoriñ, rak mar sklaera ar c'heñverioù anavezet, n'eo ket alies e lez lec'h evit ar c'heñverioù dianav c'hoazh.

luniad g., pezh a saver dre luniañ.

luniadenn b., gwezhiad luniañ; an disoc'h anezhi.

luoz liester a-ziforc'h lu, kenstroll luidoù, sk.: rannet e vez nerzhioù brezel ur riez etre ar morluoz, enno un niver morluioù, an tirluoz, enno un niver tirluioù, hag an aerluoz, enno un niver aerluioù.

M

maezode b., (Trd) ode erret ouzh blein-maes ar ganer tredan.

manbouez g., (Fiz) diforc'h etre ar pouez er goull hag ar bunt arc'himedel, sk.: kempouez ar vental zo enta kempouez etre manbouezioù ar c'horfoù lakaet war ar pladennoù.

magañ al leskiñ v.v., reiñ tu d'al leskiñ da genderc'hel dre reiñ an danvezioù ret, sk.: an dioksidenn garbon n'eo ket evit magañ al leskiñ.

maonetek, oksidenn v- b.ag., (Kim) oksidenn houarn  $Fe_3O_4$ , unan eus ar c'hailh-annoù houarn, a c'haller darbariñ a-hend-all dre danañ houarn en oksigen, anvet magnetek en abeg d'he ferzhioù gwarellek; hv.: magnetit.

maonezia b., oksidenn vagneziom,  $MgO$ .

maodiern g., kefridiad e penn ur rann eus ar mererezh-Stad, sk.: deveret eo ansavadurioù riezal Kanada diouzh re Vreizh-Veur : Breudoù ha Strollad Maodierned.

maodierndi g., savadurioù ma emañ ar gwazvaou renet gant ur maodiern; hollad ar gwazvaou renet gant ur maodiern; rann ar mererezh-stad ur maodiern en he fenn.

marc'had-beveziñ g.v., (Arm) ar c'hinnig hag ar goulenn, pe ar gwerzh hag ar pren a-fet kenderc'hadoù-beveziñ; ledenn vro ma vez gwerzh et ur c'henderc'had-beveziñ, sk.: marc'hadoù-beveziñ ledan ar Stadoù-Uhanat.

meobarienn b., (Fiz) unanenn wask par da  $10^6$  barienn, anvet c'hoazh bar, arouez : b.

me'hikad g., annezad, keodedad Mec'hiko.

me'hikat ag., db. Mec'hiko.

meinad g., danvez meinel pe a orin meinel, sk.: mezegañ a reer diwar-bouez meinadoù evel ar bismut pe bevadoù evel ar c'hinin.

meinat ag., meinel pe a orin meinel, sk.: un danvez meinat eo ar gwer.

meinenn b., danvezenn veinel, sk.: diouzh ar c'hondon e tennet an asbest, meinenn neudennek ha dientanus.

meizframm g., (Pll) 1) en doare-sellout o kevelebiñ ar meizerezh ouzh ur savadur egorannel a) ar savadur e-unan b) an doare ma'z eo kompennet ar c'hevrannoù anezhañ k) ar c'hampenn a zo etre ar c'hevrannoù anezhañ 2) lun oc'h arouezañ ur meizad, doareoù frammadel eus al lun o vezañ kevelep da zoareoù frammadel eus ar meizad.

meizframmañ v., (Pll, 6rd) 1) frammañ ar meizerezh, sk.: kreff eo ar meiz-frammañ-se, zoken pe n'eo ket emouez 2) luniañ diwar-bouez ur meizframm pe meizframmoù; sevel meizframmoù er ster 2.

meizframmerzh g., (Pll, 6rd) an obererezh meizframmañ; an disoc'h anezhañ, sk.: an hentenoù desavadurel implijet bremañ e Breizh a hegas meiz-frammerzh milvedal ar Vreizhonad.

meizframmidigezh b., (Pll, 6rd) ar meizframmañ, sk.: ar reizhiad c'hallek er c'hontrol a zoug testiñ eus ur veizframmidigezh distabiloc'h.

meizlun g., (Pll) lun oc'h arouezañ ur meizad.

meizluniañ v., (Pll) arouezañ diwar-bouez meizlunioù; sevel meizlunioù.

meizlunierzh g., (Pll) an obererezh meizluniañ; an disoc'h anezhañ.

menegall b., elfenn loc'hodus, biz, nadoz, h.a., lakaet da verkañ spis loc'hioù, muzulioù, h.a., sk. ur venegall M a dalvez da luniañ live an dour.

menezdrav b., loc'h en ur menez tarket evit degemerout ehanidi, kuridi, h.a.

mengleuzel ag., db. ar mengleuzioù pe ar mengleuzerezh, sk.: aveadur mengleuzel Sina n'emañ ket e-keñver barragezhioù kondon ar vro.

mennad g., pezh a zo mennet er ster 1, sk.: an Ao. G. a gemenn e vannad da gemer ar garg manet vak; (Prd) pezh a zo mennet er ster 2, sk.: ar merzhad eo, ket an dra merzhet, a zo mennad ar merzhcut.

mennadel ag., (Prd) db. ar mennad, dh. er ster 2.

mennañ v., 1) youliñ, sk.: ne venne ket dont 2) (Prd) 2a) db. ar youliñ, luskañ war-du ur pal 2b) db. an anavezout, luskañ war-du un tarmen.

mennel ag., (Prd) db. mennañ er ster 2, sk.: "evel ar merzhout, pep mennañ a zo dezhañ ur mennad, ur sellad mennel" (Husserl), ar merzhad zo ar sellad mennel, an dra merzhet ar sellad gwerc'hel.

mennelded b., (Prd) ar bezañ mennel

mennelezh b., (Prd) perzh bezañ mennel, sk.: "Ar ger mennelezh a verk hepken ar perzh dibar a zo gant an emouezerezh da emouezañ un dra

bennak, da zougenn, a gement ma'z eo poqito, e qcoqitatum ennañ e-unan" (Husserl); perzh, galloud mennañ, sk.: ar vennelezh zo galloud an emouez vout da en em dreññ war-du ur sellad; doare mennañ, sk.: ar c'hasaat zo ur vennelezh kenkulz hag ar merzhout pe ar c'hounañ.

mentadus ag., a c'hell bezañ anavezet ar vant anezhañ, pe muzuliadus, pe merkadus e ve.

mentel b., (Arm) kempouez etre kaoud ha dleoud; stad ar c'hontoù savet dre ankef hag ezkef, kaoud ha dleoud.

menteladur g., (Arm) ar mentelañ; disoc'h ar mentelañ.

mentelañ v., (Arm) kempouezañ kaoud ha dleoud.

merker dre liv g.gl.g., (Kim) danvezenn o kemmañ liv pa c'hoarvez ur c'hemm savelek er metoù ma emañ, sk.: ar rogall, danvezenn o kemmañ liv diouzh ma vez trenkek pe vazek an dileizhenn ma he lakaer, a reer anezhi ur merker dre liv.

merk c'hoari g.g., (Lzh) displegadur roet e-ser testenn ur pezh c'hoari evit reiñ da anavezout an darvezadur, sk.: da gentañ e verzhed o oa lakaet e latin anvioù an tudennoù ha merkoù ar c'hoari.

merkidik ag., gentañ ar perzh da verkañ, sk.: goût a ouzomp e vez an dilive h merkidik d'ar gwask.

merlidik ag., tuet da verglañ.

merlidinezh b., ar merglañ.

merglus ag., o lakaat da verglañ; oc'h aesaat ar merglañ, sk.: gwarezif diouzh gwered merglus an aer.

merzhad g., pezh a zo merzhet; sl.: erqored, Notenn.

merzhadenn b., gwazhiad merzhout; an disoc'h anezhi.

merzhadennel ag., o tennañ d'ar merzhadenn; o tennañ d'ar pezh a c'hell bezañ merzhet, sk.: ar c'himiour a daoleno ar c'horfoù dre notennañ o ferzhioù merzhadennel (liv, c'hwez, blaz).

merzhadus ag., a c'hell bezañ merzhet.

merzhour ag. & g., neb a verzh.

merzhout v., kemz keal dihanteret eus udb. dre em gavout en e gaffver; sl.: arqantvout, kantvout.

Notenn.- An anadennoezh a ziforc'h ar merzhout enmanel, pe merzhout seun ar buhezadoù, hag ar merzhout trehontel, pe merzhout an traoù; studi ar merzhout trehontel a gas d'an daou vezad kantvout, pe merzhout an traoù en o dirvoud, aze dirazomp, hag arqantvout, pe tizhout anezho

dre ar c'hounañ, al luniañ, an arcueziañ, h.a.

meskad-venata g.v., meskad skorn hag holen arveret en aznodva evit kaout gwrezverkoù dindan 0°C.

metaer g., tiog war zaouhanter, labourer-douar o rannañ kenderc'h ar vereuri ma emañ gant ar perc'henn anezhi, sk.: ar Re Zu zo bodet stank e Stadoù ar Su Kozh, ma vezont dreist-holl metaerion ha gwezhourion-douar.

metaerezh g., an tiekaat war zaouhanter, stumm feurm o rannañ kenderc'h ur vereuri etre ar perc'henn hag ar feurmer.

metaeri b., mereuri dindan veteerezh.

metal g., anv-rumm evit ar c'horfoù eeun divoull, o tisvannañ al luc'h pa vezont lintret, tredan- ha gwrezreüs, govelius hag orjalennus; termenadur arveze : korf ennañ un niver bras a elektron dizalc'h.

metalleun ag., e metal hag hep kleuz ennañ, sk.: div granenn, an eil, metalleun, o vont klenk en eben, kleuz.

metilorañjez g., (Kim) merker dre liv, melen en dour hag en ur metoù bazek, roz en ur metoù trenkek.

Meurvor Arzhrodel g.ag., ar mor en-dro da Bannahel an Norz, bevannet gant aodoù Norzazia, -europa, -amerika hag an Arzhrod.

meurzanavevellerezh g., (Lzh) ar sevel meurzanaveelloù, sk.: an tregerzh d'ar Gornog zo bet danvez ar meurzanavevellerezh amerikan.

mika g., anv-rumm evit silikatoù liesek aluminiom ha metaloù all, o strink- ennañ e stumm laonigoù; hv.: skantvaen.

milibar g., unanenn wask par d'ur vilvedenn vbar, arouez : mb.

mirad g., pezh a zo miret, sk.: galloud arc'hant er Stadoù-Unanet zo diazezet war ur moneiz kreñv, gwarantet gant miradoù aour bras.

mirlestr g., lestr evit mirout al liñvenn ret d'un taol-arnod, h.a., sk.: c'hoarvezout a ra ar benveg eus ur gorzenn A pennet gant ur c'hog K, kehentet en traoù dre un duellenn gasoutchoug hir gant ur mirlestr B digor en aergelc'h.

mirva g., lec'h ma'z eo miret udb., un danvezenn, traezoù, h.a.; evel mirlestr.

mod g., 1) doare bezañ pe ober 2) spisadur udb. 3) (P11) pep hini eus furmoù ar poellata dozastum 4) (P11) evel modelezh 1 5) (And) evel modelazh 3.

model ag., (Prd) db. mod; db. modelezh 1, sk.: al lavarennoù model.

modelezh b., 1) (Pll) diogeladur hanvezañ, pe gallout bezañ, pe rankout bezañ udb.; spisadur dibar ercenn ul lavarenn, sk.: modelezh al lavarenn "an hollad a rank bezañ brasoc'h eget ar parzh" 2) (Pll, And) emzalc'h ub. ouzh ul lavarenn : dezenn pe zierbenn, arvar pe diarvar, h.a. 3) (And) emzalc'h o verkañ pep doare ergorañ (meizhout, kounañ, h.a.), krediñ, h.a.

mol g. & arouez, (Kim) kementad o c'hoarvezout eus N (= 6,023.10<sup>23</sup>) molekulenn eus ur c'horf pur; hv.: Nad molekul.

Notenn.- An arouezioù a skrifer hepred hep kemmadur, hep merk al liester. Ur ger evel mol a gemm, a gemer merk al liester pa vez arveret evel anv-kadarn, sk.: daou vol oksigen (pe daou vmol oksigen); digemm e chom avat pa vez arveret evel arouez, sk.: 2 mol.

molekulel ag., db. molekul, sk.: an aezhennoù zo dezho ur framm molekulel.

mont e kediadur v.gl.g., (Kim) db. ur c'horf, dont da vezañ elfenn en ur c'hediad dre berzh un dazgwered kimiek.

mordeüs ag., a c'heller mordeüs warnañ, sk.: Stêr Sant-Laorañs ne oa ket gwezhall mordeüs uheloc'h eget Montreal.

mordeüsted b., ar bezañ mordeüs.

mordrav b., loc'h war en aod tarket evit degemerout ehanidi, kuridi, h.a.

mornaos b., nant kleuzet e strad ar mor gant ur froud, ur stêr, pe dre labour mab-den; hv.: kanol-vor.

moroksidañ v., oksidañ gorrek; hv.: merglañ.

mouezhiad b., (Yon) soniad dezhañ ur werzh frammedel, aroueziet etre //.

mouezhiadoniezh ag., (Yon) db. ar vouezhiadoniezh.

mouezhiadoniezh b., (Yon) studi ar soniadoù evel gwerzhioù frammedel en ur yezh; sl.: soniadoniezh, Notenn.

mouezhiann b., (Yon) mouezhiad keveler gant ur sonenn diouzh sell ar vouezhiadoniezh.

moustradur g., ar moustrañ; disoc'h ar moustrañ.

moustrañ v., gwaskañ e doare da zisgraskiñ ec'honad un aezhenn, h.a.

moustridigezh b., ar moustrañ.

muiode b., (Trd) ode ezeet ouzh blein-mui ar ganer tredan.

mutleskif v. (kv.Kb.: mudlosq), leskif hep flamm, eleze pa chom kalet an danvez o taviñ; sl.: flammleskif.

N, (Kim) arouez niver Avogadro, pe 6,023.10<sup>23</sup>, o verkañ an niver atom meneget gant arouez pep elfenn gimiek.

Nad g., (Kim) kementad o c'hoarvezout eus N atomenn, molekulenn, h.a.

Nad atom g.as., (Kim) kementad eus un elfenn gimiek o c'hoarvezout eus N atomenn anezhi, sk.: an arouez H a veneg enta un Nad atom hidrogen.

Nad molekul g.as., (Kim) sl.: mol.

nafta g., (Kim) anv-rumm evit ar meskadoù hidrokarbidennoù alifatek peurvec'h pe parafinoù.

nann-me g.(rv.ra.), (Prd) pezh a zo anavezet gant ar me evel diforc'h dioutañ, sk.: dre an ergorañ e vez an nann-me savelet hag anavezet evel nann-me.

nannmetrek ag., db. ar reizhiadoù muzuliañ nann diazezet war ar metr, eleze disheñvel diouzh ar reizhiad anvet metrek.

nannmolekul ag., hep ar perzh bezañ molekul, sk.: ur c'hediad nannmol=ekulc' evel ar gloridenn natriom.

naturel ag., (Kim, Fiz) db. an adennoù, an danvezennoù evel ma c'hoarvezont hep emell oberoerezh an den; ko.: kalvezadel, kevanazel, danzeal, sk.: blev naturel ha blev kalvezadel, gom naturel ha gom kevanazel, gour naturel ha gour danzeal.

neon g., (Ne; elfenn nn.10; tolz Nad-atom = 20,183) unan eus an aezhennoù rouez, 0,0018 % e feur en aergalc'h, o leuskal luc'h ruz-orañjez dinden wered an disvec'hiedoù tredan en ur gorzenn damec'haezh.

neptu ag., (Kim) na trenkek na bazek.

neptuidigezh b., an neptuiñ; (Kim) dazgwered un drenkenn ouzh ur vazenn o c'heneh un hal, korf neptu a-keñver an enaberezh trenkenn-bazenn.

neptuiñ v., mont pe lakaat da vont neptu; (Kim) lakaat un drenkenn (pe ur vazenn) da goll he zrenkegezh (he bazegezh) dre gediañ ouzh ur vazenn (un drenkenn).

nerzhder qorreal g.ag., sl.: qwask.

nerzhder regel g.ag., (Fiz) mentad fizikel termenet evel rannad un nerzh dre ur regad, atalad mentawouriezhel  $MT^2$ ; sl.: tennder, tennder-qorre.

nerzh-pignat g.v., (Fiz) diforc'h etre ar bunt arc'himedal hag ar pouez eus un aervag, ur vag-spluj, h.a.

nerzh-silluskaf g.v., (Fiz) nerzh o warediñ e gorre al liñvennoù, o tennañ da vihanaat ar gorread, anvet evel-se peogwir amañ e devoud ar sillusk-erezh; sl.: tennder-gorre.

neuennet g., elfenn a zo e gefridi chom war-neuñv pe lakaat da chom war-neuñv, sk.: un neuventel a c'hoarvez eus un neuennet e gwer, pennet gant ur c'harann voan.

neuventel b., (Fiz) benveg da vuzuliañ douester al liñvennoù, o c'hoarvezout eus un neuennet lestreet, pennet gant ur c'harann deroziot, a sank el liñvenn seul donoc'h ma vez bihanoc'h douester al liñvenn.

neuziadenn b., gwezhad neuziañ; an disoc'h anezhi; danzeadenn ar faltazi, an arz.

neuziadur g., an neuziañ; disoc'h an neuziañ 1) kempenn lakaet etre egor-ennoù pe parzhioù un egorenn, sk.: neuziadur un aradennad veneziou, ur volekulenn 2) pezh a zo dezhañ un neuziadur er ster 1, sk.: elfennoù un neuziadur.

nevezdeud g., unan deuet agentaou, sk.: kalz e-touezh an nevezdeuidi a vir o yezh-kavall.

nevezanbroet agv., deuet d'ar vro agentaou, sk.: Kanadaiz nevezanbroet diouzh Europa.

nevezc'her g., ger stummet agentaou.

nevezvezh b., (Yon) 1) stad-bremañ ur yezh 2) yezh goveliet an he fezh pe evit un darn.

nevezvezhel ag., (Yon) 1) db. stad-bremañ ur yezh 2) db. nevezvezh er ster 2; db. stummoù nevez o tiwanañ en ur yezh.

nevezvrezhoneg g., (Yon) brezhoneg skrivet, anvet lennegel, a-vremañ.

nevidgelc'h g., (Arm) bodad nevidourion, sk.: kreizennadur an embregerezhioù a zegas d'o heul diwanidigezh an trustoù hag an nevidgelc'hioù (big business).

nitroozad g., danvezenn, dh. greantel, deveret diouzh an nitrogen.

nitrogen g., (N; elfenn nn.7; tolz Nad-atom = 14,008) oezheñ dic'hwez, nebeut kimioberiek, 80 % e feur en aergelc'h, bezant an darnvuiañ eus an danveziou bevel.

niveriñ

Notenn.- S.A.D.E.D. a ali e skolidi d'ober gant un doare niveriñ eunnet: - evit lenn ha skrivañ an niveroù, heuliañ urzh skrivañ ar sifroù, eleze lakaat an unanennoù war-lezoc'h an degennoù, - nemet etre dek hag ugent, sk.: 126 kant ugent c'hwec'h; 112, kant daouzek;

nerzh-silluskaf

- enval an degennoù evel-henn : dek, ugent, trezent, pergent, pemont, c'hwec'h, sekont, ekont, naogont, sk.: 392 tri c'hant naogont daou; 853 eizh kant pemont tri;

- .lenn an niveroù rannel evel-henn : 3,45 teir unanenn pergent pemp kanta-vedenn, pe, eouneoc'h, tri skej pergent pemp; 3 156,897 -tri mil kant pemont c'hwec'h unanenn eizh kant naogont seizh milvedenn, pe tri mil kant pemont c'hwec'h skej eizh kant naogont seizh.

notadur g., an notañ pe an disoc'h anezhañ; doare degemeret gant ur gevran-studi evit deskrivañ an anadennoù; reizhiad-notañ o tereout ouzh ur gevran-studi.

notadurel ag., db. notadur.

notañ v., deskrivañ an anadennoù hervez ur reizhiad degemeret, diouzh pal hag hentennoù ur gevran-studi, sk.: an nerzhoù notet dre sturiadelloù gant ar Fizik, elfennoù an danvez notet dre arouezioù kementadale gant ar Gimiezh.

notenn-wazadur b.g., kemennadenn evit resisaat krefen 'zo eus obererezh ur gwazva, ur strollad-labour, h.a.

0

oablinenn b., linenn luniet ouzh an oabl gant toennoù ha mogerioù tiez, sk.: dister damant d'ar gened er seurt kreskadeg dizurzh, anet eo pa seller ouzh gouregammoù oablinenn (skyline) ar geoded.

oberiad g., traezenn oberiet, sk.: gant oberiadaoù Europa e chom brud mat er Stadoù-Unanet.

oberiadae b., labouradeg oberiañ traezoù-beveziñ, sk.: hag int eiltrevoù d'ar greantioù gwiael, eo bleunius ivez an oberiadaeoù dilhad.

oberier, oberiour g., neb a ober, sk.: ar vlizidigezh a oar diskouez oberierion ar Bed Kozh.

oberierezh g., pleustrierezh, greanterezh oberiañ; b., greanti oberiañ.

oberiour g., evel oberier.

oksiaketilen g., meskad oksigen hag aketilen darbaet er flammer anvet flammer oksiaketilen.

oksidadur g., an oksidañ; disoc'h an oksidañ.

oksidadur

oksidañ v., kediañ pe lakaat da gediañ ouzh an oksigen.

oksidenn b., korf ganet diwar an oksidañ, kediañ ur metal pe un divetal ouzh an oksigen.

oksidenn kalkiom b.g., (Kim) oksidenn CaO darbareet dre regeziñ ar c'harbonat kalkiom er fornoù raz; hv.: raz kriz.

oksidenn houarnek b.g., (Kim) oksidenn Fe<sub>2</sub>O<sub>3</sub> o tiwanañ e-harz an aer dre voroksidañ; hv.: maerol, sl.: houarnek.

oksidenn vannetek b.g., sl.: macnetek.

oksidenn vaoneziom b.g., (Kim) oksidenn MgO; hv.: maonezia.

oksidenn vevargant b.g., (Kim) oksidenn HgO o tiwanañ e stumm ur goc'hennig ruz war ar bevargant hirdomet e-harz an aer; hv.: oksidenn ruz bevargant.

oksidenn zink b.g., (Kim) oksidenn ZnO darbareet dre leskiñ zink er stad aezhel; hv.: owenn zink.

oksiderezh g., (Kim) an oksidañ, sk.: el leskiñ e c'hoarvez un oksiderezh herrek.

oksigen g., (O; elfenn nn.8; tolz Nad-atom = 16) aezhenn an analat, dre-se amplegad d'ar vuhez war an Douar, 20% e feur en aergelc'h, kediedik ouzh an darnvuiañ eus ar metaloù hag ouzh an holl zivetaloù, o c'heneal ganto oksidennoù, darbareet dre dredanrannañ an dour pe rannstrilhañ an aer.

oksilit g., (Kim) kenderc'had greantel, aezhañ dioksidenn natriom Na<sub>2</sub>O<sub>2</sub> gant ul louc'had sulfat kouevr, o c'heneal oksigen dindan wered an dour.

ode b., (Trd) sl.: tredanode.

organek ag., 1) dezhañ organoù 2) dezhañ doare un organ, pe oc'h arc'hwelañ evel an organoù 3) dezhañ doare an traoù bev, hv.: bevek; db. kimiezh an darveziou bevek, hv.: karbonek 4) db. an organeg, hv.: bevedek.

organeg g., an dre bev sellet evel keveniad organoù; hv.: bevedeg.

organel ag., db. an organoù, sk.: ar skiantoù organel.

padek ag., (Prd) o hanvezout e-doug un amzer.

padekted b., (Prd) ar bezañ padek.

padegezh b., (Prd) perzh bezañ padek, sk.: "ar badegezh hag al ledegezh zo perzhioù eus an traoù; hogen an amzer hag an egor zo evel kemeret er-maez eus an traoù hag a dalvez d'o muzuliañ" (Leibniz).

par g., e termenoù meizerezh, live, tachenn, savboent, sk.: al labour reizhennañ a c'houlenn, evit parraat ouzh dispister ar c'hentañ sell, ma savfed betek ar par hollek a-benn merzhout fraezh anien pep kafridi.

parafin g., (Kim) anv-rumm an hidrokarbidennoù digorvallek peurvuoc'h.

parzh g., lodenn, rann, kevrañ, sk.: digor e van ar bellenn en he farzh-traoù.

paskal g., (Fiz) unanenn wask er reizhiad MKSA, gwask o tiorren un newton nerzh dre vetr karrez, arouez : P.

Notenn.- Nebeut arveret e van ar paskal an arbenn d'e vihander keñverel: 1 atm = 101,3.10<sup>3</sup> P. Ober a reer gant ar piez (1 pz = 1000 P), gant ar bar (1 b = 100 000 P), gant ar milimet bevargant (1 mm Hg = 1,33 mb = 133 P).

pazus ag., o tevoudañ ar paz, sk.: un aezhenn lug, pazus.

peder-gwerzenn b., (Lzh) rann varzhoneg o c'hoarvezout eus peder gwerzenn.

pellskriv g., ar pellskrivañ; ar c'hehentiñ dre bellskridoù, sk.: ar pell-gehenterezh zo ivez diorreet kenañ : pellgomz, pellskriv, skinwel.

penndoare g., doare pennañ, heverkañ, sk.: digemm eo kenfeur ar c'horfoù o kediañ, penndoare ar c'hediañ eo se.

penngeneonenn b., (Yon) kensonenn derou ur ger.

penngoded b., kêr bouezusañ, sk.: Denver, penngoded ar Menazidù Roc'hallek.

pennlein g., lein uhelañ ur menez, ur vro, h.a.

pennrann b., (Yon, Yad) rann ar gerioù ma vez staget outi ar rakgerioù hag al lostgerioù; sl.: bonad.

pennreollun g., reollun pennañ, -diazez.

pentoksidenn fosfor b.g., sl.: anhidridenn fosforek.

peroksidenn hidroen b.g., (Kim) oksidenn H<sub>2</sub>O<sub>2</sub> arveret e stumm dilezhenn

eval diliver hag, er vezekniezh, evel dilouer; anvioù amouiziel : dour oksigen, dour sour.

peroksidenn nitrogen b.g., (Kim) oksidenn  $\text{NO}_2$ , aezhenn ruz-kal ganet diwar gediañ an oksidenn nitrogen  $\text{NO}$  ouzh an oksigen.

perzh g., doare, gelluster dibar, sk.: renket e vez ar c'horfoù eeun diwar o ferzhioù kimiek e metaloù ha divetaloù.

perzhiet ag., o kemez perzh, sk.: sielloù ar gwazvaoù perzhiet ha sin o leuridi.

perc'hennadus ag., a c'hell bozañ perc'hennet, sk.: al lavar gouiziel en em ro evel dremm berc'hennadus ar bad.

peulgaer g., kas azet diwar-bouez peulioù prenn, bilirez, h.a., sk.: a-hed glannoù ar baeoù hag ar mornazioù don a red etre an inizi ma emañ New-York, ez aus bet tarket 1200 km peulgasoù (piers).

peuranc'hwilliañ v., imbours'hilñ (ul lec'h) penn-da-benn, sk.: hogos peure-anc'hwilliañ eo evit bremañ kondon ar Stadoù-Unanet.

peuraozañ v., peurechuilñ pezhioù, traezoù en ur greanti, sk.: adalek ar gwezhaoù peuraozañ betek ar stlejadoù framañ.

peurzas ag., o tereout tra, sk.: gourhentoù peurzas d'ar ruilherezh.

peurec'haezh ag., (fiz) tennet pep aezhenn digutañ, peurzleub a aezhenn; g., perzh, stad peurec'haezh.

peurec'haezhañ v., (fiz) tennañ pep aezhenn dicouzh.

peurnoz ag., serret e doare na c'hell tremen netra, na liñvenn, nag aezhenn, sk.: miret e vez an oksilit e-barzh boestoù peurgloz.

peurreoliek ag., diouzh un urzh rik, jedoniezhel, sk.: er strinkenoù emañ an atom stignet an ail e-kichen eben peurreoliek.

peurstank ag., stouvet e doare na c'hell tremen na liñvenn, nag aezhenn, sk.: un aerbouez dre glozenn a c'hoarvez eus ur voest vetal peurstank hag ec'haezhet.

peurvec'h ag., o tougen ar muiañ a c'hell dougen; g., stad peurvec'h 1) (fiz) db. un dileizhenn enni danvez dileizhet d'ar brasañ feur gallus 2) (Kim) db. ur c'horf kimiek na c'hell ket delenañ elfennoù nevez hep dilezel eus e re; ko.: amvec'h.

peurvec'hiañ v., 1) (fiz) dileizhañ d'ar brasañ feur gallus 2) (Kim) lakaat ur c'horf kimiek da vezañ peurvec'h er ster 2.

peurizentez b., disentez o klotaat, o kadarnaat un disentez all, sk.: endalc'het e vez ar Poellgór-Hazpañ da reiñ ar beurizentez dindan miz.

peroksidenn hidrogen

peuzanster ag., hogos hep ster, sk.: an actad zo ur ger degaset e-barzh ur werzenn, hag añ peuzanster, dre ezhommù ar c'hlostañ.

peuzdidorr ag., hogos hep torr, hep astal, sk.: krec'h-treoñ d'an arvor emañ astennet ur steudad peuzdidorr a gêrioù divent.

piez g., unanenn waek, par da 1000 paskal, arouez : pz .

pirogallat kalium g.g., (Kim) hal kalium an drenkenn birogallek, direer kreñv, danvezet da zelehañ an oksigen eus ar meskadoù aezhel.

pirogallek, frankenn b- b.ag., (Kim) korf eus rummad an trifenolioù, arveret, eñ hag e zoveradoù, evel direer; hv. pirogalloù.

plant-beveñs as.g., plant gounezet evel danvez boued, sk.: ar baerion wenn o c'hounit plant-beveñs hag o strilhañ alkoal dre flod.

plom g., (Pb; elfenn nn.82; tolz Nad-atom = 207,21; douester = 11,34; teuzverk = 327°) metal bouk, kavet dreist-holl e stumm ar sulfidenn  $\text{PbS}$  pe galen.

poelloniañ v., studiañ ar boelloniezh; embreger ar boelloniezh.

poellonieñ ag., db. poelloniezh.

poelloniezh b., gouezoniezh ar poell, eleze ar c'hevreañ dre ar ster.

poellonour ag. & g., neb a studi ar boelloniezh.

poentell b., elfenn vegek o talvezout da stankañ ouzh tremen un hevezrenn, h.a.; sl.: koar war boentell.

polimer h.a., sl.: daskediad h.a.

polivinil g. (Kim) pe, resisoc'h, kloridenn bolivinil, daskediad ar gloridenn vinil, danvezenn-diazez en ijinerezh ar mezelloù, poultrenn wenn gwrezvezellaus, dic'hwec ha dientanus.

porseleñ-splu g.ag., doare pri-pozh ennañ spluiannoù munut arveret evit silañ an dour dh.

postadur g., (Arm) ar postañ; disoc'h ar postañ, an arc'hant postet, sk.: dre berzh ar postadurioù arallvro.

postañ v., (Arm) lakaat arc'hant, kevalaoù, an un embregerezh, h.a., sk.: aesaat a reont da "gevalaouriezh ar bobl", eleze d'an asparn, d'ar postañ er c'hompagnonezhioù kretadur.

prantad-studi g.v., rann-amzer gouestlet d'ar studi pe da studi udb., sk.: termenet e vez prantad-studi ur gentel evel an amzarvezh etre an deiziad merket da Wazva ar C'hreizennerezh skoldi evit kas poalladennoù ar gentel da Wazva ar C'hreizennerezh.

prialkaliek ag., (Kim) anv roet d'ur c'herentiad metaloù (kalkiom, silikiom,

prialkaliek

bariom, h.a.) heñvel dre o ferzhioù fizikel ha kimiek.  
primaostoù ls., frouzsh, legumaj, trovadoù darev abred.  
puertoriked g., annezad, keoded Puerto-Riko.  
puertorikat ag., db. Puerto-Riko.  
pur ag., (Kim) unseurt ar molekul anezhañ, sk.: ur c'horf pur zo un danvezenn na c'haller ket dispartiañ e div zanvezenn all dre rannstrilhañ pe dre rannskornañ.  
purded b., ar bezañ pur.  
purder g., evel purded.  
puritan ag.& g., ezel eus ur rannredenn bresbiterat, anezhi haulierion strizh ar Skritur-Sakr, a voe heskinet gant ar re Stuart hag a zivroas un darn vras dicute da Amerika.  
puritanelezh b., doare puritan, sk.: an neuz dibar a buritanelezh o chom war Saoz-Nevez.

R

raklun g., taolennadur savet en a-raok da ditourañ ul labour, un obererezh, ur sevenadenn, sk.: raklunioù bellourel.  
rakluniad g., pezh a zo rakluniet.  
rakluniadur g., ar rakluniañ; disoc'h ar rakluniañ, sk.: pleustriñ war rakk-luniadur ur rummad kentelioù.  
rakluniañ v., taolennañ en a-raok ul labour, un obererezh, ur sevenadenn.  
raklunior g., neb a raklun.  
raklunierezh g., obererezh, pleustrierezh, kalvezerezh rakluniañ.  
raklunicur ag.& g., neb a studi ar rakluniañ hag ar raklunioù.  
raklunioriezh b., studi ar rakluniañ hag ar raklunioù.  
raknevez ag., (Yon) db. ur stad pe ur rann-stad a-raok ar stad lavaret nevez; arveret ivez evel rakger.  
raknevezvrezhoneg g., (Yon) brezhoneg ar prantad goude ar c'hrennvrezhoneg hag a-raok an nevezvrezhoneg, aleze ar 16<sup>t</sup>-17<sup>t</sup> kantved.

rialkaliek

rakpennañ v., bezañ pe lakaat evel penn a-raok, sk.: pep gwazverk a c'hoarvez eus un niverenn, ar gwazriñv, rakpennet gant al lizherenn T.  
rakstagañ v., stagañ dirak, sk.: rakstaget e veze ur v ouzh ga goude ar rannig-verb a.  
rann b., (Rzh) skourr a blad gant an holl gefridioù o tennañ d'un obererezh resis, sk.: Rann an Embann.  
rannbaedur g., ar rannbaeñ; disoc'h ar rannbaeñ; an arc'hant roet da rannbaeñ.  
rannbaeñ v., paeañ ul lodenn eus an arc'hant dleet.  
rannskornadur g., (Fiz) ar rannskornañ; disoc'h ar rannskornañ.  
rannskornañ v., (Fiz) yenañ ur meskad lifvel e doare ma kaled unan eus ar c'horfoù mesket tra ma chom lifvel an hini pe ar re all.  
rannstrilhañ g., (Fiz) ar rannstrilhañ; disoc'h ar rannstrilhañ.  
rannstrilhañ v., (Fiz) strilhañ ur meskad lifvennoù dre dannañ uheloc'h eget berverk an eil hag izeloc'h eget berverk eben e doare ma tinezhen an eil tra ma chom lifvel eben ha ma tisrannont.  
rañvell b., toull e dor ur skluz avit lakaat distroñs a-live al lenn-gloz gant an eil skorf pe egile, sk.: an daou skorf, pep hini o c'hallout digeriñ al lenn-gloz dre un nor, enni un toull, pe rañvell, stanket gant ur bal lem-laka.  
raz kriz g.ag., sl.: oksidenn kalkiom.  
raz distan g.ag., sl.: hidrosidenn kalkiom.  
razek ag., ennañ kalkiom e stumm haliou, prl. karbonat, sk.: dourioù naturel all a vez razek, war-zileizh enno karbonat kalkiom.  
reall b., (Fiz) elfenn en ur savadell o ren (an tredan, h.a.); sl.: tredan-reall.  
rear ag.& g., (Fiz) korf o ren (an tredan, h.a.); sl.: tredan-rear.  
reüs ag., (Fiz) a c'hell ren (an tredan, h.a.); hv.: heren; sl.: tredan-reüs.  
reüstet b., (Fiz) ar bezañ reüs; hv.: herended; sl.: tredan-reüstet.  
regezadenn b., (Kim) gwezhad regeziñ.  
regezadur g., (Kim) ar regeziñ; disoc'h ar regeziñ.  
regeziñ v., (Kim) traufurmiñ ur c'horf kimiek dre lakaat ur wrez krañv da werediñ warnañ.  
reizhennañ v., sevel reizhennoù; lakaat un disentez, h.a., e stumm ur reizhenn pe reizhennoù; lakaat ur strollad, ur skourr obererezh, h.a., dindan reizhennoù.

reizhennañ

reizhiad-notañ b.v., hollad ar c'hendivizadoù degemeret gant ur gevran-  
studi evit deskrivañ an anadennoù; sl.: notadur, notañ.

reizhidigezh b., ar reizhañ (poelladennoù, h.a.)

reol ag., reizh diouzh ur skouer kemeret evel termen-kafveriañ 1) db. un  
seunenn pe ur blaenenn, o luniañ ur c'horn serzh gant ur c'horreann er poent-  
ur poent anezhi, pe gant ar blaenenn a-spin ouzh ar c'horreann er poent-  
se, sk.: un nerzh reol ouzh ar speurenn 2) db. parzh ur gevanenn, reizh  
diouzh kempoell ar gevanenn, sk.: reol eo kaout terzhienn pa vezer gant  
ar grip 3) reizh diouzh kempoell ar beved, sk.: a-tro 37°C emañ gwraze-  
verk reol an den 4) reizh diouzh ar boaz pe an niver brasañ, sk.: bred=  
ourion diwar-c'horre a hevelebe "reol" ha "keitat" 5) reizh diouzh un  
divizadenn, sk.: an aerwask reol zo an aerwask muzuliet gant 760 mm  
bevaqant reol, eleze da 0°C.

reolled b., ar bezañ reol.

reolel ag., evel reol, dh. er ster 3.

reolelaat v., mont pe lakaat da vont reolel.

reolelezh b., perzh bezañ reol pe reolel, sk.: didenn d'ar vezekniezh term-  
enañ ar reolelezh nemet war dachenn ar bred.

reolvred ag., reol e vred; g., stad unan zo reol e vred.

rez b., en un dasparzh karrezennek, pep linenn a-led, sk.: sammad an dogouezh-  
adennoù a varilher war ar roz Holladoù, a eilskriver war ar rez Astaolioù  
el ledeneb da heul; ko.: bann, steud.

rezed b., endalc'h ur rez.

rezverker g., benveg da lakaat a-wel live ul liñvenn a-barzh un endalc'h  
divoull, anezhañ ur gorzenn drauzwelus a-zerc'h e-kehent dre he daou  
bonn gant an endalc'her.

rifvenn b., (Jed) kement lavarenn displeget e termenoù jedonizhel, sk.:  
 $x^2y$  zo ur rifvenn atalcuriszh,  $LMT^{-2}$  zo ur rifvenn ventawouriszh.

rogell b., (rocilla tinctoria) saurt kinvi ma tenner diouto un danvez livek  
arveret er gimiezh; an danvez livek e-unan pe al livadur diwarañ, sk.:  
al livadur rogell a dro ruz en ur metoù trenkek ha glas en ur metoù  
bazak.

rollestr g., lestr, e gwer prl., e stumm ur granenn.

rotol g., doare douar gell diwar struzh ac'haezet.

rotalek ag., dezhañ doare ar rotol; rotol enañ, sk.: atiloù gell, rotalek  
ar rannbarzh koadek-mañ zo amsevus d'ar gounit-douar.

ruilherrezh g., ar ruilhañ; obererezh, pleusterezh ruilhañ, sk.: evit an

tankirri ez eus bet tertet ur rouedad gourhentoù peurzas d'ar ruilherrezh.  
ruz-kel ag.rv., ruz skedus; sl.: aezhenn ruz-kel.

S

sanell b., kement pezh e stumm ur gorzenn evit kas an heverennoù.

sanellerezh g., oberierezh sanelloù (tuellennoù, kogoù, h.a.); dafar evit  
kas an heverennoù; b., greanti oberiañ sanelloù.

savelad g., pezh a zo savelet; devoud dezrevellet gant ar ouezonizh; sl.:  
devoud, Notenn.

savalek ag., dezhañ un doare stabil pe reoliek, hevelep ma c'haller e  
zidemenañ spis, e saveleñ, sk.: hevelep kenfeur digemm e empleg ur  
genaoz savelek.

savalekaat v., mont pe lakaat da vont savelek.

savalekted b., ar bezañ savelek.

savelenn b., lavarenn hollek o stadañ ur c'hefver reoliek etre renkadoù  
anadennoù.

Notenn.- Gwelloc'h emañ tremen hep heuliañ yezhoù all, eleze hep ober  
gant ar ger lezenn, o tiforc'hañ diouzh lezennoù ar Stad ar c'hefverioù  
stadet etre an anadennoù.

savlec'h g., lec'h ma emañ savet udb., diazevadur; lec'h ma kemerer sav,  
diazoz, harp, sk.: Kanol b'Panama, morhent talvoudek he savlec'h brezel;  
lec'h en ul lunegor, sk.: e lunegor freudel ar bred emañ savlec'h ar  
Me etre an Dreistme hag ar Se; doare-bezañ sellet evel bezañ en ul  
lec'h eus lunegorenn ur rouedad kefverioù, sk.: e savlec'h kevredig-  
ezhel eo ar c'hentañ tra a glasker anavezout eus an den a gajar butañ.

savlec'hel ag., db. savlec'h.

savlec'hiañ v., diazezañ; didemenañ savlec'h ub. pe udb.

skiant b., galleudezh anavezout sellet dh. diouzh doare an anavezadoù  
1) anavezout dihanteret a) termenet diouzh urzh an anavezadoù, sk.:  
skiant ar gweled, skiant al livioù, ar c'hwec'hvet skiant b) termenet  
diouzh doare an ober renet en e ser, sk.: skiant-varn, skiant vat

k) termenat war un dro diouzh urzh en anavezadoù ha doare an ober, sk.: skiant an dareadegzh 2) anacudegezh dre studi boelladell, hv.: gouez=oniezh, gouziadur.

skiantocuel ag., db. ar skiantoù organel.

skiantoù ls., ar pemp skiant (er ster la) termenat dre c'halloudezhioù santout ar c'horf, ar gwelad, ar c'hlevad, ar c'hvesa, an tafva; hv.: ar skiantoù organel.

skolel ag., db. ar skol pe ar skolioù, sk.: daoust d'ar bruderezh a-berzh Sted, d'an diorreadur skolel, e chom garanet den en emzalc'h ar Re Wenn an disfi ouzh an dud a liv.

skornadur g., ar skornañ, sk.: skornadur an dour naturel.

skornañ v., db. ar c'horfoù lifvel en doareoù ordinal, mont er stad kalet, kalediñ, dre ziskenn ar gwrezverk.

skornidigezh b., ar skornañ, sk.: gant un dour naturel ezefe war ziskenn menegadur ar gwrezverker keit ha ma padfe ar skornidigezh.

skouerel ag., dezhañ ar perzh bezañ skouer; db. un dra termenat, dik diouzh an termenadur, sk.: dre studi perzhioù an aezhennoù e teuer da dezmenañ keal an aezhenn skouerel, homañ o vezañ dik diouzh sevelenn Avogadro; sl.: reol, reolel.

Notenn.- Enebif a reer skouerel ha reolel evel-henn : reolel a empleg meizañ an dra diouzh ar c'hempoell onezhañ, skouerel a empleg adsevel an dra diwar ar meizad anezhañ, sk.: sellout a reer evel reolel evit an den ar gwrezverkoù etre 36,5°C ha 37,5°C, an den skouerel avat en deus 37°C gwrezverk.

skouerelaat v., mont pe lakaat da vont skouerel; sevel al luniad skouerel eus udb.

skouereled b., ar bezañ skouerel.

skouerelezh b., perzh bezañ skouer pe skouerel.

skoueriek ag., dezhañ doare ur skouer; reizh diouzh ur skouer kemeret da batrom, diouzh ur reizhiad furmoù divizet, sk.: pedet e vezer d'ober ar goulenn war an teul skoueriek roet gant ar gwazva; sl.: reol, skouerel.

skoueriekaat v., lakaat da vezañ skoueriek, sk.: aozet az eus bat un diell= aoueg skoueriekaat dekvedennel.

skoueriekted b., ar bezañ skoueriek.

skoueriegezh b., perzh bezañ skoueriek.

skrivad g., (Yon) al lun o verkañ ur soniad pe ur vouezhiad er skritur.

skrivadur g., (Yon) ar skrivañ; disoc'h ar skrivañ; doare ma skriver ur yezh, ur soniad, h.a., sk.: dre vras e vo miret hor skrivadur a-vremañ.

sekoa as., avalpineteg amerikad ken uhel alies ha 130 m.

sevenadenn b., gwezhiad sevenañ; an disoc'h anezhi.

silikat g., (Kim) anv-rumm haloù an trenkennoù silikek na anavezet kat, a vefe o delun  $H_2SiO_3$ ,  $(OH)_4Si$ , h.a.

silikek; trenkenn e- b.ag., sl.: silikat.

silikom g., (Si; elfenn nn.14; talz Mad-atom = 28,06; douester = 2,42; teuzverk = 1 420°C) divetal damheñval ouzh ar c'harbon oc'h ober tost an hanter eus kementad pluskenn an Douar dindan gediadoù niverus, evel ar c'hailhastr, ar c'houerz, an taezh gwenn, h.a.

silluskadur g., (Fiz) ar silluskaf.

silluskaf v., (Fiz) db. ul lifvann, mont pe he lakaat da vont dre gorzennoù pe gwaskoù strizh dre wezed he zennder-gorra, sk.: silluskaf a ra dour an douar e-barzh mogerioù an ti.

silluskal ag., (Fiz) db. silluskaf pe silluskerezh.

silluskerezh g., (Fiz) gwered tennder-gorre al lifvennoù ouzh o lakaat da sevel pe da ziskenn er c'horzennoù moan.

soda b., (Kim) hidroksidenn natriom NaOH, kalet gwenn hezilicizh en dour, arleizhidik en aer, danvezet en ijinerzh ar soavon, en oberierezh ar gwiadoù kevanaoz, evel louzoù-karzhañ, evel disoc'h'er en arnodvaoù kimiezh, h.a.; sl.: hidroksidenn natriom.

sol g., pezh a gemer harp warnañ ub. pe udb. evit bezañ, evit ober, h.a., sk.: ar broadelour a ra sol eus gwirvoud Breizh evit nac'h asantif d'he dirvoud ha kondaoniñ ar re a ra sol eus he dirvoud.

sonenn b., (Yon) soniad a c'hell bezañ distaget hep harp un all; hv.: vogalenn.

sonennel ag., (Yon) db. sonenn.

sonenn-harp b.v., (Yon) sonenn a zo harpañ he c'hefridi nemeti.

sonframmel ag., (Syr) db. frammadur ar sonioù a ya d'ober ar gerioù.

soniad g., (Yon) hep son distaget gant mab-den en e deodvezh, aroueziet etre [ ] .

soniadoniol, soniadoniezhel ag., db. soniadoniezh.

soniadoniezh b., (Yon) studi ar soniadoù evel gwerzhioù klevedal; sl.: mouezhiadoniezh.

**Notenn.-** Ar soniadoniezh a studi ar soniadoù evel parzhioù ar renkad he deus graet hec'h-unan; ar vouezhiadoniezh o studi evel parzhioù ar framm-adoù diwanet er yezh, setu perak e ra mouezhiadoù anezho; ar soniadoniezh a sav ur reizhiad-keñveriañ diavaez etre ar soniadoù, ar vouezhiadoniezh a glask ar reizhiad-keñveriañ savet gant ar yezh hec'h-unan.

soufr g., danvez krañ a danner aus ar c'hondon, anezhañ sulfur ampur.

sposoù ls., (Kim) ar c'horfoù pur, sk.: kentañ emall ar c'himour onta eo digenvezañ ha darbariañ ar c'horfoù pur pe sposoù kimiek.

spluenn b. -où, spluioù, toullobigoù, kanolioùigoù en danvezioù splu.

sposu platin g.g., (Kim) platin darbarec e doare da vezañ splu ha dre-se da gacut ur c'horreann-stekiñ bras, danvezet evel tralusker kimiek.

stadañ-mann v. ragav, stadañ n'eus netra da stadañ, sk.: kounat e kaser ur stad ha pa ve anezhi ur stadañ-mann.

Stad b., 1) broad dizalc'h oc'h en em ren dre ensavadurioù diouti 2) framm ensavadurioù-ren ur vroad 3) framm ensavadurioù-ren ur riez 4) riez dizalc'h oc'h en em ren dre ensavadurioù diouti 5) rann darnemren ur riez.

stadek ag., 1) dezhañ doare o tennañ d'ur stad pe d'ar stadañ, sk.: ar pep stadekañ eo ar c'hementadoù 2) dezhañ ur Stad 3) dezhañ doare o tennañ d'ar Stad pe d'ur Stad.

stadekaat v., mont pe lakaat da vont stadek, sk.: pal an Emsav oa stadekaat ar stuzegezh, pal an Dispac'h zo stadekaat ha stuzekaat a bep oïl, sevel ur Stad ha dre-se stadekaat ar stuzegezh hag, e-ser ar vuhez nevez degaset d'ar vro gant he Stad, stuzekaat ar stuzegezh.

stadekted b., ar bezañ stadek.

stadekañ v., notañ doareoù stadek udb., sk.: stadekañ ur boblañs zo he niveriañ, savelañ feur ar genel, feur ar mervel onni, sevel krugell an oadoù anezhi, h.a.

stadegeñ ag., db. stadekañ pe stadegeñ.

stadegeñ b. -où, stadegeoù, elfenn savelet dre stadekañ, sk.: stadegeñ ar bioù e Breizh, stadegeñ al labour-douar.

sterniañ v., lakaat en ur storn; sl.: kenurzhiañ, Notenn.

stuzegezh b., perzh bezañ stadek 1) doare o tennañ d'ur stad pe d'ar stadañ 2) doare o tennañ d'ar Stad pe d'ur Stad.

**Notenn.-** Stuzegezh ha stuzegezh a zifoxec'her evel-henn : stuzegezh a vez kement doare eus buhez ur bobl framm gant an ensavadurioù-ren; stuzegezh a vez kement doare eus buhez ar bobl, pe a-barzh pe er-maez framm an ensavadurioù-ren e ve. Ur bobl na c'hell ket padout pell gant

he stuzegezh hag he stuzegezh o tisklotañ : pe e tiorreo ur stuzegezh nevez o klotañ gant ar stuzegezh o ren dre em ziskar evel pobl, pe e tiorreo ur stuzegezh nevez o klotañ gant he stuzegezh dre ziskar ar Stad o ren ha sevel ur Stad dezhi.

stuzegezhel ag., db. stuzegezh.

stuzegezh ag. & g., neb a ra stuzegoù pe a studi stuzegezh.

stuzegezh b., studi ar stuzegañ hag ar stuzegoù.

staen g., (Sn; elfenn nn.50; tolz Nad-atom = 118,70; douester = 7,31; touzverk = 231,85°C) metal louet bouk, govelius hag orjalennus, kavet dreist-holl e stumm un oksidenn.

standur b., hollad greadoù boas un ti, ur gwazva, h.a.

stensiñ v., lakaat (un destenn, h.a.) war stensil.

stuzadur g., pezh a ster a zo d'ar gerioù, h.a., sk.: ar stuzadur zo hepken alc'houez an dozioù o skeñf war an hontger.

sterek ag., ster dezhañ, o kaout ster.

sterekted b., ar bezañ sterek, ar c'haout ster.

stuzegezh b., perzh bezañ sterek, perzh kaout ster.

staud b., en un dasparzh karrezennec, pep linenn a-hep; ko.: rez, bann.

**Notenn.-** Peurliesañ ne vez arveret staud nemet en dasparzhioù diouz teir mont an ac'honder. Notañ ar c'hlotadurioù etre ar roudoù anadennel : 1) a-saezh 2) a-dreuz 3) a-zerc'h, mentol an enor : 1) had 2) led 3) sav, an daveannoù mentoniel : 1) hadenn 2) ledenn 3) savenn, hag al linennoù dasparzhañ : 1) staud 2) rez 3) bann.

staudad b., endalc'h ur staud.

stilh g., broud metal pe danvez kalet evit skrivañ pe dresañ war an danvezioù havoulc'h, sk.: ur stilh stensiñ.

stiloù g., heulied traoù stilet; en ur greanti, stern war loc'h o tougen ur staudad oberiadoù tra ma labourer warno; sl.: a-staudad.

stlenn ag., anat, anavezot, diskleriet; g., 1) ar reiñ da c'houzout; ar reiñ keleier 2) gwazadur a zo en e gefridi reiñ da c'houzout, reiñ keleier, sk.: Maodiern gall ar Stlenn a zo ar skingomz hag ar skinwel en e zalc'h 3) (Sturoniezh) ar stlennañ; disoc'h ar stlennañ.

stlennaat v., mont pe lakaat da vont stlenn; (Sturoniezh) lakaat (udb.) e stumm stlenn.

stlennad g., pezh a ouezer db. udb.; (Sturoniezh) pezh a zo savelet dre stlennañ, elfenn anavezadur.

stlennadur g., ar stlennañ; disoc'h ar stlennañ; pezh a stlenn a zo gant udb. pe db, udb.

stlennañ v., savelañ anavezadoù (db. udb.); lakaat (udb.) o stumm stlennadoù.

stlennek ag., a zo stlenn gantañ, o tougen stlenn.

stlennekaat v., mont pe lakaat da vont stlennek.

stlenneked b., ar bezañ stlennek.

stlennegzh b., perzh bezañ stlennek.

stlennel ag., db. stlenn pe stlennañ.

stlenneg ag. & g., neb a stlenn; neb a ro da c'houzout, neb a zo keleier; neb a ro doareoù db. an dud pe an traoù, sk.: stag ouzh Maodierndi an Diabarzh ez eus ur rouedad stlennnerion kuzh pe damguzh strewet dre an diriegezh.

stlennerez b., benveg-, ijinenn-stlennañ.

stlennerezh g., obererezh, kalvezerezh stlennañ; embregerezh stlennañ.

stlennoniez b., studi hallek ar stlenn.

stlennoniezhel, stlennoniel ag., db. stlennoniez.

stlennonieur ag. & g., neb a studi ar stlennoniez.

stlennour ag. & g., 1) evel stlenneg 2) neb a zo gourdon war ar stlennouriezh, ijinour war ar binvioù stlennañ.

stlennouriezh b., studi bleustrek ar stlennañ, ar binvioù stlennañ, h.a.

strewek ag., a en em gav war-skiñ, a-strew, sk.: er Gornog er c'hontrol e van strewek ar boblañs.

strizhkefridi b., kefridi, emall dibar, arbennik.

strizhkefridiañ v., fiziout ur strizhkefridi e, arbennigañ, sk.: elfennoù-yezh dija hiniennaet, dija strizhkefridiet.

stroll g., (Kim) erc'had atom o chom dizisrann en dazgweredoù kimiek, a c'heller sellout e meur a geñver evel un elfenn, sk.: ar stroll NH<sub>4</sub>.

strollann b., bodad hiniannoù sellet evel un unvez; ko.: hinienn.

struzhpazh g., (Don) rannbarzh temenet diouzh ar struzh.

stumm g., doare egorennel udb., sk.: stumm ur c'harrez; doare dibar, darve-oudennel, degouezhat udb., sk.: kavet e vez an houarn en natur e stumm oksidennoù; (Yon) doare dibar kemeret gant distagadur pe skritur ur ger, sl.: furm 3.

stummad g., nep tra sellet diouzh e stumm; (Yon) ger, elfenn-yezh sellet diouzh e stumm.

stummadel ag., db. stummad; o tennañ d'ar stummodoù, sk.: an abegoù o tennañ da ombregadusted ar gerioù ha d'o dihañvelsounded a renker a-touezh an abegoù stummadel.

sturiad g., meneg, titour, komenn e sell eus un ober, sk.: mui ouzh mui e rank ar Stadoù reiñ o sturiadoù d'an armerzh.

sturiadañ v., reiñ sturiadoù da, sk.: an armerzh sturiadet.

sturiadour ag. & g., dalc'hiad ar sturiadouriezh.

sturiadouriezh b., kalennadurezh stadarmerzhel o reiñ d'ar Stad ar gefridi da sturiadañ an armerzh hep dilezal ar frankizouriezh.

sturvezhour ag. & g., neb a bleustr war ar sturvezhouriezh.

sturvezhourel ag., db. ar sturvezhouriezh, sk.: an abegoù diseurt a c'hell levezonañ priziadur sturvezhourel ur ger.

sturvezhouriezh b., pleustrerezh sturviañ emdreif ur yezh, sk.: e tiwan ur c'halvezerezh nevez, ar sturvezhouriezh, o lakaat he hentenoù tamm ha tamm da gemer lec'h damreolenoù ar mare ma emdros ar yezh hep rat d'he yezherion.

stuz g., doare bezañ udb. pe ub.

stuzek ag., 1) dezhañ ur stuz 2) dezhañ doare o tennañ d'ar stuz pe d'ur stuz.

stuzekaat v., mont pe lakaat da vont stuzek, sk.: stuzekaat ur stadegzh zo diorren en-dro d'ur framm-Stad ur vuhez kev an klotañ gantañ; sl.: stadekaat, destuziañ.

stuzeked b., ar bezañ stuzek.

stuzegzh b., perzh bezañ stuzek 1) perzh kaout ur stuz 2) doare o tennañ d'ar stuz pe d'ur stuz 3) hollad doareoù bezañ, bevañ, santout, maizañ, h.a. ur bobl.

Notenn.- Stuzegzh a ziforc'her diouzh stadegzh ha diouzh sevenadur.  
1. Evit an diforc'h etre stuzegzh ha stadegzh, sl.: stadegzh, Notenn.  
2. Stuzegzh ha sevenadur a ziforc'her evel-henn : an daou a sell ouzh doareoù buhez ur bobl, stuzegzh a sell outo en o dirvoud, eleze hep o meizañ evel kevreet dre ur ster diabarzh, sevenadur a sell outo en o gwirvoud, evel disoc'h ur sevenañ, evel ur mont harvez gwirioneziou, war-du paliou, eleze evel kevreet dre ur ster diabarzh.

stuzegzhel ag., db. stuzegzh.

stuzel ag., db. stuz, o tennañ d'ar stuz.

stuzeled b., ar bezañ stuzel.

stuzelezh b., perzh bezañ stuzel, sk.: azez ar stuzelezh eo ar yezh.

stuzelour ag. & g., dalc'hiad ar stuzelouriezh.

stuzelouriezh b., kelennadurezh vradoniel, diwanet en U.S.A., o tisplegañ stuz bred en hinienn dre stuzegezh ar strollenn.

sulfat g., (Kim) hal an drenkenn sulfurek; ion  $SO_4^{--}$ .

sulfat amoniom g.g.,  $((NH_4)_2SO_4)$ , hal kenderc'het dre neptuif an drenkenn sulfurek dre an amoniak, danvezet evel temz-atil.

sulfat kouevrek g.ag.,  $(CuSO_4)$ , hal kouevrek an drenkenn sulfurek; hal glas, danvezet evel diboreer hag evit distrujañ arvevaded ar plant.

sulfat natriom g.g., anv daou hal natriom an drenkenn sulfurek :

- 1) ar sulfat unnatriom pe sulfat trenkek natriom  $(NaHSO_4)$
- 2) ar sulfat divnatriom pe sulfat neptu natriom  $(Na_2SO_4)$  danvezet evel louzoù-spurjañ.

sulfhidrek, trenkenn s- b.ag., (Kim) liñvann trenkek-gwan, dileizhenn dre zour a sulfidenn hidrogen  $H_2S$ .

sulfidenn hidrogen b.g.,  $(H_2S)$  kediad sulfur hag hidrogen, aezhenn diliv, ganti c'hwez ar viou brein, nebaut dileizhadus en dour, trenkenn sulfidrek a ræer eus an dileizhenn.

sulfidenn b., (Kim) hal an drenkenn sulfhidrek; ion  $S^{--}$ .

sulfidenn blom b.g., (PbS) hal plom an drenkenn sulfhidrek a gaver en natur e stumm ar galen.

sulfid g., (Kim) hal an drenkenn sulfur, homañ anavezet hepken dre he halioù, goulakaet dezhi da zelun  $H_2SO_3$ .

sulfur g., (S; elfenn nn.16; talz Nad-atom = 32,066; douster = 2,07; teuzverk = 112°C) divetal kalet diouz ar doaroù ordinal, a gaver diged en natur pe e stumm sulfidennoù zink, houarn, h.a.

sulfurus ag., sl.: anhidridenn sulfur; trenkenn s- b.ag., (Kim) trenkenn a vefe he delun  $H_2SO_3$ , na anavezet nemet an anhidridenn hag an halioù anezhi; sl.: sulfid.

sunerez-c'houlloif b.v., ardivink arveret en arnodvaoù evit ec'haezhañ, da reizhiad dezhañ kouezhidigezh takennoù dour dre ur riboul war strishaat.

superfosfat g.; temz-atil, anezhañ ur c'hanaozad fosfat unkalkiom, trenkenn fosforek, sulfat kalkiom.

T

talud g., pennad amzer, sk.: an talud o vont eus derou ar c'henteliezh betek derou prantad studi an trede kantel.

talvoudek ag., 1) db. ul lavarenn, ur savelenn, reizh e-keñver ar pezh a zo lavaret, an devoùoù savelet 2) db. un diviz, ur gevrat, ul lezenn, o kacout gwered, o talvezout; sl.: gwiriek, Notenn.

talvoudekaet v., lakaat da vezañ talvoudek, sk.: hevelop keitad a c'hell bezañ talvoudekaet; sl.: entalvoudegañ, eztalvoudegañ.

talvoudekadur g., en talvoudekaat; disoc'h an talvoudekaat.

talvoudekadus ag., a c'hell bezañ talvoudekaat.

talvoudeket b., ar bezañ talvoudek.

talvoudegezh b., perzh bezañ talvoudek, sk.: reiñ talvoudegezh en-dro d'ur gevrat; sl.: entalvoud, eztalvoud.

taranadenn b., gwezhiad taranif, sk.: lakaomp un alienenn dreden da darzhañ etre an div ode : un daranadenn a glever.

tarzh-kellenn v.b., taol-arnod da ziskouez bezoud an aerwask, anezhañ ec'haezhañ ul lestr betek tarzhañ an tamm kellennoù ouz e staviañ.

teiratomenner g., ar bezañ teiratomennek.

teiratomennek ag., db. ur volekulenn, a zo teir atomenn ouz hec'h ober; db. ur c'horf, a zo teir atomenn oc'h ober pap hini eus he molekul.

temz-atil g., danvezenn a lakaer en douar evit e strujusaat.

tennder g., (Fiz) mentad anvet c'hoazh nerzhder regel pe gremder gorreel, atalad mentawouriezhel  $A = MT^{-2}$ ; mentann geñverek d'an tennder-mentad.

tennder-gorre g., (Fiz) mentann o verkañ tuadur gorre al liñvennoù da vihanaat; mentad a dermener evel rannad un nerzh-silluskaf dre ur regel,  $A = FL^{-1}$ , atalad mentawouriezhel  $A = MT^{-2}$ ; hv.: kendalc'henn silluskaf; sl.: nerzh-silluskaf.

teodvezh b., (Yon) stumm ma vez distaget ar yezh en ur c'horn-bro.

teodvezhel ag., (Yon) db. teodvezh.

teodvezher g., (Yon) neb a zistag ar yezh evel en ur c'horn-bro.

ter g., (Kim) rumm korfoù naturel liñval pe galet, anezho meskadoù hidrokarbidennoù, a gaver en tireoul, en asfalt, e glaoù 'zo.

terkadus ag., a c'hell bezañ terket.

terek ag., (Kim) dezhañ doare an tar; ennañ tar, sk.: antrakit e Reterpenn-silvania, glaou terek e Koznospennsilvania.

teul-kzet g.ag., paperenn o kretaat an arç'hant fiziet en ur Stad pe ur gwazadur, postet en un embregerezh, h.a.

teuliañ v., sevel un teul pe teulioù; lakaat e stumm teul pe teulioù.

teuliaoeg b., dastumad teulioù.

teulierezh g., an teuliañ; pleustrerezh teuliañ.

teulrann b., (Dil) parzh an teulverk o verkañ rann an teul, sk.: an teul-rannoù boasañ eo ar pajennoù.

teul rez g., (Dil) teul bet savet klok, dre enebadur ouzh ar re savet evit bezañ leuniet; sl.: teul-skor.

teulriñv g., (Dil) parzh an teulverk o verkañ urzh an teul er rummad merket gent ar vonrann.

teulriñvañ v., (Dil) merkañ gant un teulriñv, sk.: teulriñvet e vez an teulioù dre urzh deiziadoù o savidigezh.

teul-skor g.g., (Dil) teul da vezañ leuniet e-ser ar gwazadur; sl.: teul rez.

teulverk g., (Dil) parzh an diellverk o termenañ an teul, div elfenn ouzh e ober e-unan : an teulriñv hag an deulrann.

teulverkañ v., (Dil) merkañ gant un teulverk.

teuzforn b., forn da zanken ar metaloù war deuz.

teuzredel ag., db. an teuzredennoù, sk.: Uhelgompezenn gKolombia, da gondon dindani gwiskadoù tev bazalt teuzredel.

teuzredenn b., pallennad danvez war deuz oc'h en em ledañ.

tevion g., danvez kalet a chom e dilerc'h ul liñvenn, sk.: diaezhennañ a ra an douz hag un tevion a chom en e zilerc'h.

timbradur g., an timbrañ; disoc'h an timbrañ; pezh a dimbroù lakaet ouzh ur gasadenn.

tireouloazad g., danvezenn dezeret diouzh an tireoul, sk.: degas a ra an tireouloazadoù betek al lec'hioù-beveziñ.

tirgeant g., hent daremprediñ dre zouar; daremprederezh dre zouar.

tiriadur g., aozadur tiriegezh ur vro, sellet pe evel emdroadur istorel, pe evel taolennadur douaroniezhel, sk.: tiriadur ha pobladur.

titl g., (Fiz) meneg niverel o verkañ kenaoz un dileizhenn pe ur meskad,

prl. dre reiñ da anavezout ur feur dregantat.

titour b., pezh a roer pe a glasker da c'houzout db. ub. pe udb.; diskleriadur db. ar pezh a zo d'ober.

titouradur g., an titourañ; disoc'h an titourañ.

titourañ v., reiñ da c'houzout doareoù ub. pe udb.; reiñ diskleriadurioù db. ar pezh a zo d'ober.

titourerezh g., an titourañ; obererezh, pleustrerezh titourañ, sk.: follenn ditourerezh.

tolz delun g.g., (Kim) sammad tolzoù an Nadoù atom merket gent delun ur c'hediad kimiek, sk.: an tolz par da sammad tolzoù Nad-atom an natriom hag ar c'hlor a reer anezhañ a-wezhioù tolz delun, hogen peurliesañ en anver tolz mol ivez.

tolz mol g.g., (Kim) tolz ur mol, eleze N molekulenn eus ur c'horf pur; hv.: tolz Nad-molekul.

tolz Nad-atom g.g.as., (Kim) tolz N atomenn eus un elfenn gimiek.

tolz Nad-molekul g.g.as., sl.: tolz mol.

tonell b., unanenn ec'honad evit muzuliañ dalc'hadoù al listri-mor, par da 2,83 m<sup>3</sup>, sk.: lestraz ved 1939 a save da 68 milion tonell.

tonellad b., kementad danvez un donell ec'honad, sk.: er mare-se o deus lestrsaverezhioù Amerika moret 48 milion tonellad "Liberty Ships" ha "Victory Ships".

tonenn b., unanenn dolz, par da 1000 kg, arouez : t .

Notenn.- Diwall a gemmeskañ tonenn unanenn vetrek tolz ha tonell unanenn nanmetrek ec'honad.

tortenn b., lestr gwer, pri pe vetal gant ur gouzoug hir kromm arveret en amodoù evit ar strilhañ, an hirdommañ, h.a.

tredanare ag., (Trd) na re ket an tredan.

tredananreall b., (Trd) elfenn en ur savadell o hezral ouzh tremen an tredan.

tredananreer ag.& g., (Trd) korf na re ket an tredan.

tredananren v. -reet, (Trd) na ren an tredan; gronnañ en ur motoù anre ouzh an tredan.

tredananreüs ag., (Trd) na c'hell ket ren an tredan.

tredananreüstad b., (Trd) ar bezañ tredananreüs.

tredanforzh, tredanforzhus, tredanforzhustad, sl.: forzh, h.a.

tredanharz, tredanharzus, tredanharzusted, sl.: harz, h.a.

tredanode b., (Trd) elfenn ur rehent o soubañ an ul livvenn pe en un aezhenn;  
hv.: ode; sl.: maszode, muigde.

tredanour ag.& g., gourdon war an tredanouriezh.

tredanouriezh b., studi anadennoù an tredan.

tredanouriezhel ag., db. tredanouriezh.

tredanreoll b., (Trd) elfenn en ur savadall o ren an tredan; hv.: reoll.

tredanreor ag.& g., (Trd) korf o ren an tredan.

tredanren v.& g., (Trd) ren an tredan.

tredanreüs ag., (Trd) a c'hell ren an tredan.

tredanreüsted b., (Trd) ar bezañ tredanreüs.

trehontel ag., (Prd) db. trehontañ, sk.: er merzhout trehontel, e tiraez an emaezvoud traoù a zo er bed, eleze n'int ket a anien gantañ; sl.: enmanel.

trehontalded b., (Prd) ar bezañ trehontel.

trehontalezh b., (Prd) porzh bezañ trehontel; domani trehontel.

trehontañ v., (Prd) mont er-maez eus domani un anien; sl.: enmanañ.

Notenn.- Trehontañ ne c'hell talvezout nemet evit an domenioù a anien. Da skouer, ar maged o vont er-maez eus ar siminal ne drehont ket : e zomani eo ar bed fizikel ha menel a ra ennañ. Mar pedan avat, e trehontan, a gement ma'z eo an Doue a bedan ouzhpenn un Doue enmanus evel-reizh.

trehontus ag., (Prd) o trehontañ.

treif-koskor v.l.s.& g., tremen ar wezhourion eus ul labour d'un all, eus ur gouc'hwel d'un all, sk.: ar gudenn zo anezhi erziwezh ur gudenn a dreif-koskor (ken abred ha bremañ e kamm ar c'hoskor bep bloaz war 25 % eus ar gouc'hwelioù).

treluskaf v., (Kim) db. danvezennoù kimiek 'zo, aesaat un dazgwered hep bezañ treuzfummet gantañ.

treluskadur g., (Kim) an treluskaf; disoc'h an treluskaf.

trelusker g., (Kim) danvezenn oc'h aesaat un dazgwered hep bezañ treuzfummet gantañ, sk.: an diksidenn vangenez he deus gweradet dre he "bezañs" hepken, oc'h aesaat hag o vuanaat d'an dazgwered disoc'haf, c'hoarriet he deus enta evel trelusker.

treluskerezh g., (Kim) obererezh treluskaf.

trenkek ag., (Kim) dezhañ perzhioù trenkenn; db. an trenkennoù.

trenkegezh b., (Kim) perzhioù o verkañ an trenkennoù.

trenkenn b., (Kim) korf o reiñ ion H<sup>+</sup> dre ionaat.

Notenn.- Anavezadus eo an trenkennoù dre blaz trenk o dileizhennoù, o gwered war ar merkerioù dre liv; o renkañ a reer e trenkennoù kreff ha trenkennoù gwan diouzh derez o ionaat war-zileizh en dour.

trenkventañ v., muzuliañ feur un drenkenn war-zileizh.

trenkventer g., benveg da vuzuliañ feur un drenkenn war-zileizh.

trenkventerezh g., kalvezerezh trenkventañ.

treuzkas v.& g., (Fiz) degemer ur gwered en ul lec'h A ha diskouez an un gwered e B, sk.: treuzkas kev an ra al livvennoù, diouzh an holl roudoù, ar c'hemmoù gwask diorreet outo.

treuzkefiad g., pezh a zo treuzkefiat.

treuzkefiadur g., an treuzkefiat; disoc'h an treuzkefiat; an enkefiat-ezkefiat.

treuzkefiat v., lakaat (arc'hant) da dremen eus ur c'hef en un all.

treuzfumidigezh b., ar c'hemmañ fuzm, sk.: dazgwered kimiek a reer eus treuzfumidigezh ur reizhiad korfoù pur en ur reizhiad all a gorfoù pur.

treuzgread g., (Rzh) gread kenwerzhel, gwazadurel, h.a. oc'h emplegañ an tremen eus udb. eus ur gevrañ d'un all.

treuzlestrañ v., lakaat da dremen eus ul lestr d'un all, sk.: treuzlestrañ a c'heller an oksigen war ar gibad dour.

treuzporzhiañ v., kas eus ur porzh d'un all.

treuzporzhiadur g., an treuzporzhiañ.

treuzporzhierzh g., obererezh treuzporzhiañ, sk.: e tenn ar Stadoù-Unanet korvoadurioù uhel eus an treuzporzhierzh a reont evit kont ar rizeoù all.

treuzskrivadur g., an treuzskrivañ; disoc'h an treuzskrivañ.

treuzskrivañ v., lakaat (un destenn) da dremen eus un doare-skrivañ en un all.

trioksidenn sulfur b.g., sl.: anhidridenn sulfurek.

troc'h-red v.g., (Trd) stignadell lakaat da barzh en ur rehent evit lezel pe herzel ar red-tredan da dremen.

trust g., (Arm) kevredad kenderc'hexion unanet evit kaout en o-dalc'h kenderc'h ha kenwerzh ur varc'hadourezh.

tuaf v., lakaat a-gostez; db. kahenterezh, lakaat ur c'harr a-sav er-maez eus ar ruilherez.

tudelezh b., bodad tud, ensavadur anavezet dezhañ gwirioù, dleadoù.

tuellenn drezer b.ag., benveg arnodva, anezhañ ur gorzenn wer pennet gant un trezer, hemañ serrat en e draoù gant ur c'hog.

tuenn b., riblenn an hent terket evit ar c'hirri en arsav.

tuennañ v., lakaat ur c'harr war an duenn.

tulec'h g., leurenn derket evit tuañ ar c'hirri; hv.: leurenn-arsaviñ.

tulec'hiañ v., lakaat ur c'harr en tulec'h.

tuva g., tachenn derket evit tuañ ar c'hirri.

U

uhelder g., derc'hhod diouzh live ar mor.

uhelvan g., sl.: gwaskuhelvan.

uhelventañ v., muzuliañ an uhelder.

uhelventer g., benveg da vuzuliañ an uhelder.

uhelventerezh g., kalvezerezh uhelventañ.

uhelwask ag., bras ar gwask ennañ; g., gwask bras e-keñver gwaskoù all.

unatomenner g., (Kim) ar bezañ unatomennek.

unatomennek ag., (Kim) db. ur volekulenn, a zo un atomenn hepken ouzh hec'h ober; db. ur c'horf, a zo un atomenn hepken oc'h ober pep hini eus e volekul.

unkalkiom ag., (Kim) un atomenn galkiom en e volekulenn, sk.: fosfat unkalkiom.

unklotennek ag., (Lzh) dezhañ an hevelep klotenn; dezho an un klotenn.

unkrefvder ag., dezhañ an hevelep krefvder, sk.: unkrefvder eo evit an holl listri an nerzh diorreet ouzh o deun; dezho an un krefvder, sk.: unkrefv-

der eo an daou nerzh F ha F'.

undibonnglotennek ag., (Lzh) dezhañ an hevelep klotenn-dibenn, sk.: ur varzhoneg undibonnglotennek; dezho an un klotenn-dibenn, sk.: undibenn-glotennek eo er peder gwerzenn gentañ.

ungenezh ag., a zo anezhañ pe ennañ elfennoù a un natur hepken.

ungenezhiek ag., evel ungenezh; dezhañ ar perzh bezañ ungenezh.

ungerel ag., (Syr) db. ur ger hepken, sk.: kevazaster an dec'heriad ouzh e zec'heriad a reer ungerel pe lakaer e penn-kont ur ger hepken.

ungorread ag., dezhañ an hevelep gorread, pe ur gorread digemm, sk.: ungorread e van ar vrizhenn war ar skramm e-pad an taol-arnod; dezho an un gorread, sk.: daou lestr ungorread an deunioù anezho.

uniañ v., (Fiz) genel un atomenn nevez ponnez diwar div pe lies atomenn skañv dre gonstrobaf o derc'hanoù; sl.: skiriañ, gwezderc'hanel.

uniedigezh b., (Fiz) oberidigezh uniañ.

unnatriom ag., (Kim) un atomenn natriom en e volekulenn, sk.: sulfat unnatriom pe sulfat trenkek natriom.

unneuz ag., dezhañ an hevelep neuz; dezho an un neuz.

unneuzded b., ar bezañ unneuz.

unneuziañ v., reiñ an un neuz da, sk.: drezañ e vez skignet an "american way of live" hag unneuziet kedvuhez ar Stadoù-Unanet.

unpezh ag., stag e doare d'ober ur pezh hepken, sk.: ar bladenn haloc'h T zo unpezh gant ar ribouler R.

unsav ag., dezhañ an hevelep sav, un sav digemm; dezho an un sav.

unsoniadek ag., (Yon) 1) enno an un soniad 2) ennañ ur soniad hepken.

untolz ag., dezhañ an hevelep tolz, un tolz digemm; dezho an un tolz.

unvan ag., (Kim) db. un danvezenn, o tiskouez d'an imbourc'h bezañ ur seurt rannigoù hepken ouzh hec'h ober; ko.: dizunvan.

unvanded b., ar bezañ unvan.

unwerzhad ag., dezhañ an hevelep gwerzhad, ur werzhad digemm, sk.: an deun o vezañ a-zramm, ez eo unwerzhad ar gwask e pep poant anezhañ; dezho an un gwerzhad.

W

war-zileizh ag. & rv., er stad dileizhet, sk.: an danvezennoù war-zileizh an deour naturel.

+++++

war-zileizh



